



**HAL**  
open science

# Ar c'hensonennoù rotek e Bro-Gwened Izel, Sanadur hag emdroadur en XXvet kantved

Maël Graignic

► **To cite this version:**

Maël Graignic. Ar c'hensonennoù rotek e Bro-Gwened Izel, Sanadur hag emdroadur en XXvet kantved. Linguistics. 2022. dumas-04203701

**HAL Id: dumas-04203701**

**<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-04203701>**

Submitted on 11 Sep 2023

**HAL** is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0  
International License

SKOL-VEUR ROAZHON II  
RANN AR BREZHONEG

**AR C'HENSONENNOÙ ROTEK E BRO-GWENED IZEL**  
**SANADUR HAG EMDROADUR EN XX<sup>vet</sup> KANTVED**

Koun-skrid kanniget get  
Maël GRAIGNIC  
Master 2 – Klaskerezh

Renet get Stefan MOAL  
Mestr-prezegenner yezh ha sevenadur Breizh

Miz Mezheven 2022

## **Trugarekaat**

Da ma fried Sylvia evit he souten hag he alioù,

D'ar vrezhonegourion o deus bet degemeret ma goulennoù,

Ha da razh an dud o deus bet sikouret genin a-benn kas ar raktres-mañ da benn vat.

## TAOLENN AR PENNADOÙ

<b>Digoradur</b> .....	p.5
<b>I – Metodologiezh</b> .....	p.6
A – Termeniñ Bro Gwened Izel.....	p.6
B- Geriaouerezh ha steroniezh.....	p.8
CH – Standilhoniñ.....	p.9
C'H – Dastum.....	p.12
D – Dielfenniñ.....	p.13
E – Bevennoù ar studiadenn.....	p.16
<b>II- Sanadur ar c'hensonennoù rotek e Europa ar c'hornôg</b> .....	p.18
A- Labourat get <i>Soundcomparison</i> .....	p.18
B – Keñveriiñ kensonennoù rotek Europa ar c'hornôg.....	p.20
<b>III- Sanadur ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg hrevez ar lennegezh</b> .....	p.22
A – un daolenn liessort.....	p.22
B – Savboent ar vrezhonegourion.....	p.31
CH - Kensonennoù rotek Bro-Gwened Izel en <i>Nouvel Atlas Linguistique de Basse-Bretagne</i> .....	p.35
C'H – Diverradenn an displegadennoù.....	p.38
<b>IV – Sanadur ar c'hensonennoù rotek e Bro-Gwened Izel</b> .....	p.41
A – Hollad an alofonennoù diliamm ha klokaus.....	p.41
B – Degouezh ha degouezh .....	p.44
<b>V- Emdroadur ar c'hensonennoù rotek e Bro-Gwened Izel</b> .....	p.51
A – A barrez da barrez.....	p.51
B – Emdroadur hollad an alofonennoù.....	p.56
CH – Emdroadur an /r/ kentañ.....	p.57
C'H – Kensonennoù rotek mutet .....	p.62

D – Ar ger <i>graet</i> .....	p.72
E – Sanadur ar c'houlpad /rh/ .....	p.77
F – Kemmesk /r/ ha /h/, pe kensonennoù mouezhiet ha divouezh.....	p.88
<b>VI – An diglosiezh e Bro-Gwened Izel.....</b>	<b>p.93</b>
A – Emdroadur ar mouezhiekadur .....	p.93
B – Diforc'h a-zoc'h ar sanadur gallek.....	p.94
CH – Levezon ar galleg.....	p.101
<b>Klozadur .....</b>	<b>p.103</b>

## DIGORADUR

E pesort mod e vez sanet an /r/ e brezhoneg ? Sort goulenn a ziskoueza bout ean. Ha newazh e vehe luziet a-walc'h respont hep un hak. Rak an den a yahe da denniñ bro dre Vreizh-Izel a verchahe buan he arlivioù stank a-fet sanadur. Get Piv ? E men ? E pesort degouezh ? Rekis-mat e vehe strishaat ar goulenn, betek monet dre haniennoù, sur a-walc'h. Kar doc'h ar gomzourion e kavahec'h kemmoù er sanadur etre breuder ha c'hoarezed zoken<sup>1</sup>. Liessort ivez displegadennoù ar vrezhonegourion o-unan : an eil a lâray « ne vez ket roulet an /r/ er Vro Pourlet » pa seblantay d'egile bout klevet « re gozh » doc'h er gober<sup>2</sup>. Ha pep unan da venegiñ ur skouer a-du get e vennozh. Ha ne vehe ket graet get kanour-mañ-kanour ? « Ya, pa gana, mes pas a pa gaozea »<sup>3</sup>. Stank an arguzennoù a bep tu hag amsklaer ken-ha-ken en diwezh. Ec'hon ar brezhonegva ivez, ha ken ec'hon an diforc'hoù a lec'h da lec'h moarhat. An dra-se a zo kaoz e vo tolpet hon evezh àr ar brezhoneg kaozeet e Bro-Gwened Izel, ha keñveriiñ ar sanadur klevet get ar gomzourion bet ganet enni ha/pe é chom enni. Kement-se get ar pal termeniñ ha kompren sanadur ar c'hensonennoù rotek hag o emdroadur e-pad an XX<sup>vet</sup> kantved e Bro-Gwened Izel. Da grogiñ geti e vo keñveriet sanadur an /r/ brezhonek doc'h ar yezhoù amezek e kornôg Europa ; goude-se e tielfennimp an displegadennoù degaset er lennegezh vrezhonek – da lâret eo e-barzh geriadurioù, yezhadurioù pe levrioù digor d'ur publik ledan ; da drivet e tapimp harp àr un 38 komzour bennak da zielfenniñ sanadur an /r/ gete àr un dro dielfenniñ o sanadur doc'h o oad ha parrez genidik. Peadra da veiziñ gwell penaos e vez – pe/hag e veze – sanet ar c'hensonennoù rotek en tachad-se. Peogwir emañ aet ar brezhoneg àr emdroiñ e-kerzh an XX<sup>vet</sup> kantved<sup>4</sup> e vo klasket lakaat abegoù ha dilerc'hioù ar cheñchamantoù-mañ àr-wel ivez.

---

1 « En effet, dans une famille il arrive qu'un homme utilise les r uvulaires et sa soeur les r alveolaires uniquement, alors qu'ils ont a peu pres le meme age et ont vecu dans le meme secteur. Il ne s'agit donc pas simplement d'une question de generation ni d'origine geographique : une etude approfondie s'impose donc », CHEVEAU Loïc, *Le r fort initial en breton*. Colloque Actualité de la recherche sur le breton et les langues celtiques - Rencontre de jeunes chercheurs, Juin 2011, Paris, France. (halshs-00626022), p.6.

2 Divizoù bet klevet genomp-ni.

3 BU1971 en deus displeget deomp e veze « roulet an /r/ » dre ganal get Yann-Fañch Kemener, mes pas dre gomzal, d'e soñj. Àr an dro en deus soñj ag ur voereb dezhoñ a roule an /r/ ivez, mes digenvez anezhi e-keñver restad ar familh hrevez-heñv. Atersadenn kaset d'an 20/12/2021 e Bubri.

4 LE PIPEC Erwan, *Les trois ruptures sociolinguistiques du breton*. International Journal of the Sociology of Language, 2013

## I – Metodologiezh

Er pennad-mañ e termenimp an tiriad hag ar brezhoneg bet studiet, mont en-dro ar labour standilhoniñ, dastum ha dielfenniñ ha bevennoù ar studiadenn.

### A - Termeniñ Bro-Gwened Izel

Evit a sella an tiriad buket emañ Bro Gwened-Izel ur rannvro a Vro Gwened, er reter anezhi àr un ahel etre kêr an Oriant ha kêr ar Gemene<sup>1</sup>. Stag eo er reter doc'h Bro-Gernev, get stêr an Ele ; ha doc'h Bro-Gwened Uhel er c'hornôg, get ar Blavezh. Ar Skorv a reda en he c'hreiz, a Laoulan d'an Oriant<sup>2</sup>. Rannet eo e daou baou bras : Bro an Oriant er c'hreisteiz ; ar Vro Pourlet en hanternoz. Evit Enez Groe, na bout e Bro-Gwened Izel ivez, n'eo ket bet ebarzhet er studiadenn-mañ. Kement-se dre m'emañ stankoc'h ar vrezhonegourion en daou baou arall en deiz a hiriv<sup>3</sup> hag aesoc'h neuze lakaat ar gaoz àr ar yezh kempred fed a emdroadur. En eskemm e veze 9% a vrezhonegourion Breizh é chom e pastell-bro an Oriant he-unan e 2018, da lâret eo àr-dro 18 800 den<sup>4</sup>.

18 kumun a ya da c'hober Bro an Oriant : An Oriant, Plañvour, Gwidel, an Arvor, Kewenn, Lann-ar-Stêr, Yestael, Pouskorn<sup>5</sup>, Kleger, Kaodan, Zinzag-Lokrist, Redene, an Arzhanaou, Gwelegouarc'h, Ploue, Lovedan, Kelan. Hag 20 evit ar Vro Pourlet : An Ignel, Bubri, Mêlann, Berne, Kernasenn, Sant-Karadeg, an Ignol, Persken, ar Gemene, Lokmac'hloù, Prizieg, ar C'hroesti, Pleurdud, Sant-Tual, Laoulan, Seglian, Plourae, Leskoed-Gwareg, Melioneg, Silfiég. Kumunioù ' zo a c'hella bout darn doc'hte e paou-mañ-paou, just-èl Henbont treuzet he ziriad get ar Blavezh, pe Pelann ivez, a zo he bourc'h er Vro Pourlet hag he maezoù er C'host-ar-c'hoad.

---

1 LE DÛ Jean, *La birpartition de la langue bretonne : quelques questions sur la zone vannetaise*, CRBC, Brest, 2003 : « On connaît bien la particularité de la zone qu'on désigne sous le nom de basvannetais ou vannetais occidental. Située entre le cours de l'Ellé et celui du Scorff, avec en plus une bande de quelques kilomètres le long de la rive gauche du Scorff, elle a pour axe la ligne Lorient-Guéméné-sur-Scorff »

2 Herri ar Borgn a ra « brezhoneg ar Skorv » ag ar parlant-mañ. gw. AR BORGN Herri, *brezhoneg ar Skorv, trésors parlés du val de Scorff*, Montroulez, Skol Vreizh, 2011.

3 E pennad « Spered ar Vro » an 20.06.2019 get an Télégramme, e c'heller lenn ne chome ket mui 'met daou vrezhonegour àr an enezenn da-neuze, bet desket àr an oad o-daou. Marvet unan anezhe, José Calloc'h, d'an 21/02/2020.

4 BROUDIC Fañch, WAKEFORD Pascale, *Les langues de Bretagne ; Enquête sociolinguistique*, TMO Régions, 2018.

5 « Pont-Skorv », stumm lec'hel

Evit ar gomzourion bet dielfennet ha studiet o sanadur emaint genidik ag ar parrezioù da heul : An Oriant, Plañvour, Gwidel, Lann-ar-Stêr, Zinzag, An Arzhanaou, Kaodan, Kleger, Ploue, an Ignel, Bubri, Berne, Mêlann, an Ignol, Persken, Laoulan, Prizieg, Seglian. Tri c'homzour n'int ket bet ganet er vro, evite emañ bet tennet kont ag o annezlec'hoù : ar Gemene, Persken hag an Ignel. Kumun Zinzag-Lokrist a vez rannet ent-hengounel kenetre teir farrez : Lokrist tost doc'h Henbont, Zinzag en tu arall d'ar Blavezh, ha Penc'hesten pelloc'h en douaroù. Diàr tri den genidik a gumun Zinzag-Lokrist, daou anezhe a za a barrez Penc'hesten (PEN1921 ha PEN1935) hag unan a vaezoù Zinzag (LV1958). Brudet e oa Lokrist evit he « luzin », ar govelioù lec'h ma veze stankoc'h implij ar galleg evit er maezoù tro-distro<sup>1</sup>.



*Kartenn 1 : Bro Gwened Izel hag he c'humunioù*

<sup>1</sup> Hrevez atersadenn PEN1935 hag enrolladenn PEN1921.



## B- Geriaouerezh ha steroniezh

Un nebeud gerioù arbennik a c'hellomp termeniñ amañ a-benn aesaat da gompren ar labour hag an arguzenniñ er studiadenn-mañ :

- **Degouezh /BrB/, /KrB/...** : ar ger degouezh a gavod implijet da c'hober dave doc'h an darempred etre fonemoù, ha d'ar liesañ etre alofonennoù an /r/ ha bogalennoù (B) pe kensonennoù (K). An degouezh /BrB/ a zo par d'an /r/ etre div vogalenn hag an degouezh /KrB/ d'an /r/ àr-lerc'h ur gensonenn hag e-raok ur vogalenn.
- **Kensonennoù logig** : ar c'hensonennoù logig a ra dave da razh ar sanadurioù graet er logig get beg an teod a-benn ezteurel an /r/. Meur a soniad a gaver er rummad kensonennoù-mañ : ar gensonenn logig dre strakal, an hani dre fraoñval, an hani dre dostaat, da skouer.
- **Kensonennoù hugenn** : ar c'hensonennoù hugenn a ra dave da razh ar sanadurioù graet get kein an teod ha strishadur an hugenn a-benn ezteurel an /r/. Gellout a raont bout dre daravat pe dre fraoñval.
- **Kensonenn rotek** : ar gaoz-mañ a ra dave d'an /r/ ha da razh e alofonennoù.
- **Nevezvrezhonegour** : ar ger-mañ a ra dave d'ar rummad brezhonegourion bet desket brezhoneg gete àr an oad pe/ha get ar galleg da yezh-dave. Lies e vez kaoz a nevezvrezhonegourion adal troc'h an treuzkas er familhoù, ha savet un enebadur etre brezhonegourion hengounel ha nevezvrezhonegourion<sup>1</sup>.
- **Rotadur** : ar rotadur a ra dave d'ar fed da erlerc'hiiñ ur fonem get ur gensonenn rotek, èl a c'helled kavout e latin pe e brezhoneg Bro-Gwened get ar /z/ é vonet da /r/ er ger *fazi* da skouer.
- **Rummad** : ar ger rummad a gavod implijet evit gober dave doc'h strolladoù komzourion hrevez o blez ganedigezh : ar rummad 1892-1918 é vout hollad ar vrezhonegourion ganet etre ar blez 1892 hag ar blez 1918 a-barzh hor standilhon. Mes kavout a reod ar memes ger evit ur rummad kensonennoù ivez, da skouer : rummad ar c'hensonennoù logig enebet doc'h kani ar c'hensonennoù hugenn.
- **Ruzennoù** : ar ruzennoù a zo kensonennoù dre daravat anezhe, èl ar gensonenn hugenn dre daravat a c'heller gober ar ruzenn hugenn anezhi da skouer.

---

1 Gwelet : LE PIPEC Erwan, 2013, op. cit.

- **Stumm bihanaet ha stumm dispis** : an daou c'her-mañ a gasa d'an hevelep anadenn saniñ. Kaoz a vez a-barzh amañ ag ur fonem hanter-sanet, pe sanet a-zarn. Liammet eo kentoc'h doc'h an distagiñ hag un diover a nerzh doc'htoñ.

Erfin e ranker diwall doc'h implji ha ster *sanadur* ha *distagadur*. Ar sanadur é vout liammet doc'h ar fonem eztaolet hag an distagadur doc'h ar striv graet d'en ezteurel.

## CH - Standilhoniñ

38 komzour a ya da c'hober ar standilhon bet tapet harp àrnezhoñ da studial sanadur hag emdroadur ar c'hensonennoù rotek e Bro-Gwened Izel. Ganet int razh etre ar blez 1892 ha 1997, strewet dre 24 farrez etre tout (lec'hoù ganedigezh hag annezlec'hoù). Diàr an 38 enrolladenn bet graet gete, 4 a zae a lec'hienn Dastum, 19 a oa bet savet get Radio Bro Gwened, 14 bet savet genomp hag 1 tennet ag un dastumad prevez. An enrolladennoù a zo kaozadennoù un euriad anezhe evit ar lod brasañ.

Doc'h disoc'h an dielfennadeg eh eus bet renket ar gomzourion e tri strollad diazezet àr o deiziad ganedigezh ; ar strollad kentañ é vout ar re bet ganet etre 1892 ha 1918, an eil strollad é vout ar re bet ganet etre 1919 ha 1943 hag an drivet strollad ar re bet ganet etre 1944 ha 1997. Get pep strollad eh eus elfennoù boutin a-fet yezh, a vo resisaet er pennadoù deveret. Da bep komzour eh eus ur marilh savet get pennlizherennoù ar barrez c'henidik hag ar blezad ganedigezh. Setu-amañ ur renabl anezhe :

### 1. Strollad kentañ : 1892-1918, ar re bet ganet e-raok pe e-pad ar Brezel Bras.

Marilh	Micher	Parrez c'henidik	Annezlec'h
AH1892	Labourer-douar	An Arzhanaou	An Arzhanaou
GW1893	Labourer-douar / Chartour	Gwidel	Gwidel
AI1895		An Ignel	An Ignel
AI1896	Krampouezhourez	An Ignel	Kaodan
BU1896	Kannerez	Bubri	Bubri
LL1900	Melinourez	Laoulan	Laoulan

PZ1902		Prizieg	Prizieg
PA1902	Moraer, labourer-douar	Plañvour	Plañvour
AH1904	Labourerez-douar	An Arzhanaou	Ploue
AIO1905	Labourer-douar	An Ignol	An Ignol
BU1907	Labourerez-douar	Bubri	An Ignel
PSK1907-01	Labourerez-douar	Persken	Persken
PSK1907-02	Melinour	Persken	Pouskorn
B1911	Sezonourez	Berne	Ar Gemene
ML1914		Mêlann	Kernasenn
P1914	Labourerez-douar	Ploue	An Ignel
O1918	Liorzhour, archer	An Orient	Plañvour

Razh komzourion ar strollad-mañ a zo bet ganet ha chomet da vevañ e Bro-Gwened Izel. 8 gwaz ha 9 maouez a zo anezhe. An hanter anezhe a laboura an douar. Evit an titouroù a ra diouer e c'heller o c'hlokaat ur sort :

- AI1895 a zo bet en arme hag er Brezel Bras ha marvet eo e 1992 da 97 vlez, en e barrez c'henidik.
- PZ1902 a zo dimezet get un den ag ar memes parrez mes a oa e dud a Langoned. Labourizion-douar anezhe.
- ML1914 en deus graet studioù ar brezhoneg hag ar saozneg. Un den desket a oa anezhoñ, gouest da sevel skridoù e brezhoneg ha tapet ur vestroniezh getoñ. Marvet eo e 2010.

## 2. Eil strollad, 1919-1943 : ar re bet ganet etre an daou vrezel betek 1943.

AI1919	Plomer	An Ignel	Bubri
PEN1921	Labourerez-douar	Penc'hesten (Zinzag)	Saint-Jili (Henbont)
AH1921	Labourerez-douar	An Arzhanaou	Kelan
PSK1923	Mañsoner	Persken	Persken
AI1923	Labourerez-douar	An Ignel	An Ignel
KL1929	Archer	Kleger	Kleger
AIO1931	Karrouer, micherour	An Ignol	An Ignol
KD1933	Koñversour	Kaodan	Kaodan

S1934	Labourer-douar	Seglian	Seglian
PEN1935	Labourerez-douar	Penc'hesten (Zinzag)	An Ignel
B1935	Labourerez-douar	Berne	Ploue
AI1937	Labourerez-douar	An Ignel	An Ignel
S1943	Labourerez-douar	Seglian	Seglian

Diàr an 13 komzour eh eus 6 gwaz ha 7 maouez. Razh emaint brezhonegourion a-vihanik anezhe, nemet S1943 he deus disklêriet bout desket brezhoneg àr-lerc'h bout dimezet get S1934. Komzal a ra ur brezhoneg flour ha stag doc'h he bro, hañval doc'h kani he gwaz. Dindan 9 blez e c'heller goulakaat e oa aet an treuzkas àr zigreskiñ e tiadoù Seglian moarhat. Ar blez 1943 a ziskoueza bout ur blezad troc'h en treuzkas rak n'eus ket mui a vrezhonegourion a-vihanik er standilhon adal neuze<sup>1</sup>.

### 3. Trivet strollad, 1944-1997 : ar re bet ganet àr-lerc'h an Eil Brezel Bed pe en achumant anezhoñ.

AIO1944	Micherour/Ijinour	Kaodan	An Ignol
G1952	Skolaer, troour		Ar Gemene
LV1958	Micherour	Zinzag	Lovedan
AI1966	Kelenour		An Ignel
BU1971	Kelenour	Bubri	Bubri
PSK1980	Kazetenour, Kalvez		Persken
LS1989	Kelenour	Lann-ar-Stêr	Henbont
P1997	Krampouezhour	Ploue	Ploue

Get an drivet strollad-mañ eh eus ur cheñchamant gennad heverk : labourer-douar erbet, ha tud uheloc'h o live-studi (3 c'helenour hag ur skolaer diàr an 8 den). Evit ar lec'hoù orin a ra diouer :

- G1952 a zo ganet e Bro-Varok, bet é chom e meur a rannvro a Frañs, daet d'ar Gemene e 1980 ha desket brezhoneg getoñ d'an termen-mañ. Troour eo a-vicher goude bout bet skolaer : kaozeal a ra meur a yezh (7 a-c'hwel).
- AI1966 a zo ganet e kreisteiz Bro-Frañs, daet da chom e Bro-Gwened Izel troioù ar

<sup>1</sup> Ur brezhonegour arall a Vêrand ganet er blez 1943 en deus lâret deomp bout desket brezhoneg get e vamm-gozh dre ma ne veze kaozeet nemet galleg er gêr doc'htoñ get e dud.

blez 2000. Kaozeal a ra meur a yezh ivez (7 a-c'hwel), gouezeleg Iwerzhon ha Skos en o zouesk.

- PSK1980 a zo ganet e reter Bro-Frañs. Daet eo da chom e Breizh evit e studioù ha desket brezhoneg er Skol-Veur da gentañ. Ur wezh kavet loñjeris e Persken en deus en em lakaet da zeskiñ brezhoneg ar vro dre atersiñ brezhonegourion a-vihanik, etre traoù arall.

Ar gomzourion arall o deus-holl ur liamm a-vihanik get ar brezhoneg komzet en o farrez pe er vro a-c'hwel. Da verchiñ a zo LS1989 hag a zo bet desavet e brezhoneg get e dud o doa desket brezhoneg àr an oad o-daou. Hrevez-heñv n'en deus ket soñj bout desket brezhoneg na galleg get ar c'hempred ma oa. Razh komzourion ar rummad-mañ o dez – pe o deus bet – tro da gaozeal brezhoneg get brezhonegourion an eil rummad, pe zoken ar rummad kentañ.

## **C'H- Dastum**

Evit ar 14 komzour bet enrollet genomp emañ bet kaset an atersadennoù er memes mod. Kuit da levezoniñ sanadur ar c'hensonennoù rotek eh omp chomet hep diskuilhiñ pal ar studiadenn, ha lakaet eo bet ar gaoz àr o buhez. Razh an atersadennoù enrollet o deus bet padet àr-dro un euriad, e ti ar gomzourion d'ar liesañ. E dibenn an atersadenn eh eus bet lakaet ar gaoz àr emdroadur ar brezhoneg hag àr sanadur an /r/, dreist-holl get rummad an nevezvrezhonegourion dre m'emaint emskiantoc'h ag o mod da saniñ<sup>1</sup>. Lod ag ar gomzourion a oa anavet genomp e-raok an atersadenn, ha merchet eh eus bet ur cheñchamant sanadur a-grenn get unan doc'hte : G1952. Kustum e vez da vonet get kensonennoù logig en e vuhez pemdez mes e-pad an enrolladenn emañ aet get kensonennoù hugenn. Da daolenniñ e sanadur boas eh eus bet tapet harp àr un atersadenn arall getoñ, ha tennet kont anezhe o-div en diwezh. Get LV1958 eh eus bet tapet harp àr un atersadenn arall doc'hpenn an hani-ni ivez a-benn kaout muioc'h a zanvez da zielfenniñ.

Evit ar gomzourion enrollet get Radio Bro Gwened emañ bet tennet an arroudennoù a abadennoù *Kreiz-Mintin* kaset get Monique ar Boulc'h etre ar blez 1989 hag ar blez 1999.

---

1 Goulakadenn-ni, doc'h an divizoù hag an atersadennoù bet kaset.

[nɔʝjɑ.n] / bremañ [brɛmɑ] / berped [bɛpɛt] / avañsetoc'h [avɑ.sɛ.tɔx] / bihan [ˈbiɑ.n] / dre-mañ [drɛ.mɑ] / a laboure [ˈlabu.ɛ] / an arar [ən.ɑ.ɛ.ɛ] / roñsed [rɔ̃sɛt] / ar-lerc'h [alɛx] / ar brezel [brɛzɛl] / prenet [ˈpɛnɛt] / trakteuriou [tʁaktœʝjɔ] / 'rall [ʁal] / aesoc'h [ɛsɔx] / labourat [lɑ] / roñsed [rɔ̃sɛt] / kar [kɑ] / repliet [ʁɔplɛt] / an Oriant [ɔ] / base sous-marine [bɑ] / lec'h rall [lɛ.ʁal] / o c'hamioniou [o.ʁamjɔ.nɔ] / a-drefiv [ɑ] / pelloc'h [x] / incendiaire [ɛsɑdjɛ.ɛ] / razh [ʁɑz] / 01:35 brezel [bɛ] / tier nevez [tɛ] / makisared [ˈmakiza.ɛt] / surtout [sɔ] / Kerbleiz [kɛ] / a-dreist [ad.ɛjst] / ar Skorv aze [kɔ.v.ɑ.zɛ] / graet [gɔ.ɛjst] / ar an hentoùier [ɑ.nɛntɔjɛ.ɛ] / da warn [dɑ] / arne [ɑ.ɛ] / lazhet [h] / o c'hanonou [h] / a-zoc'h [x] / bourc'h [bu.ɛ] / refujiéed [ˈʁɛfjɛ.ɛjɛt] / lâret [la.ɛt] / peogwir [pɛgɔjɛ] / marse [ma.ɛsɛ] / ar c'hlocher [ɛ.ɣlɔʁɛ] / da droc'hiñ [dɑ.dɔʁ.ɛhɛn] / lâre [lɑ] / 02:41 kartennoù [ˈkɑ.tɛ.nɔ] / ar re-se [ɛsɛsɛ] / ar vourc'h [vɔ.ɣvɔx] / doc'h ar c'hloche [dɔ.ɣlɔʁɛ] / ar-lerc'h [alɛx] / he ' gouezhe [gɔɛ] / kourt [ku.ɛt] / graet [gɔ.ɛt] / filochard [fɛ] / ba'r c'hourt [ba.ɣu.ɛt] / ur c'hi [o.hi] / lazhet [h] / doc'htu [dɔ.ɣtu] / arru [ɑ.ɛj] / tri [tɛj] / seizh pe eizh vlez [sɛz.pɛ.ɛ.vlɛ] / ba'r skol [bɑ.ɛskɔ.l] / ar-lerc'h [alɛ.ɛ] / ar-lerc'h [alɛx] / frered [fɛ.ɛ.ɛt] / graet [gɔ.ɛt] / hent ar justis [hɛn] / certificat d'études [sɛ.ɛtɪfika] / an Oriant [nɔʝjɑ.n] / en-dro [ɛn.dɔ] / pevar-ha-hanterkant [pɛ.vɑ.ɛ.ɑ.tɛ.ɛ.kɑ.t] / d'ar rejimant [ɛ] / a-zoc'h [x] / Afrique du Nord [ɑ.ɛfɛ.ɣdɔ.nɔ.ɛ] / lec'h [lɛ.ɣ] / Plañvour [p] / d'ar gêr [dɛ.ɛ.ɛ.ɛ] / kemeret [kɛ.mɛ.ɛ.ɛt] / en-dro [ɛ] / oto-karr [ɔ] / gare routière [gɑ] / ba'n Oriant [nɔʝjɑ.ɛ] / ur vaouez [vɑ.vɔɛ.s] / lâret din [la.ɛtɛn] / c'hwec'h miz [ɣɛx] / brezel [bɛ] / pevar blez [pɛ.vɑ.ɛ] / pevar miz [pɛ.vɑ.ɛ] / arn-ugent [ɑ.ɛ.nydʒɛn] / liberet [lɛ.ɛ.ɛt] / ar-lerc'h [x] / d'ar gêr [dɛ.ɛ.ɛ.ɛ] / ur sort [o.sɔ.ɛt] / ur wezh [h] / diregtamant [dɛ.ɛ.ɛ.ɛ.tɑ.mɑ.n] / muioc'h evit [mɔjɔ.ɛ.ɛ] / ar re 'rall [ɛ.ɛ.ɛ.ɛ] / oa ret deomp [wa.ɛtɑm] / gortoz [gɔ.ɛ.tas] / an traoù [tɛ.ɔ] / ur c'hamarad [ɑ.ɛ.ɛ.ɛ.ɛ] / Jean Marrec [mɑ.ɛ.ɛ.ɛ] / graet [gɔ.ɛjst] / anezhoñ [ɑ.nɛ.ɛ.ɛ] / arme [ɑ] /

*Labour dielfenniñ 1 : Darn a dreuzskrivadur KD1933*

**D - Dielfenniñ**

Evit pep unan eh eus bet klasket ar memes titouroù diazez : anv, lec'h ha blezad ganedigezh, lec'h an enrolliñ, oad da vare an enrolliñ, anv an atersour, micher. Pa oa posubl eh eus bet resisaet anv ha micher ar gerent, ar studioù bet graet, ar mod hag an termen ma oa bet desket brezhoneg (a-vihanik, er skol, ar an oad...) hag ar yezhoù komzet. Resisadennoù haniennel a zo bet savet a pa oa afer doc'hete, just-èl flourded ar yezh pe an diforc'h a sanadur hrevez ar c'henarroud, pe c'hoazh an diforc'h a sanadur etre galleg ha brezhoneg. Kement-se da gompren get pesort rummad (sokial, oad...) e c'hellahe donet sanadur-mañ-sanadur.

1	Anv
2	Berradur (lec'h ganedigezh + blezad ganedigezh)
3	Lec'h ganedigezh
4	Blezad ganedigezh
5	Lec'h an enrolliñ
6	Oad da vare an enrolliñ
7	Deiziad ar marv
8	Labour an dud
9	Gennad (kentañ, eil, trivet)
10	Studioù
11	Micher
12	Gennad (kentañ, eil, trivet)
13	Breudeur / c'hoarezed
14	Dimezet
15	Brezhoneg er gêr
16	treuzkaset brezhoneg d'ar vugale
17	Yezhoù arall kaozeet
18	Deskot brezhoneg (a-vihanik...)
19	Brezhoneg flour ?
20	Atersour/ez
21	Sanadur dishañval e galleg / brezhoneg

*Labour dielfenniñ 2 :Titouroù diazez*

PEN1935
Penc'hesten
1935
An Ignel
86 (e c'hwevrer 2022)
Labourizion-douar
Kentañ
Sertifikad
Labourerez-douar
Kentañ
pemp breur ha c'hoar
Ya
Ya
Pas
Galleg
A-vihanik
Flour
Mael Graignic
Pas

*Labour dielfenniñ 3 :Titouroù diazez PEN1935*

Evit pep enrolladenn eh eus bet treuzskrivet kement kaoz bet klevet ar fonem /r/ enni get ar LFE<sup>1</sup>, àr-bad un arroudenñ etre 15 ha 30 minutenn. A-wezhadoù n'eo ket bet treuzskrivet ar ger en e bezh er LFE, nemet ar gensonenn rotek bet klevet genomp ; an dra-se ' zo kaoz e vez treuzskrivadurioù diglok e taolennoù ' zo èl : « *lâret* » [r] get BU1896. Ne dalva ket amañ e vez sanet ar ger « *lâret* » get ar fonem /r/ ha tra-ken èl-rezon, mes hag e vez sanet [r] an /r/ en degouezh /BrB/ get ar skouer-mañ. N'eus ket nemet get AH1892 ha GW1893 emañ berroc'h an arroudennoù tennet a lec'hienn *Dastum* anezhe. Mes akuitapl hon eus bet kavet tenniñ kont anezhe ur sort, abalamour d'o blezad ganedigezh ha d'o annezlec'h. Pa rae diover un enrolladenn a ditouroù n'eo ket bet ebarzhet en disoc'hoù, kuit d'o levezoniñ. Un eil selaouadenn ha dielfennadenn a zo bet graet evit an arroudennoù a-benn ingaliñ an treuzskrivadurioù fonetik rak mizioù a oa bet etre ar re gentañ bet dielfennet hag ar re ziwezhañ, ha pishoc'h an treuzskrivadur get ar skiant-prenet moarhat. Doc'hpenn sanadur ar c'hensonennoù rotek eh eus bet merchet genomp kani an alofonennoù a goucha doc'h an /h/ reizhskrivet *c'h*, *zh* pe *h* e brezhoneg, en arbenn ma vënt kemmesket get an /r/ get komzourion ' zo hag e degouezhioù ' zo. E mod-se hon eus gallet studial sanadur ar c'houlpad /rh/ ivez.

D
[r]
[p] : re uhel [ʁe] / [r] : ret din [ʁætɛn]
D'ar liesañ : lec'h [le ɛ]
lâret deoc'h [laʁə ˈtɔx], pouinner [pone:r], d'ar froñ [frɔ̃], ma servij [mə.zɛrvij]
re uhel [ʁe], ba-raok [ʁo:k], àr-raok [r], Fort [fɔʁ], d'ar froñ [dʁɔ̃]
hanter [hɑ̃tɛʁ], lâret [la:ʁɛt], unan 'rall [ynɔ̃n.ʁɛl], ar blez [aː.ble], an tranchées [ʁɑ̃.ʃe], trois [tʁwa]
ret din [ʁætɛn], régiment [ʁɛʒimɑ̃]
ma raok [mə.ʁok], roc'h [rɔx], ar re-se [aːʁɛzə]
ajournet [ˈaju.ʁnɛ]
pesort [pəsɔʁt], àr ho penn [aː.u.ˈpɛn], ur c'henderv [o.hɑ̃dɛʁv]
graet [gwejt], prisonnier de guerre [pʁizonje.də.gɛː]
berped [bɛʁpɛt]
Ya : quatre [kat], kilomètres [kilomɛ:t]

*Labour dielfenniñ 4 : Kael ar c'hensonennoù rotek bet klevet a-c'hwel ur wezh e pep degouezh get AH1895*

1 Lizherenneg Fonetik Etrebroadel

Merchet eh eus bet genomp ur meni enebiezh etre implij ar c'hensonennoù hugenn ha kani ar c'hensonennoù logig. Dre-se eh eus bet savet an dielfennadenn àr ar c'hemm-mañ da lakaat emdroadur ar sanadur àr-wel, etre traoù arall. Diverret e vez « rummad ar c'hensonennoù hugenn » get « rummad an [ʁ] » ha « rummad ar c'hensonennoù logig » get « rummad an [r] » dre ma vez anezhe an daou fonem a za ar stankañ er rummadoù-se.

Notennet eo bet bep taol ar sanadur en degouezhioù, da lâret eo hrevez plas an /r/ er ger. Pemp degouezh a zo bet studiet : /rB/, /Br/, /BrB/, /KrB/ ha /BrK/. Da skouer get AI1895 : *re* [ʁe], *pounner* [pone:r], *lâret deoc'h* [laʁə'tɔx], *froñ* [frɔ̃] ha *ma servij* [mə.zɛrvij]. Ur skouer a zo bet notennet evit kement alofonenn bet klevet e kement degouezh ' zo. Gober a raomp get an droienn « sanadur stankañ », da lâret eo an alofonenn a za ar stankañ àr sammad an holl zegouezhioù dre geidenn ha dre hanienn. Get skouer AI1895 emañ ar gensonenn logig dre strakal mouezhiet [r] a zo bet lakaet da sanadur stankañ. Bep taol eh eus bet notennet ar sanadur stankañ en degouezh /rB/, graet /r/ kentañ genomp. Evit AI1895 emañ ar c'hensonennoù logig dre fraoñval ha dre strakal divouezh [r̥] ha [r̄]. Doc'hpenn kement-se eh eus bet notennet an degouezh /Kr/ dibenn pe /Kl/ dibenn, mut e brezhoneg doc'hreizh, mes hag a zo bet daet get daou nevezvrezhonegour ur sort. Get lod ag ar gomzourion emañ mut an /r/ e unan ag ar pemp degouezh meneget : *berped* [bɛpət] evit AI1895 c'hoazh. Kaoz a vez neuze a vutadur. An hevelep labour a zo bet graet get arlivoù an /h/.

lec'h [le:ʁ]
a-barzh [bax], muioc'h [x], àr-lerc'h [aʁlɛx]
c'hoazh [waʁ]
hennezh [hinɛx], da c'houlou-deiz [də.hul'di], buhez [byhe]
c'hoazh [ˈwax], d'an hani [dɛnˈɑ̃ ni]
hennezh [inɛʁ]

*Labour dielfenniñ 5 : Kael alofonennoù an /h/ get AI1895*



Un nebeut kaozoù skouer a zo bet notennet plaen pa veze moiand : *a (h)ra, graet, bremañ, netra, petra, bihan* hag *ur sort*. Keñveriet eo bet o sanadur a zen da zen hag a rummad da rummad ha dielfennet an disoc'hoù da verchiñ hag un emdroadur bennak a vehe. Get ar ger *graet* dreist-holl eh eus bet kavet sanadurioù dibar.

me 'rae [r]
graet [geʔ], [gʔe]
bremañ [bəmã]
netra [nite]
petra [pøtɛ]
ur sort [soʔt], [soʔ]

*Labour dielfenniñ 6 : Ar c'haozoù skouer get PSK1907-01*

## E - Bevennoù ar studiadenn

### 1. Treuzskrivniñ ar soniadoù

Graet eh eus bet get ar Lizherenneg Fonetik Etrebroadel da dreuzskrivniñ ar fonemoù bet klevet genomp. Tapet hon eus harp àr labour ar glaskourion meneget er levr-lennadur, ha pa zae douetañs deomp hon eus tapet harp àr ar lec'hienn *Interactive IPA Chart*<sup>1</sup>. Daoustoc'h deomp bout klasket treuzskrivniñ ar soniadoù pervezh e ranker derc'hel soñj e c'hellahe bout sius pe diglok renabl an alofonennoù. Anat eo e c'hella bout levezonet treuzskrivadurioù ' zo get hor skiant-prenet hag hor sanadur-ni ivez. Dre-se e ranka disoc'h ar studiadenn-mañ bout keñveriet doc'h ar labourioù arall àr brezhoneg Bro-Gwened Izel ha sanadur ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg.

Evit ar fonemoù [χ] ha [ɣ] e roa Loïc Cheveau deomp da ouiet e c'hella bout skrivet an daou da dalviñ d'ar memes fonem : « les gens qui utilisent les prononciations uvulaires emploieront généralement le son [χ] (qu'on peut écrire [ɣ]) pour la forme sourde »<sup>2</sup>. Gwir eo e vez ur ruzenn hugenn divouezh ag an daou dreuzskrivadur-se, mes genomp-ni eh eus bet savet un diforc'h etreze o-daou ur sort : [χ] é talviñ da vuioc'h a nerzh hag a badelezh evit [ɣ]. Get-se e c'heller en em gavout get komzourion a zay [ɣ] dezhe mes pas [χ].

1 ISOTALO Peter, UCLA Phonetics Lab Archive, lec'hienn internet dijabl er chomlec'h-mañ : <https://www.ipachart.com/>, 2003

2 CHEVEAU Loïc, 2011, op. cit., p.6

Evit an alofonennoù [ʁ] ha [ʃ] emaint bet strollet genomp plaen ha talviñ a raont o-daou d'ur gensonenn hugenn -pe gargadenn- dre dostaat dispis. Moiant a vehe monet pelloc'h er resisted é c'hober get ar ruzenn hugenn dre dostaat [ʁ] hag ar ruzenn c'hargadenn [ʃ], mouezhiet pe divouezh. Dreist-holl evit dielfenniñ pishoc'h ar sanadurioù hugenn ha gargadenn. Kement-se a c'hellahe bout danvez ur studiadenn arall.

## 2. Standilhon

Diazezet eo disoc'hoù ar studiadenn àr dielfennadenn enrolladennoù un 38 komzour bennak. Evit parrezioù 'zo e vez oc'hpenn 5 komzour àr-hed ur c'hantved (an Ignel) mes evit parrezioù arall n'eus ket nemet ur c'homzour (Mêlann, Prizieg...). Anat eo ne dalva ket an disoc'hoù da skouer d'o farrez na d'o rummad en o fezh. Pal ar standilhon a zo brastresiñ tuadur ar sanadur àr tiriad Bro-Gwened Izel er c'hantved tremenet. Posubl e vehe kas studiadennoù pishoc'h parrez-ha-parrez just-èl bet resisaet c'hoazh. Da ziwall 'zo get an enrolladennoù ivez : sanadur ar gomzourion a c'hella cheñch hrevez ar c'henarroud ha ne vez ket arouezius un arroudenn a sanadur an den en e vuhez-pad moarhat. Da vare atersadenn G1952 genomp, e 2021, en deus graet get kensonennoù hugenn hag ur brezhoneg a c'heller lakaat da « standard » : *brezhoneg* [bʁezð:nɛk], da skouer. Kontrel d'ar pezh hor boa klevet getoñ meur a wezh e divizoù prevez betek-hen. En un atersadenn arall kaset get RBG<sup>1</sup> e 2015 e ra muioc'h get kensonennoù dre strakal hag ur c'heriaoueg lec'heloc'h : *berton* [bœrtõ] evit ar memes kaoz, da skouer. Dre sammiñ an div enrolladenn hor beus dielfennet e vrezhoneg en diwezh.

---

1 Radio Bro Gwened

## II - Sanadur ar c'hensonennoù rotek e Europa ar c'hornôg

### A- Labourat get *Soundcomparison*

Evit gellout meiziñ sanadur hag emdroadur ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg Bro-Gwened Izel e ranker teurel ur sell doc'h o sanadur e restad ar brezhonegva ha, pelloc'h c'hoazh, er yezhoù amezek e Europa. Tapet eh eus bet harp àr ar lec'hienn *Soundcomparison*<sup>1</sup>, raktres bet savet get Paul Heggarty ha Jakob Runge ag ar *Max Planck Institute* e Munich, evit keñveriiñ yezhoù Europa ar c'hornôg doc'h ar brezhoneg. Un daolenn a zo bet savet èl-se diàr enrolladennoù *Soundcomparison* ; renablet eh eus bet un 13 alofonenn bennak bet treuzskrivet evit ar fonem /r/. A-bouez eo resisaat eh eus un treuzskrivadur fonetik doc'hpenn un enrolladenn stag doc'h kement arroudenn ' zo àr ar lec'hienn.

Evit ar brezhoneg eh eus bet kavet genomp e oa sius lod ag an treuzskrivadurioù newazh. Da skouer : evit ar ger “pevar” lec'hiet e Purin-Kintin eh eus treuzskrivet [pe:r] get ur gensonenn logig dre fraoñval mouezhiet mes klevet a raer ur gensonenn hugenn dre daravat mouezhiet [ɛ] kentoc'h, a gredomp. Tennet hon eus kont ag ar pezh hon eus klevet -ha reizhet-get ar memes aked èl get ar standilhon dielfennet genomp e Bro-Gwened Izel. An dra-se ' zo kaoz ne gaver ket ar fonem [r] e brezhoneg en daolenn savet genomp daoustoc'h dezhoñ bout gwelet àr ar lec'hienn. Daoustoc'h da gement-se eh eus bet fiziet en treuzskrivadurioù savet evit ar yezhoù arall get ar skipailh arbennigourion ; ar pal é vout kaout ur soñj a-vras ag ar rummadoù kensonennoù rotek stag doc'h yezhoù Europa er stummoù komzet anezhe. Da lâret eo distag a-zoc'h an treuzskrivadurioù hengounel a c'hella bout sius, èl a vo gwelet er pennad « sanadur hrevez ar lennegezh vrezhonek » evit ar brezhoneg.

Da verchiñ a zo n'eus ket bet ebarzhet skouer erbet a vrezhoneg Bro-Gwened Izel<sup>2</sup> àr ar lec'hienn. Mes unnek arroudenn a gaver evit ar brezhoneg ur sort<sup>3</sup> get kement-arall a gomzourion strewet kenetre ar peder bro hengounel : Leon, Treger, Kernev ha Gwened. Roll ar gerioù treuzskrivet a c'hella mont ag un dek bennak betek ur c'hant bennak hrevez ar yezhoù hag ar gomzourion. Bep taol eh eus bet tennet kont a gement ger get ur gensonenn

---


1 HEGGARTY Paul & RUNGE Jakob, *Sound Comparisons: Exploring Diversity in Phonetics across Language Families*. Max Planck Institute, Munich, 2019. (Dijabl en-linenn amañ : <https://soundcomparisons.com>)

2 Betek ar weladenn ziwezhañ, d'ar 04/09/2022

3 Daouzek d'ar 04/09/2022

rotek banezhon er pemzek yezh renablet, da lâret eo : brezhoneg, kembraeg, gouezeleg Iwerzhon, gouezeleg Bro Skos, galleg (standard Pariz), gallaoueg, spagnoleg (standard Burgos), galisianeg, portugaleg, italianeg (standard Toskana), Korseg, Alamaneg (Berlin), izelvroeg, deneg, saozneg (standard Londrez). Evit ar re ha n'eo ket resisaet ar standard etre krommelloù eh eus bet tennet kont ag ar rannyezhoù niverus kanniget, peotramant ag an arlivoù a gomzour da gomzour, dre ziover.

Setu-amañ daou dapadur-skramm evit ar brezhoneg :



Soundcomparison 1: Kartenn Breizh àr Soundcomparison evit ar ger "pevar"

Vann.: Carnac ← previous next → Vann.: Brech (skr 2)

### Vannetais (haut): Brech (speaker 1)

one	two	three	four	five	six	seven	eight	nine	ten	hundred
[œnã]	[deɤ]	[tɹaj]	[pʰɔɤ]	[pʰɤm]	[ɥeãx]	[seãx]	[eãx]	[na-ɔ]	[dek]	[kã]
full	young	tongue	wind...	salt	grain	name				
[lã-]	[jã-ŋkʰ]	[ˈzjaʊ]	[--]	[ɸˈlɛn]	[gɥã-]	[na-n]				

Soundcomparison 2: Skouer a roll ar gerioù treuzskrivet evit ur c'homzour : Brech (speaker 1)

## B – Keñveriñ kensonennoù rotek Europa ar c'hornôg

Da ziwall a zo rak n'eo ket savet an daolenn-mañ nemet àr ur standilhonig : etre dek ha daou-ugent ger evit pep yezh, hag evit pep yezh eh eus tennet kont a razh ar gomzourion renablet er lec'hienn betek miz Mae 2022, 11 komzour evit ar brezhoneg da skouer.

Yezh / fonem	[ɣ]	[ʝ]	[ʀ]	[r]	[r̥]	[r̄]	[r̄̃]	[r̄̃̃]	[r̄̃̃̃]	[x]	[ʔ]	[ɛ̃]	[ĩ]
<b>Brezhoneg</b>	■	■	■										
<b>Kembraeg</b>				■		■	■	■	■			■	
<b>Gouzeleg Iwerzhon</b>				■		■		■	■			■	■
<b>Gouezeleg Bro Skos</b>				■	■	■		■	■			■	
<b>Galleg</b>	■									■			
<b>Gallaoueg</b>						■							
<b>Spagnoleg</b>				■		■							
<b>Galisianeg</b>				■	■	■							
<b>Portugaleg</b>	■					■	■			■			
<b>Italianeg</b>						■	■	■	■				
<b>Korseg</b>				■		■	■						
<b>Alamaneg</b>	■	■											
<b>Izelvroeg</b>	■	■	■			■		■	■				
<b>Deneg</b>	■	■				■				■	■		
<b>Saozneg</b>								■					

Da gentañ e c'heller gwelet e tiskoueza bout digenvez ar brezhoneg e-keñver ar yezhoù keltiek arall dre ma ne vehe ket fonem boutin erbet gete. Un enebiezh a za àr-wel etre ar brezhoneg get e gensonennoù hugenn doc'h un tu, ha kembraeg, gouzeleg Iwerzhon ha gouezeleg Bro-Skos doc'h an tu arall get kensonennoù logig, staon ha rak-staon dezhe. Evit ar ruzenn rak-staon divouezh [ɛ̃] e ta àr-wel get an teir yezh keltiek-mañ hepken ha n'eo ket bet treuzskrivet e restad ar yezhoù renablet. Diàr gement-se e c'heller soñjal eh eus ur fonem keltiek anezhoñ.

Ar gensonenn hugenn dre daravat [ɣ], daet ar stankañ e brezhoneg, a c'heller he c'havout ivez get ar galleg, ar portugaleg hag an teir yezh c'herman tapet da skouer (izelvroeg,

alamaneg, deneg). Ne za ket newazh get yezh roman arall erbet na get ar yezhoù keltiek arall naket. Hañval get ar ruzenn hugenn divouezh [χ], a za get ar galleg, ar portugaleg hag an deneg hepken. Mes evit ar portugaleg, na bout dibar e-keñver ar yezhoù roman arall, eh eus getoñ fonemoù boutin gete-razh : ar gensonenn logig dre strakal mouezhiet [r] ha divouezh [ʀ]. Pezh ne gaver ket e galleg, hag a ra dezhoñ bout dishañval a-zoc'h peurrest ar yezhoù roman ; kement hag ar brezhoneg a-zoc'h ar yezhoù keltiek ivez. Doc'hpenn kement-se eh eus alofonennoù klokaus ag ar ruzennoù hugenn mouezhiet ha divouezh e portugaleg, pezh n'eo ket gwir evit ar galleg da skouer.

Evit an alofonenn a za ar stankañ get razh ar yezhoù dre Europa ar c'hornôg e tiskoueza bout ar gensonenn logig dre strakal mouezhiet [r]. Betek bout ar gensonenn nemeti bet treuzskrivet evit ar gallaoueg, pezh er lakaa doc'h tu restad ar yezhoù roman arall, àrbouez ar galleg. Rak n'eus ket ag ar gensonenn logig dre strakal get ar brezhoneg, ar galleg, an alamaneg hag ar saozneg a-barzh amañ. Da resisaat, eh eus bet tapet da skouer ar stummoù lakaet da reoliek evit an teir yezh diwezhañ-mañ. Dre-se e ta nebeutoc'h a arlivioù evit er yezhoù arall moarhat rak n'eus ket 'met ur c'homzour dave dezhe. Ar saozneg a vehe e mod-se ar yezh get an nebeutañ a liessorted fonetikel àr un dro get ar gallaoueg : netra nemet ar gensonenn logig dre dostaat [ɹ] hrevez an dailh. Evit an italianeg eh eus bet tapet skouer ur standard, kani Toskana, diàr tri kanniget. Doc'hpenn an tri standard renablet eh eus e-leizh a rannyezhoù hag a arlivioù e Bro Italia : netra nemet àr lec'hienn *Soundcomparison* e kaver 50 komzour ha kement a argemm yezh 'gozik lâret. Estroc'h a zo evit ar c'hensonennoù renablet en daolenn a-us e Bro Italia : e Lombardia ar c'hornog en em gaver get ar gensonenn logig dre fraoñval [r], er ger [grʷɛ:n] (granenn) da skouer. Hag e kêr Bologna e kaver ar gensonenn hugenn dre fraoñval [R] er memes ger [grɹ:n]. An div skouer-mañ é vout e lodenn norzh ar vro, peadra da reiñ deomp da veiziñ pegen liessort eo sanadur ar c'hensonennoù rotek dre yezhoù Europa doc'hpenn o standardoù.

Dre sellet doc'h an disoc'hoù-mañ e vercher penaos e vehe tostoc'h fonologiezh ar brezhoneg doc'h kani an izelvroeg evit doc'h kani ar c'hembraeg, evit a sella sanadur an /r/ atav. Durc'haet e tiskoueza bout galleg ha brezhoneg doc'h ar yezhoù german, digenvez o-div en o familh yezh neuze. Ha newazh e ranker sellet a-dostoc'h doc'hte a-benn soñtilaat an disoc'hoù-mañ, èl bet diskouezet get an italianeg da skouer.

### **III - Sanadur ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg hrevez ar lennegezh**

Klasket eh eus bet genomp an daveennoù doc'h sanadur ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg e geriadurioù brezhonek, yezhadurioù brezhonek, dornlevrioù brezhonek pe gallek a-zivout ar brezhoneg. Kement-se get ar pal renabliñ an displegadennoù roet banezhe ha brastresiñ savboent ar lennegezh vrezhonek àr an divout-mañ.

#### **A – Un daolenn liessort**

Buan eh eus bet merchet genomp ar liessorted a stummoù dishañval -enebet meur a wezh- diàr-benn sanadur ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg. Tapet e vo harp àr ar renabloù amañ-dindan a-benn dielfenniñ an displegadennoù a c'heller kavout àr o divout ha gwelet mar koucha doc'h disoc'h *Soundcomparison* ha dielfennadenn ar standilhon e Bro-Gwened Izel genomp. Meur a rummad levrioù a zo ha lod anezhe a c'hella bout strollet rak degas a raont displegadennoù hañval pe damhañval àr sanadur an /r/ e brezhoneg.

#### **1. Ar memes sanadur e galleg hag e brezhoneg**

Amañ-dindan e vo gwelet an oberennoù a roa deomp da ouiet e vehe hañval ar sanadur e galleg hag e brezhoneg :

- **DE ROSTRENEN Grégoire, *Dictionnaire françois-celtique ou françois-breton, Julien Vatar, imprimeur-libraire. Rennes, 1732. p.14*** :« L'r. des Latins & des François».
- **GUILLEVIC A. & LE GOFF P., *Grammaire bretonne – du dialecte de Vannes, Vannes, librairie Lafolye Frères, 1902.*** Ar pennad àr sanadur ar brezhoneg ne venega ket an /r/ nemet : « sous la réserve des observations qui vont suivre, les consonnes se prononcent en breton comme en français. », p.4. Da welet penaos e veze sanet an /r/ e galleg d'an termen-se rak n'eo ket bet resisaet amañ. En eil embannadur (1912) e adkaver ar memes pennad a-zivout ar sanadur, ha n'eus ket bet oc'hpennet meneg erbet àr an /r/. Mes klokaet eo an digoradur get un displegadenn àr an

diforc'hioù etre gwenedeg-izel ha gwenedeg-uhel, adal ar bajenn XV.

- **HERRIEU Loeiz, *Le breton usuel – dialecte de Vannes, Dihunamb, an Oriant, 1934, p.10*** : « Sauf les exceptions suivantes, les Consonnes se prononcent comme dans le français. G est toujours dur : il n'a jamais le son du j. S est dur également. Le son doux de l's est figuré par z : Gir, mot (prononcer comme guir dans guirlande) ; brasoh, plus grand (pron. comme s'il y avait deux s) ». N'eus ket meneg erbet ag an /r/ amañ naket, da lâret eo e vehe-heñv sanet èl e galleg.
- **GROS Jules, *Le trésor du breton parlé / dictionnaire breton-français des expressions figurées, Emgleo Breiz – Brud Nevez, 1989. p.8*** : « b, ch, d, gn, j, k, l, m, n, p, r, t, v, z comme en français. H ou c'h, à la fin des mots, comme le ch allemand dans nach : mais au début et au milieu d'un mot comme un h fortement aspiré ». An /r/ a vez lakaet da vout sanet èl e galleg amañ ivez, hep ne vehe resisaet penaos e vez sanet e galleg.
- **HEMON Roparz, & HUON Ronan, *Dictionnaire breton/français, français/breton, Al Liamm, 2005, p.5*** : « les lettres en breton se prononcent comme en français [...] ». Nemedennoù a vez meneget mes pas evit an /r/.
- **KERVELLA Divi, *Guide conversation breton de poche, Assimil, 2011*** : « la prononciation du breton ne présente pas de grandes difficultés pour le francophone, notez toutefois les points suivants [...] ». Meneg erbet ag an /r/ mes dre ma tisplega ne zelea ket bout diaes d'ur gallegour e c'houlakaomp e vehe ag an hevelep fonemoù. Ur resisadenn a za get an «c'h» ur sort : «c'h : son guttural qui correspond à l'allemand *ch* ou au castillan *j*. Moins fort entre deux voyelles. [...] »
- **LEON Katell & AUVRIGNON Maud, *Help ! Mon enfant parle breton, Le Temps Editeur / An Amzer embanner, 2018*** : « nous avons choisi de vous donner un petit éclairage sur la prononciation des sons qui ne sont pas identiques en français et en breton ». N'eus ket pennad erbet gloestret d'an /r/ nemet ur meneg e pennad ar « c'h » / « rc'h », lakaet a-gevret : « en fin de mot, il se prononce un peu comme la jota espagnole (j) ou le (ch) en allemand [...]. Pour les autres places dans le mot, on peut généraliser la prononciation de cette consonne à un /h/ aspiré. ».

Er seizh oberenn renablet amañ a-us e roer da ouiet da Yann deskard e vehe hañval sanadur an /r/ e galleg èl e brezhoneg, pezh a goucha doc'h disoc'h ar geñveriadenn etre ar



yezhoù europat. Pezh ' zo, ne vez ket displeget gete pesort sanadur a vez e galleg naket. Hag etre Gregor Rostrenn e 1732 ha Katell Leon e 2018 e c'heller goulakaat emañ aet ar sanadur gallek àr emdroiñ kement èl an hani brezhonek. Evit Gregor Rostrenn, ar meneg koshañ bet kavet genomp é c'hober meneg da sanadur an /r/, eh eus strollet ar sanadur latin -pe roman-hag ar sanadur gallek. Pezh a c'hellahe kas d'ar c'hensonennoù logig pa seller doc'h sanadur ar yezhoù roman kempred. Ha get Katell Leon e ta ur resisadenn a-bouez : « Faites bien attention à ne pas prononcer le « c'h » comme un « r », ça peut porter à confusion »<sup>1</sup> é tegas skouer an diforc'h etre *moc'h bihan* ha *mor bihan* mes hep displegiñ neuze penaos distagiñ an /r/, nemet dont en-dro àr an arroudenn gentañ a alie chom get sanadur ar galleg. Hogen diskoueziñ a ra ar gensonenn bout hugennel neuze dre ma vez tostoc'h lec'h saniñ [χ] pe [h] doc'h [ʁ] evit mand eo doc'h [r] da skouer. Dre-se e c'heller soñjal e vehe bet kenstur emdroadur an div yezh a-fet sanadur ar c'hensonennoù rotek é loc'hiñ diàr ur sanadur hañval doc'h kani ar latin hag ar yezhoù roman arall evit monet da gensonennoù hugenn er XXIañ c'hantved.

E pennad «prononciation du breton» an hentenn *Ni a gomz brezhoneg* get Mark Kerrain<sup>2</sup> ne gaver ket meneg erbet ag ar soniad /r/ nemet : « En écoutant l'enregistrement vous pourrez constater que la prononciation de certains mots varie selon les loucteurs ». N'eo ket a soniadoù a vez kaoz amañ mes a c'herioù hepken. Ar gensonenn hugenn dre daravat [ʁ] eo a za plaen get kement komzour enrollet evit-doare, pezh a ya a-du get ar sanadurioù renablet betek-hen a gaver e galleg ivez. Get *Yezhadur bras ar brezhoneg*<sup>3</sup> e taolenna Frañsez Kervella implij an div alofonenn [ʁ] ha [R], p.18 : « [...] ma enka ar c'hourlañchenn e vez kensonennoù gourlañchenn (H, R), ma tosta kein an teod ouzh adreñv ar staon : kensonennoù korzailhenn ( C'H, NG, R)» ha resissat er bajenn 25 : «R a vez risklet gant tud 'zo (ur gensonenn c'hourlañchenn eo neuze, da dostaat ouzh H) ha rollet gant tud all (ur gensonenn-gorzailhenn da dostaat ouzh C'H eo neuze)». Kaoz a vez amañ ag ar gensonenn hugenn dre fraoñval. An div alofonenn-mañ a gaver e galleg kempred kement èl e brezhoneg neuze<sup>4</sup>.

1 LEON Katell & AUVRIGNON Maud, 2018, op. cit.

2 KERRAIN Mark, *Ni a gomz brezhoneg*, 2e édition revue et augmentée, Ti Embann ar Skolioù, 2007, p.7.

3 KERVELLA Frañsez, *Yezhadur bras ar brezhoneg*, Al Liamm, Brest, 1995

4 MORVAN Danièle, *Le Robert, dictionnaire pratique de la langue française*, éditions France Loisirs, Paris, 2002, p.1847.

## 2. Ag ar c'hensonennoù logig d'ar c'hensonennoù hugenn

E meur a oberenn e raer dave doc'h emdroadur ar sanadur brezhonek :

- **KERVELLA Divi, *Assimil, le breton / brezhoneg, collection sans peine, Chennevières-sur-Marne, 2005, p.XII*** : « la prononciation du **r** varie beaucoup suivant les régions. La prononciation « roulée » tend (malheureusement) à régresser. Il n'y a aucun inconvénient à prononcer avec un **r** "parisien". »
- **AR MERSER Andreo, *Ar Geriadur, dictionnaire breton-français / français-breton, Emgleo Breiz, 2009. p.457*** : « Le breton que l'on parle aujourd'hui est sûrement différent de celui qu'on parlait au début du XX<sup>e</sup> siècle : c'est ce que les sociolinguistes appellent la variation linguistique ». P.464 : « **l, ll, n, nn, r, rr** fonctionnent comme en français ». P.465 : « c'h représente le *ch* allemand dans *nach* ou le *j* de l'espagnol. C'est un son extrêmement rare . On le retrouve épisodiquement après **r** et **l** [...] » (enebet eo c'h doc'h h). P. 467 : « le **r** n'est pas prononcé dans les mots se terminant par le groupe *tr* [...] Par contre le **r** réapparaît dans les dérivés. », « Les mots en *bl, br* et *kl* : le **l** et le **r** ne s'entendent généralement pas [...] ».
- **DAVALAN Nikolaz, *Brezhoneg / méthode de breton / hentenn ouplan 1, Skol an Emsav, 2017, p.6*** « le <r> se prononce désormais [ʁ] (comme <r> en français moderne dans *reggae*). Le [r] (*r* roulé) est délaissé. » da skouer : « GRAS [ˈgʁas]».
- **RAYNAUDON-KERZERHO Maiwenn, *Kenavo ? Petites choses amusantes et étonnantes sur la langue bretonne et les Bretons !, éditions Blanc & Noir, 2020, p.64*** : « Autrefois, on roulait les *r*. Impossible de les confondre donc avec le *c'h*. »
- **MADEG Mikael, *Glossaire Molénais / Brezhoneg Molenez, aperçu du breton de Molène, An Alarc'h Embannadurioù, 2021. p.11*** « Aspects linguistiques de la francisation. [...] Il y a abandon progressif des sons du breton qui, soit n'existent pas en français, soit sont articulés différemment. Tel le degré d'ouverture des voyelles qui finit par s'aligner sur celui du français. Les [r] non citadins sont abandonnés. Ce qu'on note *c'h* (ou *h*) en breton, consonnes inconnues du français, est remplacé par des [r], le son français qui s'en rapproche le plus».

Nikolaz Davalan a ra dave d'ar gensonenn logig dre frañval a vehe aet maez an implij

hag a lakaa ar gensonenn hugenn dre daravat da sanadur boas. Andreo ar Merser a zisplega e vehe dishañval ar brezhoneg kempred (2009) doc'h an hani a veze komzet e penn kentañ an XX<sup>vet</sup> kantved, e-raok lâret eh a an /r/ en-dro èl e galleg ivez. Maiwenn Raynaudon-Kerzerho a skriva e veze «roulet» an /r/ gwezharall, pezh a ziskoulmahe an dalc'h a za get kemmesk an /r/ hag an /h/ get an deskidi. An emdroadur-mañ meneget ivez get Mikael Madeg a zahe diâr levezon ar galleg hrevez-heñv. Gober a ra newazh get an treuzskrivadur fonetik [r], da lâret eo ar gensonenn logig dre fraoñval ha ne gaver ket e galleg kempred. Sevel a ra-heñv un enebadur etre /r/ ar c'hêrioù, hañval doc'h ar sanadur gallek kempred, hag /r/ ar maezoù. Evitoñ-diwezhañ e komprenner e vehe kaoz ag ur gensonenn logig.

Doc'h an arroudenn tennet ag ar pemp oberenn meneget amañ a-us e c'houlakaer e vehe bet ag ar gensonenn logig dre fraoñval [r] e brezhoneg e-raok pe e penn kentañ an XX<sup>vet</sup> kantved. Ha hi aet tamm-ha-tamm da gensonenn hugenn dre daravat [ʀ] dre levezon ar galleg e-kerzh an hevelep kantved. Meur a alofonenn arall a c'heller kavout e oberennoù arall newazh, peadra da arliviñ ar c'houlakadenn-se.

### 3. Meur a sanadur d'ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg

- **FAVEREAU Francis, *Geriadur ar brezhoneg a-vremañ, brezhoneg / galleg, galleg / brezhoneg, Dictionnaire du breton contemporain bilingue, Skol Vreizh, 1992* :** « la prononciation proposée, les prononciations devrais-je dire, sont les plus authentiques et les moins « normalisées » possible [...] [r] ruz (& diverses variantes [R], [ʀ]...) »
- **FAVEREAU Francis, *Geriadurig ar brezhoneg a-vremañ, Skol Vreizh, 2001, p.8* :** « [r] ruz (& diverses variantes [R], [ʀ]) ».
- **MÉNARD Martial, *Geriadur brezhoneg an Here, An Here, 2001* :** « daoust ma'z eus meur a zoare reizh da zistagañ ar brezhoneg, ez eus klasket reiñ un distagadur hepken evit pep pennger, un distagadur diazezet war reolennoù a dalvez evit an holl seurtoù brezhoneg komzet pe evit un darn vras anezho [...] En oberenn-mañ en em gaver neuze gant doareioù treuzskrivañ zo tostoc'h d'ar pezh eur boas da gavout en oberennoù all, geriadurioù pe hentennoù deskiñ. », p.XIX. « Distaget e vez an « r » zo e gerioù evel « ran », « beradenn », « park » pe « gwir » e doareoù disheñvel hervez al lec'h hag ar remziadoù. Klevet e vez [r], [ɹ], [R] ha [ʀ]. An distagadur henvoazel [r] a

glever alies a-walc'h c'hoazh e Leon hag e Treger dreist-holl ma'z eo an distagadur boas. E lec'h all e tistager [ʀ] ha, dreist-holl, [ʁ]. Bez' eo an daou zistagadur-se ivez zo boaziet gant ar remziadoù yaouank pe etre. En oberenn-mañ eo bet treuzskrivet an « r » gant [r], evel ma'z eur boas d'ober en treuzskrivadurioù brezhonek. Mat e vefe d'al lennerien delc'her soñj e reer gant meur a zoare « r » e gwirionez ».

- **FAVEREAU Francis, *Geriadur godell ar brezhoneg a-vremañ, dictionnaire de poche du breton contemporain*, Skol Vreizh, Montroulez, 2017 :** « [r] ruz (& diverses variantes [R], [r]...) »
- **CHEVEAU Loig, *Nouvelle grammaire bretonne du dialecte de Vannes – vannetais standard*, éditions label LN, 2017 :** Cheveau a venega sanadur an « r » èl-mañ : « se prononce roulé à l'italienne, ou bien comme en français (cela dépend des régions, de l'âge des locuteurs, etc.) » (p.19) ha menegiñ [la:ret] pe [la:ʁet].

Meur a c'heriadur a zo bet savet get Francis Favereau ha get ar memes pennad e ra banezhe kotibus, é tegas un displegadenn oc'hpenn en e *Dictionnaire du breton contemporain bilingue* : «les prononciations [...] les plus authentiques et les moins « normalisées » possible»<sup>1</sup>, é klask daveiñ d'ar brezhoneg komzet neuze. Ar gensonenn logig dre fraoñval [r] eo a za kentañ hag a za en-dro plaen en treuzskrivadurioù fonetik getoñ. Memes ma venega fonemoù arall : «[R], [r]...», ur gensonenn hugenn hag unan logig divouezh a-barzh amañ da skouer. Amresisoc'h eo an displegadenn roet get Loig Cheveau, a ra ur c'hemm etre «roulé à l'italienne» ha «comme en français». Doc'h ar pezh a zo bet meneget genomp é tapout harp àr *Soundcomparison* e c'hella «roulé à l'italienne» kas da veur a sanadur dishañval : [r], [r], [ʀ], [ʁ] a-c'hwel. Evit ar sanadur gallek e c'houlakaomp e vehe kaoz amañ ag ar gensonenn hugenn dre daravat mouezhiet [ʁ] daoustoc'h da stummoù arall dont àr-wel èl ar ruzenn hugenn divouezh [χ] pe ar gensonenn hugenn dre fraoñval [ʀ]<sup>2</sup>. Kadarnaet eo ar sanadur gallek get ar skouer [la:ʁet] mes ar skouer [la:ret] get ur gensonenn logig dre fraoñval enni a ziskoueza bout sius e-keñver ar fonemoù renablet e italianeg standard, a rahe kentoc'h get ar gensonenn logig dre strakal [r].

An displegadenn roet get *Geriadur brezhoneg an Here*<sup>3</sup> a roa peder alofonenn : [r], [ɹ],

1 FAVEREAU Francis, 1992, op. cit.

2 MORVAN Danièle, *Le Robert, dictionnaire pratique de la langue française*, éditions France Loisirs, Paris, 2002, p.1847.

3 MÉNARD Martial, 2001, op. cit.

[ʀ] ha [ʁ]. Heverk eo ar gensonenn logig dre dostaat ha ne oa ket bet meneget en oberennoù arall c'hoazh. Evit ar gensonenn logig dre fraoñval e vez lakaet da «henvoazel», ha rannyezhel àr un dro é vout ma vehe boas c'hoazh e Bro Leon hag e Bro Dreger. Ar rummadoù yaouankoc'h a rahe kentoc'h get ar c'hensonennoù hugenn [ʀ] ha [ʁ]. Da verchiñ emañ chomet digemm an displegadenn en daou embannadur (1995 ha 2001). An treuzskrivadur [r] dre ziover a zo kanniget amañ just-èl ur boaz en treuzskriviñ brezhonek, pezh a adkaver get Favereau ivez.

#### 4. Treuzskrivadur ar gensonenn logig dre fraoñval dre ziover

- **DELAPORTE Raymond, *Geriadur brezhoneg-saozneg, english-breton, Mouladurioù Hor Yezh, eil embannadur, 2006* : treuzskrivet [r] mes resisaet, p.264 : « [r] rodeal (English : red) ».**
- **MÉNARD Martial, *Mon premier Dictionnaire breton-français, Beluga / Coop Breizh, Speied, 2010. p.6* : « Ce tableau est le travail de Divi Kervella [...] [r] redek (fr. : rire) ».**
- **LE RUYET Jean-Claude, *Bien prononcer le breton d'aujourd'hui, Skol Vreizh, 2012, p.11* : « [r] *roi* ; douar, karr, prop, raden ».**
- **KALVEZ Tugdual, *Brezhonegomp ! Parlons breton !, Skol Uhel Ar Vro, 2013. p.5* : « Nous utiliserons dans ce manuel la notation de l'Association Phonétique Internationale (A.P.I), donnée dans les tableaux ci-dessous [...] / [r] rod / rue ». Ha da skouer, p.11 : « *prenestr m.* [ 'prê:nestr]. »**
- **BOCHÉ Albert & LE RUYET Jean-Claude, *Le breton, des dialectes à la langue écrite, Skol Vreizh, Morlaix, 2019. p.11* : «[r] : *roi* ; roz, gar, karr, pri. P.31 : - RUZ, [...] : [ry] ou [ry:s]»**

Get Tugdual Kalvez e vez meneget [r] ha diskouezet èl kevatal d'ar fonem gallek e « rue ». Ha get skouer « prenestr » e venega ar soniad [tr] e fin ar ger, pezh a ziskoueza mont a-enep d'ar sanadur brezhonek boas, èl displeget get Per Jakez Helias « **tr, bl** : le **r** et le **l** sont muets : **eur paotr** est prononcé **eur paot** (un garçon) ; **posubl eo, posub eo** (c'est possible)»<sup>1</sup> pe c'hoazh get Andreo ar Merser « le **r** n'est pas prononcé dans les mots se terminant par le

1 HELIAS Per Jakez, *Dictionnaire breton*, Emgleo Breiz, Garnier, Paris, 1986, p.11.

groupe tr [...] Par contre le r réapparaît dans les dérivés. » ha « Les mots en bl, br et kl : le l et le r ne s'entendent généralement pas [...] »<sup>1</sup>.

Get *Mon premier dictionnaire breton-français*<sup>2</sup>, *Bien prononcer le breton d'aujourd'hui*<sup>3</sup>, ha *le breton des dialectes à la langue écrite*<sup>4</sup> e vez treuzskivet [r] an /r/ brezhonek plaen mes doc'h er lakaat par doc'h ar sanadur gallek a vehe [r] kement-arall, pezh a ziskoueza bout sius e-keñver ar sanadur gallek kempred. Memes tra get ar *Geriadur brezhoneg-saozneg*<sup>5</sup> a ra get ar memes treuzskrivadur [r] evit ar brezhoneg hag ar saozneg, pa vez ag ar gensonenn logig dre dostaat e saozneg doc'h pezh hon eus bet diskouezet c'hoazh.

## 5. Ar gensonenn logig dre fraoñval sanet e brezhoneg

Daoustoc'h d'an treuzskrivadur [r] bout implijet dre ziover da c'hober dave doc'h alofonennoù arall e c'hella bout graet getoñ a-ratozh a-barzh lod ag an oberennoù. Kement-se da verchiñ sanadur ar gensonenn logig dre fraoñval mouezhiet e brezhoneg :

- **HEMON Roparz, *Grammaire bretonne*, Al Liamm, Brest, 1975. p.83** : « La seule consonne roulée que possèdent le breton et le français, ( r ), s'obtient en approchant la pointe de la langue des gencives en arrière des dents de la mâchoire supérieure. L'air en passant produit une série de vibrations, une sorte de roulement, d'où le nom de la consonne. Comme en français, beaucoup de personnes remplacent cet « r roulé » par une consonne du même type appelée « r grasseyé ». Dans ce cas, c'est la lnette, à l'extrémité du voile du palais, qui vibre contre l'arrière de la langue ».
- **TRÉPOS Pierre, *Grammaire bretonne*, Brud Nevez – Emgleo Breiz, 2001, p. 24-25** : « Il y a aussi les VIBRANTES : la sortie de l'air fait vibrer : le bout de la langue, rapproché des alvéoles des dents : r dental, ou roulé, fréquent en Léon et sur la côte ouest ; le dos de la langue, rapproché du voile du palais : r vélaire, ou grasseyé».
- **KEMENER Yann-Ber, *Je parle breton, Brezhoneg prim ha dillo*, Skol Vreizh, Montroulez, 2002, p.10** : la prononciation d'après l'alphabet phonétique international -API- est indiqué entre [...]. P.11 : [r] – ruz. P.14 : « en résumé : les consonnes {l},

1 AR MERSER Andreo, op. cit., p.467

2 MÉNARD Martial, 2010, op. cit.

3 LE RUYET Jean-Claude, 2012, op. cit.

4 BOCHÉ Albert & LE RUYET Jean-Claude, 2019, op. cit.

5 DELAPORTE Raymond, 2006, op. cit.

{m}, {n} et {r} sont prononcées [l], [m], [n] et [r].

- DENIS Gwendal, LE BIHAN Hervé, MÉNARD Martial, *Le breton pour les nuls*, Editions First-Gründ, Paris, 2009, p.12 : « r, parfois roulé et sonore. (Prononciation figurée : r) »
- KERGOAT Lukian, *Les 1000 premiers mots breton*, Embannadurioù Skol an Emsav, Roazhon, 2010. p.57 : « Consonnes roulées / alvéolaires : [r] redek » ha « Les consonnes [l], [n], et [r] peuvent être courtes ou longues (écrites dans ce cas ll, nn et rr) ».
- FAGON Christian & RIOU Yann, *Trésors du breton de l'île de sein, bredoneg ar gear, on teuzeur*, An Alarc'h embannadurioù, 2015. Treuzskrivet [r] ingal, da skouer p.43 : BARA ['ba:ra], BARGOUL ['bargul] pe p.280 : RIKA ['rika] ».
- DENIS Gwendal, LE BIHAN Hervé, MÉNARD Martial, *Guide de conversation, le breton pour les nuls*, First éditions, Paris, 2019, p.12 : « r est parfois roulé et sonore. (Prononciation figurée : r) »

Er *Grammaire bretonne*<sup>1</sup> e roer deomp da ouiet e vez ag ar gensonenn logig dre fraoñval<sup>2</sup> e brezhoneg kement èl e galleg hag e vez techet ar gomzourion da c'hober muioc'h-mui get ar gensonenn hugenn (dre daravat pe dre fraoñval) en div yezh. En eil *Grammaire bretonne*<sup>3</sup> meneget amañ genomp e vez resisaet e vehe stankoc'h ar sanadur fraoñvet e Bro-Leon hag er c'hornôg evit er broioù arall e Breizh, a rahe kentoc'h get ar c'hensonennoù hugenn. Er *Guide de conversation*<sup>4</sup> ha *Le breton pour les nuls*<sup>5</sup> e resisaer e vez fraoñvet a-wezhadoù hep reiñ muioc'h a ditouroù. Erfin ne ganniger ket nemet an /r/ fraoñvet en teir oberenn arall renablet uheloc'h : *Trésors du breton de l'île de sein*<sup>6</sup>, *Je parle breton*<sup>7</sup> ha *Les 1000 premiers mots breton*<sup>8</sup>.

---

1 HEMON Roparz, 1975, op. cit.

2 «une série de vibration» a ra dave doc'h ar fraoñvadenn ha n'eo ket doc'h ar gensonenn dre strakal.

3 TRÉPOS Pierre, 2001, op. cit.

4 DENIS Gwendal, LE BIHAN Hervé, MÉNARD Martial, 2019, op. cit.

5 DENIS Gwendal, LE BIHAN Hervé, MÉNARD Martial, 2009, ibid.

6 FAGON Christian & RIOU Yann, 2015, ibid.

7 KEMENER Yann-Ber, 2002, op. cit.

8 KERGOAT Lukian, 2010, ibid.

## 6. Ar c'hensonnoù rotek mouezhiet ha divouezhiet

Peder ag an oberennoù renablet amañ a-us a venega ur stumm mouezhiet hag ur stumm divouezhiet d'an /r/ brezhonek :

- **HEMON Roparz, *Grammaire bretonne*, Al Liamm, Brest, 1975, p.83** : « Après une consonne sourde, ( r ) ou (r-) s'assourdit dans les mêmes conditions que (l), ainsi qu'il a été exposé au paragraphe précédent, ceci en breton comme en français. Comparer *mestr*, maître (*mestr*<sup>o</sup>) et *équestre* (*e~\*estr*<sup>o</sup>) ».
- **KERVELLA Frañsez, *Yezhadur bras ar brezhoneg*, Al Liamm, Brest, 1995, p.25** : « Evel N, e c'hell R hag L bezañ kalet pe vlot. Stummoù c'hwezdennet heverk o devez ivez koulz lavaret dre holl : Lenn ['lên], e lenn [e '\*lên], he lenn [he 'Lhên] / Rod ['rô:d], e rod [e '\*rô:d], he rod [he 'Rhô:d] »
- **TRÉPOS Pierre, *Grammaire bretonne*, Brud Nevez – Emgleo Breiz, 2001**. « Bien que l'orthographe ne les distingue pas, il y a, en breton, des vibrantes FORTES : **ll, rr** : **ho loa**, votre cuiller ; **ho re**, les vôtres ; et des vibrantes DOUCES : **l, r** : **da loa** : ta cuiller ; **da re** : les tiens ; NB – le gallois a RH et LL, qui peuvent s'affaiblir en R et L. »
- **FAVEREAU Francis, *Geriadur godell ar brezhoneg a-vremañ, dictionnaire de poche du breton contemporain*, Skol Vreizh, Montroulez, 2017** : « [r] ruz (& diverses variantes [R], [r̥]...) »

Hemon a ra dave doc'h an /r/ divouezh é tonet àr-lerc'h ur gensonenn divouezh arall, un alofonenn diliamm anezhi neuze, mes evit Kervella ha Trépos e vez kaoz kentoc'h ag un alofonenn glokaus : an /r/ kreñv an hani eo<sup>1</sup>. Keñveriet eo e implij doc'h ar c'hembraeg amañ get Trépos, pezh a adkaver get Cheveau ivez<sup>2</sup>.

---

1 Evit mont en-dro an /r/ kreñv – pe /r/ kentañ genomp – gwelet ar pennad deveret.

2 CHEVEAU Loïc, Le r fort initial en breton. op. cit., p.2



## B - Savboent ar vrezhonegourion

Stag eo ar sanadur hag e emdroadur doc'h meur a anadenn. Ha doc'h ma vez sanadur-mañ-sanadur perzh ag ur c'honolekt pe ur geolekt e c'hella bout degemeret mat pe fall get ar gomzourion arall, a ereay ar fonem pe an alofonenn doc'h ur raksoñj bennak. Pa roa Divi Kervella da ouiet d'e lennourion : «La prononciation «roulée» tend (malheureusement) à régresser. Il n'y a aucun inconvénient à prononcer avec un r "parisien"»<sup>1</sup> e roa e ali àr emdroadur ar sanadur. Doc'h un tu e c'houlakaa e vehe gwell pe e kavahe gwell dehzoñ ar sanadur fraoñvet da chom boas. Ha doc'h an tu arall e ra /r/ *parizian* ag ar gensonenn hugenn, pezh a ra deor soñjal e vehe ar sanadur-mañ unan estren d'ar brezhoneg. En hentenn *Brezhoneg ...buan hag aes*<sup>2</sup> e roa Per Denez un aviz kontrol d'an deskidi :

«On conseille la prononciation uvulaire, - c'est-à-dire comme dans le français des villes – et non la prononciation «roulée», c'est-à-dire apicale, caractéristique de certaines régions bretonnes».

Dre alijiñ d'e lennourion monet get ar sanadur hugennel e prizia anezhoñ en ur zispriziñ ar sanadur logigel. Pezh heverk amañ : en un hentenn da zeskiñ brezhoneg («buan hag aes») e alia monet get ar sanadur lakaet da c'hallek getoñ ha chom hep gober get ar sanadur lakaet da vrezhonek. Doc'hpenn kement-se e ta àr-wel un enebiezh kêrioù / maezoù get « le français des villes» èl ma oa «un r "parisien"» get Kervella ha «certaines régions bretonnes» doc'h an tu arall.

Ur perzh arall a c'hella donet get un anadenn yezh : seblant an deskadurezh pe an nann-deskadurezh, doc'h ur sanadur da skouer. En e c'h/*Grammaire bretonne du dialecte de Vannes*, an Abad Le Bayon a venega ar vetatezenn a c'hella degouezhiñ get an /l/ hag an /r/ : «les lettres L et R tiennent à passer après la voyelle voisine : **klom** devient **kolm** ; **bréhel**, **berhel**» ha heñv da oc'hpenniñ : « Un breton sans culture ne prononcera pas breton mais berton»<sup>3</sup>. Goulakaat a ra neuze e tahe ar vetatezenn get brezhonegourion dizesk, ha saniñ *berzhell* e lec'h *brezhell* a vehe merk ur sokiolekt dre-se. E gwirionez e tiskoueza bout kentoc'h ag ur geolekt : ar vetatezenn é vout perzh ar gwenedeg-uhel<sup>4</sup>.

1 KERVELLA Divi, 2005, op. cit., p.XII

2 DENEZ Per, *Brezhoneg ...buan hag aes, le cours de breton pour tous*, Omnivox international, 1972

3 LE BAYON l'Abbé A-M, *Grammaire bretonne du dialecte de Vannes*, Imprimerie Lafolye, Vannes, 1878 (réimpression offset Mouladurioù Hor Yezh, 1986), p.3.

4 Gwelet *Devri.bzh* : «brezhell»

A-barzh e d/*Traité de prononciation du breton du Nord Ouest* e c'hloestra Mikael Madeg ur pennad da «gudenn» an /r/ («le problème du "r"») é tisplegiñ eh eus bet «une évolution historique récente» hag é reiñ e ali àrnezhoñ : « je suggère de ne pas se soucier du "r" et de le prononcer "à la française"». Monet a ra pelloc'h :

«A titre de singularité individuelle, on peut toujours s'exercer, et réussir, à prononcer un "r" dit "roulé". Il est franchement archaïque en français, rare en anglais car trop théâtrale (sauf en Ecosse), et a du plomb dans l'aile en breton de la dernière génération dont c'est la première langue. Mais il est amusant. Quant à l'usage du "r" sourd il exige de parfaitement maîtriser les passages sourds/sonores, des consonnes de couple en finale. Et, comme tout ce qui est micro-dialectal, voire individuel désormais, on risque de l'utiliser à tort et à travers et de tomber dans un certain ridicule fort loin de l'authenticité bretonnante éventuellement recherchée. Autant ne pas essayer. Néanmoins c'est un snobisme hautement récréatif pour un néo-bretonnant»<sup>1</sup>.

Dibab ar gerioù a zo a-bouez amañ : *singularité, archaïque, théâtrale, amusant, micro-dialectal, ridicule, snobisme, récréatif*, stag-holl doc'h *néo-bretonnant* enebet doc'h *l'authenticité bretonnante*. Merchet e vez un dispriz splann a-berzh ar skrivagnour doc'h an nevezvrezhonegourion a glaskahe tizhiñ ur pal lakaet da ziamen getoñ. Tagus ar gerioù dibabet : ne vehe nemet un dudi, un abuz-amzer ag an /r/ *roulet* hag aner pe erbad e vehe klask gober getoñ. Doc'h an tu arall e vez lakaet ar memes sanadur da *authenticité bretonnante* mes kompren a raer e vehe bet *authentique* anezhoñ e-raok an *évolution historique récente*, da lâret eo komzourion hengounel enebet doc'h an nevezvrezhonegourion. Ar ger *snobisme* implijet get Madeg amañ a goucha a-walc'h doc'h e bennad a-benn ar fin.

Ersavioù a sort-mañ a zo bet kontet deomp get PSK1980, komzour aterset genomp<sup>2</sup>, en deus roet deomp da ouiet en doa klasket monet get kensonennoù logig (dre strakal pe dre fraoñval) p'en doa kroget da labourat e brezhoneg ; dihanet en doa dre ma oa bet graet goap doc'h-toñ get e gensorted labour, ha heñv lakaet diaez neuze. Ur c'homzour arall, P1997<sup>3</sup>, en deus displeget deomp en doa bet tro da gaozeal get ur vaouez a Verne a « roule an /r/ », pezh a gave-heñv brav, en doa lâret. Oc'hpennet en doa e kave dezhoñ e veze fraoñvet -pe straket-an /r/ get ar vrezhonegourion goshañ en doa bet tro da gejal gete, da lâret eo tud ganet er blezioù 1920 pe e-raok. Ur brezhonegour yaouank arall, animatour radio e brezhoneg anezhoñ, en deus displeget deomp e tiguzhe brezhonegourion gozh en e gornad<sup>4</sup> dre selaou doc'h sanadur ar c'hensonennoù rotek gete : ar re a ra get kensonennoù logig e galleg é vout

1 MADEG Mikael, *Traité de prononciation du breton du Nord Ouest*, Emgleo Breiz, 2010, p. 21-22.

2 Atersadenn kaset d'ar 05/03/2022 e Persken.

3 Atersadenn kaset d'an 09/02/2022 e Kistinid

4 Bro-Gwened Uhel. Pennad-kaoz kaset d'an 09/02/2021 e Henbont

brezhonegourion anezhe, hrevez-heñv. Ur merker sokioyezhoñiel a zo a sanadur an /r/ e brezhoneg neuze, èl en displega Jean Le Dû a-zivout brezhoneg Plougouskant :

«la prononciation du r « à la française » est un marqueur sociolinguistique fort : son usage pouvait signifier que le locuteur se démarquait du commun des paysans (qui se moquaient des gens de Tréguier qui utilisaient cette prononciation nommée gragoulad 'grasseyer') ; c'est la prononciation des gens qui savent un peu le breton mais n'ont pas l'habitude de le parler»<sup>1</sup> .

Sklaer eo an enebiezh etre ar c'hêrioù hag ar maezoù a-barzh amañ c'hoazh : kêriz Landreger é c'hober get ar c'hensonennoù hugenn hag ar beizanted é c'hober get ar c'hensonennoù logig, dre dostaat kentoc'h :

«le r est ordinairement prononcé rétroflexe, comme en anglais du Sud-Ouest ou en américain, mais il peut aussi être roulé, ressembler au r antillais (ceci est plus fréquent à Pleubian)»<sup>2</sup> .

Oc'hpenn bout liammet doc'h orin ha statud sokial ar c'homzour e tiskoueza ar sanadur pegen barrek eo an den àr ar brezhoneg : ar re a ouia nebeut anezhoñ a yay get ar gensonenn hugenn. Gouiet nebeut a vrezhoneg é vout par da ouiet galleg, a c'houlakaomp. Hag un abeg a c'hoaperezh eo ar sanadur amañ ivez, en tu kontrol e-keñver pennad an *Traité de prononciation du breton du Nord Ouest*<sup>3</sup>. Ur feson e oa da uhelaat e renk e-keñver ar beizanted, doc'h a gomprenner ; sanadur an uhelidi a vehe ag ar gensonenn hugenn, liammet doc'h mestroni ar galleg. Ne ouier ket a bezh mare a vez kaoz a-barzh amañ mes gouiet a raer a-walc'h pesort pouez a oa d'ar galleg e Breizh-Izel e-pad an XX<sup>vet</sup> kantved. Sort evezhiadennoù a ziskoueza mont a-du get ar c'hannig savet get Ronan Calvez<sup>4</sup> pa geñveria pouez ha talvoudegezh ar brezhoneg hag ar galleg er prantad etre an daou vrezel bed : liammiñ a ra ar galleg doc'h talvoudegezh ur yezh ag ar c'hêrioù hag an amzer da zonet, pa vez ar brezhoneg kani ar maezoù hag an tremened. Dres ar pezh a adkaver amañ get sanadur ar c'hensonennoù rotek e Plougouskant. Da heul ar priziadur roet da sanadur an /r/ e brezhoneg e c'heller en em gavout get daou live-yezh, pep unan é kouchiñ doc'h ur sanadur. Hag ar vrezhonegourion da azasaat o sanadur doc'h ar c'henarroud. Maxime-Morvan Crahé a venega ur brezhonegour é cheñch sanadur e-kerzh un atersadenn da skouer :

1 LE DÛ Jean, *Le trégorrois à Plougrescant / dictionnaire breton français*, Emgleo Breiz, 2012, p.30.

2 LE DÛ Jean, *ibid.*

3 MADEG Mikael, 2010, *op. cit.*

4 CALVEZ Ronan. *La Radio en langue bretonne : Roparz Hemon et Pierre-Jakez Hélias : deux rêves de la Bretagne*. Rennes : Presses universitaires de Rennes, 2000. p.16

«Un informateur, enregistré dans une émission radiophonique locale, locuteur natif, mais ayant beaucoup déménagé en France, commence l'interview, avec [ʁ] comme réalisation de /r/, qu'il modifiera en [r] au bout de quelques minutes, jusqu'au bout de l'émission, qui semble être sa prononciation la plus naturelle pour lui».<sup>1</sup>

Gellout a raer goulakaat eh eus amañ ur skouer ag ur striv a gouchiñ doc'h ur live-yezh uhel a-berzh ar c'homzour, dre m'en em gava aterset er radio. Mes ur wezh lañset get e gomz ha lakaet en e aez e ta dezhoñ e sanadur boas en-dro, da lâret eo kani ar yezh pemdez.

## **CH- Kensonennoù rotek Bro-Gwened Izel en *Nouvel Atlas Linguistique de Basse-Bretagne***

Daou *Atlas Linguistique de Basse-Bretagne* a zo bet : an hani kentañ get Pierre Le Roux embannet e 1927 hag e stumm nevesaet embannet er blez 1999 get Jean Le Dù. Getoñ-heñv diwezhañ emañ bet graet get ar lizherenneg fonetik etrebroadel ha serret muioc'h a boentoù-dave c'hoazh. E-raok tolpiñ hon evezh àr dielfennadenn hor standilhon e vo renablet amañ-dindan skouerioù kavet en NALBB<sup>2</sup> evit parrezioù Bro-Gwened Izel get c'hwec'h degouezh, hag a vo meneget get ar gomzourion bet dielfennet genomp-ni ivez. Le Dù a zegasa un displegadenn a-zivout treuzskrivadur ar c'hensonennoù rotek en e Atlas :

« J'utilise l'Alphabet Phonétique International [...] J'ai transcrit les consonnes de type r le plus précisément possible, en distinguant au mieux les diverses variantes. Il faut savoir, cependant, que le même locuteur, selon les moments et les circonstances, peut utiliser l'un ou l'autre de ces sons : un homme du nord-Finistère, conscient de ma présence au début de l'enquête, prononce un [ʁ], qui va se transformer en [r] au bout d'une demi-heure, la confiance s'étant établie »;<sup>3</sup>

Setu-amañ renabl ar gomzourion aterset evit parrezioù Bro-Gwened Izel. N'eo ket treha-tre ar memes parrezioù a zo bet dielfennet get hor standilhon : n'eus ket komzour erbet a C'hroe, Sant-Karadeg, Pleurdud, Redene pe Plourae genomp. Evit ar parrezioù boutin e kaver Plañvour, Kaodan, Mèlann, Ploue, Bubri, Priziag, Laoulan. Evit pep komzour e vo resisaet niverenn ar poent-dave, anv ar barrez, anv ar c'homzour, e vlezad ganedigezh, e vicher ha

---

1 CRAHÉ Maxime-Morvan. *Le breton de Languidic : étude phonétique, morphologique et syntaxique d'un sous-dialecte du breton vannetais*. Linguistique. Université Rennes 2, 2013. Français. NNT : 2013REN20062. Tel-00976584, p.142

2 LE DÛ Jean, *Nouvel Atlas Linguistique de la Basse-Bretagne*, Centre de Recherche Bretonne et Celtique, 1999. Ar resisadenn ziwezhañ-mañ a gadarna ar live-yezh stag doc'h sanadur an /r/ get brezhonegourion 'zo, èl meneget uheloc'h.

3 LE DÛ Jean, 1999, *ibid.*, p.4

poent-dave an ALBB<sup>4</sup> :

- 142 : Groe, Mme T. (1884) cultivatrice, J.B (1912), F.M. (1888), M.B. (1903) pêcheurs (**ALBB 072**)
- 143 : Plañvour : J.R (1906), M.L. (1904) retraité RATP, M.B. (1923) cultivateur (**ALBB 070**)
- 144 : Kaodan : Mme L.C. (1908), E.G. (1909), J.L.C (1911) et son épouse (1919) cultivateurs.
- 145 : Redene : F.D (1901), sacristain, menuisier (1925), M.B. (1924) cultivateur
- 146 : Mëlann : L.L.M. (1921), maréchal-ferrant, tailleur, L.L. (1925) ouvrier.
- 147 : Ploue : M.L.C. Cultivateur et son épouse Y.L.C (1924), chapelier
- 148 : Bubri : G.R (1919) charpentier (**ALBB 064**)
- (149 : Melrand)
- 150 : Sant-Karadeg Tregonvael : Mme M.L (1909) cultivatrice
- 151 : Priziag Mme P. (1906), s. pr. L.T. (1920) cultivateur
- 152 : Pleurdud : Mme P. (1906) cultivatrice, J.B. (1908) marchand de bestiaux (**ALBB 062**)
- 153 : Laoulan A.P. (1905), L.L.C (1919) cultivateurs
- 154 : Plourae Mme M.D. (1901), J.P. (1932), cultivateurs

En daolenn amañ-dindan e kaver roll ar parrezioù meneget hag ur ger-skouer evit pep degouezh. E melen ar gerioù get ar gensonenn logig dre strakal banezhe ; e glas ar gerioù get ar gensonenn hugenn dre daravat banezhe ; e mouk ar gerioù get ar gensonenn hugenn dre frañval banezhe.

<i>Parrez / ger</i>	<i>BrB :</i> <b>Parrez</b>	<i>BrK :</i> <b>Skouarn</b>	<i>Brh :</i> <b>ar voure'h</b>	<i>Br :</i> <b>Pevar</b>	<i>KrB :</i> <b>Tri</b>	<i>rB:</i> <b>Razhed</b>
<b>Groe</b>	[pa'res]	[skwam]	[ər.vurx]	[pwa:r]	[tri]	[ 'ra:hət]
<b>Plañvour</b>	[pa'rəs]	[skwæm]	[oʁ.vuʁx]	[pwa:ʁ]	[tri]	[ 'ʁahət]
<b>Kaodan</b>	[pa'res]	[skɔ'hæ:ɛn]	[aʁ.vuʁk]	[pwæ:r]	[tri]	[ 'ʁhæhet]
<b>Redene</b>	[pa'res]	[skwæm]	[əʁ.vurh]	[pwa:ʁ]	[tʁi:]	[ʁa'hət]

4 LE ROUX Pierre, *Atlas Linguistique de Basse-Bretagne*, Rennes, 1927.

<b>Mêlann</b>	[ˈpaɾɛs]	[skwaːrn]	[əɾ.vurh]	[pwaːr]	[tri]	[ˈrahət]
<b>Ploue</b>	[ˈpaɾɛːs]	[skoˈhaːɾn]	[əɾ.vurx]	[pwaːR]	[tri]	[raˈhet]
<b>Bubri</b>	[paɾəs]	[skɔˈhaɾn]	[ə.vɔʁˈx]	[pwaːɛ]	[tɾi]	[ˈɾahət]
<b>Sant Karadeg</b>	[ˈpaɾɛs]	[skwaɾn]	[əɾ.vux]	[pwaːR]	[tri]	[ˈɾæhət]
<b>Priziag</b>	[ˈpaɾɛs]	[skwaɾn]	[vux]	[pwaːr]	[tri]	[ˈhrahət]
<b>Pleurdud</b>	[ˈpaɾəs]	[skwaʁn]	[ə.vuʁh]	[pwaːR]	[tri]	[ˈhrahət]
<b>Laoulan</b>	[paˈɾɛs]	[skwaɾn]	[ə.vuʁh]	[pwaːr]	[tri]	[ˈhrahət]
<b>Plourae</b>	[ˈpaːɾəs]	[skwaɾn]	[vurx]	[pwaːR]	[tri]	[ˈhɾæhæt]

Diaes eo ranniñ an disoc'hoù-mañ dre rummad èl eh eus bet graet get hor standilhon dre ma vez meur a gomzour e parrezioù ' zo ha n'int ket izili ar memes rummad newazh, da skouer e Plourae get Mme M.D ganet e 1901 ha J.P ganet e 1932. Dre-se ne vo ket klasket dielfenniñ un emdroadur a rummad da rummad get titouroù an NALBB, nemet keñveriiñ an alofonennoù merchet amañ get ar re merchet genomp.

N'eus ket 'met div barrez e lec'h ma ta plaen an hevelep fonem e razh an degouezhioù : ar gensonenn logig dre strakal [r] e Groe hag e Mêlann. Kavet e vez anezhi ivez dirak un /h/ dibenn en div barrez-se : *ar vourc'h* [əɾ.vurh] ha [əɾ.vurx]. N'eo ket bet merchet eno roudoù un /r/ kentañ keneve an taol-mouezh àr ar silabenn gentañ. E parrezioù Ploue ha Plourae e ta stank ar gensonenn hugenn dre fraoñval [R] (5 degouezh diàr 6) hag en div barrez-se e vez distaget an /r/ a-zoc'h an /h/ dibenn er bomm *ar vourc'h* ivez. N'eo ket divouezh an /r/ kentañ e Ploue newazh, kontrol da Blourae. E Redene hag e Bubri e kaver muioc'h ag ar gensonenn hugenn dre daravat [ɛ] (4 degouezh diàr 6) ha divouezh ar gensonenn evit an /r/ kentañ. Muioc'h a liessorted a vez get ar parrezioù arall, betek kavout an teir alofonenn e Laoulan, Priziag, Plañvour ha Kaodan. Er barrez-mañ-diwezhañ e ta ar gensonenn logig dre strakal get ar ger-mell hepken. N'eus ket nemet e Priziag ha Pleurdud ma vez kendeuzet an /r/ hag an /h/ dibenn er bomm *ar vourc'h*, daoustoc'h da skouer Pleurdud derc'hel ur vogalenn neptuekaet e lec'h an /r/. Ar c'hendeuziñ-mañ a zo anavet e Bro-Gwened Uhel ivez, èl er menega Turiaw ar Menteg da skouer : «R disparaît parfois dans une autre consonne [...] Dans le groupe RC'HE, le C'H devient parfois /y/»<sup>1</sup>.

1 AR MENTEG Turiaw, *Dastumad gerioù a rannyezhoù ar gevred / dictionnaire de vannetais breton-français*, Hiziv An Deiz, 2007. Da ziwall ' zo get an treuzskrivadur fonetik amañ rak ne goucha ket doc'h kani ar LFE. An arouez /y/ a zo par da [j] èl a c'heller er c'hompren get ar skouerioù roet getoñ : « mérc'hed / miryèD/, filles, gwerc'hez /gwiryèz/, vierge».

Fed ag ar gensonenn logig e kaver amañ ar stumm dre strakal meneget evit ar wezh kentañ e-keñver an oberennoù arall bet studiet. Rak ar stumm dre fraoñval eo a zo bet lakaet ar gaoz àrnezhi ha lakaet da dreuzskrivadur dre ziover e geriadurioù 'zo<sup>1</sup>. Kouc'hiñ a ra doc'h ar sanadur stankañ e yezhoù Europa ha doc'h ar pezh hon eus kavet get hor standilhon ivez. Bout a vez ag ar gensonenn logig dre fraoñval e gwenedeg-izel -ha neuze e brezhoneg- doc'h ar pezh hon eus bet merchet. Mes chom a ra raloc'h a-galz evit ar gensonenn logig dre strakal, lakaet da sanadur stankañ brezhoneg ar Gemene get McKenna<sup>2</sup>.

## C'H – Diverradenn an displegadennoù

Ret-mat eo anzav eh eus dislavar etre an daou-ugent oberenn bennak bet tapet da skouer a-benn brastresiñ savboent ar lennegezh vrezhonek àr sanadur ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg. O diverriñ a c'heller dindan pemp rummad bras hag a za àr-wel en diwezh :

- **Ar re a embanna e vez ar memes sanadur e galleg hag e brezhoneg**, hep resisaat a besort sanadur e vez kaoz d'ar liesañ. Pezh a c'hella degas ar soñj e vehe bet kenstur an div yezh a-c'houde gwerso, 1732 a-c'hwel<sup>3</sup> ; evit sanadur ar c'hensonennoù rotek atav. Evit an oberennoù savet e eil hanterenn an XX<sup>vet</sup> e c'heller goulakaat e vez kaoz ag ar gensonenn hugenn dre daravat, zoken ma ta meneg ag ar c'hensonennoù logig e galleg get Roparz Hemon er blez 1975<sup>4</sup>.
- **Ar re a venega un emdroadur er sanadur é stadiñ an traoù èl-mañ** : gwezharall, mare bennak e penn kentañ an XX<sup>vet</sup> kantved<sup>5</sup> e veze graet get ar gensonenn logig dre fraoñval mouezhiet e-raok monet d'ar c'hensonennoù hugenn, diàr levezon ar galleg daet dre ar c'hêrioù<sup>6</sup>.
- **Ar re a venega meur a sanadur d'ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg**, é renabliñ un niver achu a alofonennoù : [r] ha [ʀ]<sup>7</sup> pe [r], [ɾ] , [R] ha [ʁ]<sup>8</sup> ; pe é chom amresisoc'h

1 Treuzskrivadur graet « henvoazel » anezhoñ a-barzh *Geriadur an Here* (MÉNARD Martial, 2001, op. cit.).

2 « The most general type of [r] in the speech of G/S. is the flapped (one-tap-trill) variety, where there is a single contact of the apex of the tongue against the alveoli », McKENNA Malachy, *The Breton of Guemene-sur-Scorff, part I*, in *Zeitschrift für celtische Philologie*, 1976.

3 DE ROSTRONEN Grégoire, 1732, op. cit., p.14

4 HEMON Roparz, 1975, op. cit., p.83

5 AR MERSER Andreo, 2009, op. cit., p.457

6 LE DÚ Jean, 2012, op. cit., p .30

7 CHEVEAU Loïc, 2019, op. cit.

8 MÉNARD Martial, 2001, op. cit.

get ur renkad pikoù<sup>1</sup>. Evit ar re a venega un niver achu a alofonennoù e tiskouezont bout sius rak pouez ar gensonenn logig dre fraoñval èl displeget amañ a-us mes ivez rak ur liessorted bihan e-keñver disoc'hoù dielfennadenn hor standilhon.

- **Ar re a ra get treuzskrivadur ar gensonenn logig dre fraoñval dre ziover** evit aroueziñ ar c'hensonennoù rotek brezhonek. Pezh a gavomp sius amañ a zo implij ar lizherenneg fonetik etrebroadel da dreuzskriviñ an /r/ brezhonek hag an /r/ gallek pe saoznek é terc'hel d'ar memes alofonenn [r]. Rak ne goucha ket doc'h ar sanadur gwir en div yezh-mañ diwezhañ nag e brezhoneg naket evit-doare.
- **Ar re a venega ar gensonenn logig dre fraoñval sanet e brezhoneg**, hep gober dave doc'h an alofonennoù arall hag é terc'hel d'ar gensonenn logig dre fraoñval. Ar memes dalc'h a za àr-wel amañ èl get ar poent kent.

Doc'hpenn ar pemp rummad bras-mañ e ta tri is-rummad arall, ha n'int ket ken stank :

- **Ar re a venega an /r/ kreñv**, dindan meur a anv (stumm kalet, stumm divouezh...). N'eo ket stank an daveennoù doc'h an anadenn yezh-mañ en oberennoù digor d'ur publik ledan, da lâret eo estroc'h evit er pennadoù arbennik pe en tezennoù da skouer.
- **Ar re a roa o ali a-zivout sanadur an /r/ e brezhoneg** ha n'int ket stank naket. Gwelet hon eus div skouer dreist-holl get *Traité de prononciation du breton du Nord Ouest*<sup>2</sup> ha *Brezhoneg buan hag aes*<sup>3</sup> a alie o-daou chom get an /r/ à la française, pe parisien, enebet doc'h ar c'hensonennoù logig. Divi Kervella a sava kentoc'h doc'h an tu arall get an anv-gwan *malheureusement*<sup>4</sup> da c'hober meneg doc'h emdroadur an /r/ brezhonek.
- **Ar re a dolpa o evezh àr ur sanadur lec'hel**, èl *Le trégorrois à Plougrescant*<sup>5</sup> pe c'hoazh *Trésors du breton de l'île de sein*<sup>6</sup> kentoc'h evit diverriñ sanadur ar brezhoneg en e bezh.

Amresis, pe diglok ivez, e tiskoueza bout ar lennegezh vrezhonek d'an danvez-

---

1 FAVEREAU Francis, 1992, op. cit.

2 MADEG Mikael, 2010, op. cit.

3 DENEZ Per, 1972, op. cit.

4 KERVELLA Divi, 2005, op. cit., p.XIII

5 LE DÚ Jean, 2012, op. cit.

6 FAGON Christian & RIOU Yann, 2015, op. cit.



brezhonegourion a glaskahe gouiet penn da sanadur ar c'hensonennoù rotek e brezhoneg hep bout kaset ag un displegadenn d'an arall. Arouezius eo newazh ag ur rann sokioyezhionel liammet doc'h implij hag emdroadur ar brezhoneg a-bad an XX<sup>vet</sup> kantved. Ha doc'h kresk pouez ar galleg er gevredigezh vrezhonek doc'hpenn e levezon àr ar sanadur brezhonek. Tolpet e vo hon evezh àr tiriad Bro-Gwened Izel èl bet graet get arroudenn an NALBB ha kement-se a-benn meiziñ arlivioù niverus an /r/ brezhonek ha tenniñ ur gentel spisoc'h anezhe.

## IV - Sanadur ar c'hensonennoù rotek e Bro-Gwened Izel

### A - Hollad an alofonennoù diliamm ha klokaus

Er pennad-mañ e vo renablet hollad ar fonemoù hag alofonennoù bet klevet genomp da heul ar labour dastum ha dielfenniñ enrolladennoù ar standilhon. Renablet int amañ-dindan doc'h ar pezh a zo bet merchet etre tout an gomzourion. Evit ur fonem e c'heller kavout e stumm mouezhiet ha divouezh, hag evit pep hani anezhe e c'heller kavout ur stumm bihanaet - pe dispis. Resisaet e vo bep taol an niver a gomzourion o deus bet graet gete da verchiñ pegen lies ha pegen stank emañ daet ar sanadurioù. Ur skouer a vo oc'hpennet plaen ivez, get marilh ar c'homzour. Ne vez kez kaoz a-barzh amañ ag ar sanadur en degouezh /rh/, a zo savet ur pennad gloestret dezhoñ.

#### 1. Kensonennoù hugenn :

- **dre daravat mouezhiet : [ʁ]** ; merchet get 36 komzour diàr 38. Da skouer : *er gêr* [eʁ.ge:ʁ] get PEN1921.
- **dre daravat mouezhiet bihanaet : [r]** ; merchet get 31 c'homzour diàr 38. Da ziwall a zo get ar fonem-mañ rak dispis eo ha strollet eo bet get [ʁ] en disoc'hoù hollek get an diasur ma oamp lies evit an treuzskrivñ. Da skouer : *marv* ['maʁv] get AI1919.
- **dre daravat divouezh gwan : [ʁ̥]** ; merchet get 24 c'homzour diàr 38. Da skouer : *Ma breur* [mə.bʁ̥œ:ʁ̥] get GW1893.
- **dre daravat divouezh kreñv : [χ]** ; merchet get 21 c'homzour diàr 38. Da skouer : *mañsoner* [masone:χ] get AI1937.
- **dre fraoñval mouezhiet : [ʀ]** ; merchet get 8 komzour diàr 38. Da skouer : *àr-droad* [a'dʀet] get O1918.
- **dre daravat divouezh gwan bihanaet : [ʁ̥]** ; merchet get 1 c'homzour diàr 38. Da skouer : *ret dezhoñ* [ʁ̥ətə'hõ] get PSK1907-02.

#### 2. Kensonennoù gouel :

- **dre daravat divouezh : [x]** ; merchet get 11 komzour diàr 38. Da skouer : *merc'h*

[ˈmɛx] get LS1989.

### 3. Kensonennoù gweuz-drekstaon :

- **dre dostaat mouezhiet : [w]** ; merchet get 16 komzour diàr 38, d'ar liesañ evit ar gaoz *graet* hepken. Da skouer : *graet* [gwɛjt] get AI1895.
- **Dre dostaat mouezhiet bihanaet : [w]**. Merchet get 4 c'homzour diàr 38. Da skouer : *graet* [gʷɛjt] get AIO1905. N'eus ket nemet daou gomzour hag a ra get ar stumm bihanaet hepken : PSK1907-02 ha ML1914. Strollet eo bet an daou stumm (spis ha bihanaet) en taolennoù ha disoc'hoù, pezh a ra 18 komzour é c'hober get ur stumm pe an arall etre tout. Pa venegomp [w] er studiaden e raomp dave da [w] àr an dro.

### 4. Kensonennoù gargadenn :

- **dre daravat mouezhiet bihanaet : [ʃ]** ; merchet get 31 c'homzour diàr 38. Da ziwall a zo get ar fonem-mañ rak dispis eo ha strollet eo bet get [ʃ] en disoc'hoù hollek get an diasur ma oamp lies evit ar bizskrivñ. Da skouer : *kourt* [kuʃt] get KD1933.
- **dre daravat mouezhiet : [ʃ]** ; merchet get 1 c'homzour diàr 38. Da skouer : *a lâran* [la:ʃã] get AI1966. Da ziwall a zo rak tanav eo deomp an diforc'h a-zoc'h ar ruzenn hugenn [ʃ] evit an treuzskrivñ. Dre-se e rankahe bout studiet pishoc'h sanadur ar ruzenn c'hargadenn mouezhiet hag he diforc'h a-zoc'h ar gensonenn hugenn dre daravat mouezhiet.

### 5. Kensonennoù staon :

- **dre daravat divouezh : [ç]** ; merchet get 1 c'homzour diàr 38. Da skouer : *disklêriet* [disklɛçət] get PSK1907-02. Na posubl e vehe [ç] disoc'h ar sammad etre /r/ hag ar vogalenn /i/ da heul. Erwan Pipec a venega ar fonem-mañ en e dezenn èl ur stumm fonetik liammet doc'h [h] ha daet diàr kemmadur [g]<sup>1</sup>.
- **dre dostaat mouezhiet : [j]** ; merchet get 1 c'homzour diàr 38. Da skouer : *arru* ['aji]

1 LE PIPEC Erwan, *Etude pluridimensionnelle d'un parler : description, émergence et aspects sociolinguistiques du breton de Malguénac*. Linguistique. Université Rennes 2, 2008. Français. Tel-00335105, pp.79-81.

get P1914. Meneget àr ar lec'hienn *Soundcomparison* e gouezeleg Iwerzhon ivez.

## 6. Kensonennoù logig :

- **dre fraoñval mouezhiet : [r]** ; merchet get 12 komzour diàr 38. Da skouer : *mod arall* [morel] get PZ1902.
- **dre fraoñval mouezhiet bihanaet : [r]** ; merchet get 15 komzour diàr 38. Da skouer : *sur a-walc'h* [zyr'ɥax] get ML1914. Ar stumm bihanaet-mañ a dalva kement evit [r] èl evit [r] ivez.
- **dre fraoñval divouezh : [r̥]** ; merchet get 11 komzour diàr 38. Da skouer : *da barat* [də.ba'ɾat] get AI1896.
- **Dre fraoñval divouezh bihanaet : [r̥]** ; merchet get 2 gomzour diàr 38. Da skouer : *traoù* [tʁəu] get B1911. Strollet eo bet get he stumm spis er studiadenn.
- **dre strakal mouezhiet : [r]** ; merchet get 22 gomzour diàr 38. Da skouer : *breton* [brətɔ̃n] get PSK1980.
- **dre strakal divouezh : [r̥]** ; merchet get 13 komzour diàr 38. Da skouer : *prenet* [pʁɛ̃:nɛt] get B1911.
- **dre dostaat mouezhiet : [ɹ]** ; merchet get 8 komzour diàr 38. Da skouer : *arru* [a:ɹi] get AI1923.
- **dre dostaat divouezh : [ɹ̥]** ; merchet get 1 c'homzour diàr 38. Da skouer : *reglet* [ʁe:glɛt] get B1911. Strollet eo bet get he stumm spis er studiadenn.
- **dre dostaat mouezhiet bihanaet : [ɹ]** ; merchet get 2 gomzour diàr 38. Da skouer : *prenet* ['pɹɛ:nɛt] get ML1914.
- **dre dostaat divouezh bihanaet : [ɹ̥]** ; merchet get 1 c'homzour diàr 38. Da skouer : *traoù* [tʁəu] get B1911.

## 7. Kensonennoù mutet

Mutet e c'hella bout ar c'hensonennoù rotek ivez ; merchet eo an degouezh get 23 c'homzour diàr 38. Get kaozoù ' zo e tiskoueza bout ur stumm skornet daet da vout ur sanadur lec'hel èl get *debriñ* [debɛ̃ɲ] (LS1989) pe *peotramant* [pɛtamã̃n] (B1935). Mes an degouezh a vez anezhoñ get kaozoù divoutinoc'h ivez, èl *Groupama* [gupa'ma] get B1935 pe *surtout* [sy



## 1. Degouezh /Br/

An degouezh-mañ a gaver lies e achumant ar c'haozoù, get un /r/ dibenn é tonet àr-lerc'h ur vogalenn. Ar gensonenn dre daravat mouezhiet eo a za ar muiañ èl en degouezhioù arall dre ma vez anezhi an alofonenn stankañ get ar standilhon. Donet a ra ivez get komzourion hag a ra muioc'h get ar c'hensonennoù logig newazh. Da eil e ta ar gensonenn logig dre strakal mouezhiet heuliet a dost get ar stummoù bihanaet [ʁ], [ʁ̥] ha [r]. Stummoù divouezh a za en degouezh-mañ ivez : [ʁ̥], [χ] ha [x]. E-touesk an alofonennoù ralañ e kaver [ɹ], [r], [ʁ] get 3 c'homzour ha [R], [r̥] get unan bennak pep hani. Da verchiñ a zo ne za ket gwezh erbet [ɹ], [w] pe ar stumm bihanaet [w]. Amañ-dindan, un daolenn da renabliñ pegen lies e ta pep alofonenn doc'h an niver a gomzourion a ra getoñ ur wezh a-c'hwel er standilhon. Ur skouer a zo bet lakaet bep taol.

Alofonenn en degouezh /Br/	Niver a gomzourion	Skouer
[ʁ]	27	<i>douar</i> [dɔa:ʁ] get AH1921
[r]	14	<i>e vreur</i> [i.vrø:r] get AI1896
[ʁ̥], [ʁ̥̥]	12	<i>gober</i> ['go:bəʁ̥] get LL1900
[ɹ]	12	<i>maner</i> [mãne:ɹ] get AIO1905
[ʁ̥̥]	6	<i>labour</i> ['la:bʊʁ̥̥] get B1911
[χ]	5	<i>he c'hoar</i> [i.ʰweχ] get AIO1931
[x]	4	<i>sklaer</i> [sklɛx] get G1952
[ɹ]	3	<i>digor</i> [digo:ɹ] get PSK1907-02
[r]	3	<i>dour</i> [r] get BU1896
[ʁ̥̥]	3	<i>peogwir</i> [pydʒyʁ̥̥] get AI1966
mut	2	<i>gwener</i> [dʒɥi'ne] get LL1900
[R]	1	<i>ho revr</i> [ʁɛ:R] get S1943
[r̥̥]	1	<i>Pier</i> [pjɛ:r̥̥] get AI1919

Evit skouer BU1896 ne oa ket bet notennet ar ger en e bezh genomp, nemet an alofonenn klevet er ger.

## 2. Degouezh /BrB/

An degouezh ma ta [r] ar muiañ an hani eo, estroc'h evit [ʁ] a za kentañ berped. Ur

c'hresk heverk a zo get ar gensonenn hugennel dre fraoñval mouezhiet [ʀ] ha get ar gensonenn logig dre fraoñval mouezhiet [r] ivez. Souezhusoc'h eo kavout ar ruzenn hugenn divouezh kreñv [χ] par doc'hti-diwezhañ etre div vogalenn. Memes tra evit ar gensonenn logig dre strakal divouezh a za kel lies èl [ʀ]. Div alofonenn nevez a za en degouezh-mañ e keñver /Br/ : [ɾ] ha [w] mes dibaot-kaer e chomont.

Alofonenn en degouezh /BrB/	Niver a gomzourion	Skouer
[ʀ]	24	<i>loñjeris</i> [lõʒəʀis] get PEN1935
[r]	20	<i>interamant</i> [interə'mã̃n] get BU1907
[ʀ], [ɾ]	14	<i>(me ') lâre</i> [la:ʀɛ] get B1935
[r]	12	<i>(me ') lâre</i> [la:rɛ] get PZ1902
[r]	7	<i>gousperoù</i> ['gõspə,rõ] get BU1907
[χ]	7	<i>berrat</i> [bɛ:χat] get PEN1921
[ʀ]	6	<i>labouret</i> [laburət] get LV1958
[ɾ]	6	<i>labourat</i> [labur̥at] get PZ1902
[x]	4	<i>perak</i> [pə'xɛk] get AIO1944
[ɾ]	4	<i>serro</i> [ʒɛ.ɾo] get B1911
[ʀ]	3	<i>(me ') lâra</i> [laʀa] get P1997
mut	2	<i>lâre</i> [la'ɛ] get PZ1902
[ɾ]	1	<i>lârin (ket)</i> [la:ɾɛ̃n] get B1911
[ɾ]	1	<i>da barat</i> [də.ba'ɾat] get AI1896
[w]	1	<i>labourizion-douar</i> [labu:wizjã̃n.dwa:r] get PSK1907-02

### 3. Degouezh /KrB/

Ar gensonenn gweuz-drekstaon dre dostaat mouezhiet [w] a za àr-wel ur bochad muioc'h en degouezh-mañ evit er re arall, pezh a c'heller displegiñ aes dre ma ta lies-mat get ar ger *graet*. Get ma vez tennet kont ag an alofonennoù ha pa ne vehent ket daet 'met ur wezh en degouezh e tiskoueza [w] bout implijet pell muioc'h evit ma vez e gwirionez. An /r/ mutet a za ar muiañ get an degouezh-mañ e-keñver ar re arall ivez. Ar c'hensonennoù logig a za muioc'h en degouezh-mañ, àr un dro get [ʀ] ha [x], div ruzenn divouezh anezhe. N'eo ket

souezh eh ahe ar ruzennoù ar zivouezhaat da heul ur gensonenn divouezh arall<sup>1</sup>, èl an triad /k/, /p/, /t/ da skouer (*kreiz (ar)* [kʁɛjz] get PA1902, *hent-bras* [ɛnpʁa:s] get AH1921, *netra* [nitʁa] get AH1892...). Evit [ʃ] ne za ket nemet en degouezh-mañ ha get ur c'homzour hepken : B1911.

Alofonenn en degouezh /KrB/	Niver a gomzourion	Skouer
[ʁ]	28	<i>en-dro</i> [ɛn.'dʁo] get PEN1935
[ʁ̥]	22	<i>treut</i> [tʁ̥ɛt] get PEN1935
[r]	19	<i>Ebrel</i> [im.'bril] get AI1896
Mut	19	<i>gomprenen (ket)</i> [gopʁənɛn] get PZ1902
[w]	16	<i>Graet eo</i> [gwejd.œ] get KL1929
[ʁ̥], [ʃ]	13	<i>traoù</i> [tʁ̥ɑu] get KL1929
[r]	12	<i>tri</i> [tʁi] get B1911
[ʁ̥]	9	<i>traoù</i> [tʁ̥ɑu] get BU1907
[r]	8	<i>breton</i> [brɛtɔn] get S1943
[ʁ]	7	<i>brezhoneg</i> [brɛʝnɛk] get LV1958
[x]	6	<i>etre</i> [e'txe:] get AI1966
[χ]	2	<i>traoù-se</i> [tʁ̥ɑu.sə] get LV1958
[ʃ]	2	<i>prenet</i> ['pʁɛ:nɛt] get ML1914
[ɹ]	2	<i>vras</i> ['vʁa:ws] get AI1923
[ʁ̥]	2	<i>francs</i> [fr̥ɑ̃] get B1911
[ʃ]	1	<i>traoù</i> [tʃɑu] get B1911

Ar skouer *vras* ['vʁa:ws] get AI1923 a zo merchet amañ get ur c'hemmadur dre vlotaat. Hag evit ar skouer *francs* [fr̥ɑ̃] get B1911 e tae en ur frazenn hollvrezhonek hag emañ sanet get lezenn ar brezhoneg, an dra-se a zo kaoz eh eus tennet kont anezhi just-èl ur gaoz vrezhonek.

#### 4. Degouezh /BrK/

An degouezh ma vez ar muiañ-bras ag ar gensonenn hugenn dre daravat mouezhiet, en he daou stumm : spis pe bihanaet. Nebeutoc'h a vez a liessorted amañ ivez ha mutet ar gensonenn rotek liesik c'hoazh.

1 HEMON Roparz, 1975, op. cit., p.83



Alofonenn en degouezh /BrK/	Niver a gomzourion	Skouer
[β]	31	<i>er c'hoadoù</i> [iβ.wedβu] get BU1971
[β], [β̥]	27	<i>gwalarn</i> [golɛ:ʔn] get AI1966
[r]	13	<i>àrlane</i> [r] get G1952
Mut	13	<i>àr-lerc'h</i> [alɛx] get KD1933
[ʀ]	12	<i>partaj</i> [paʀta:ʃ] get AI1896
[β̥]	7	<i>añbarket</i> [ã:baŋkət] get PA1902
[ʀ]	3	<i>pevar blez</i> ['pwaʀble] get B1911
[R]	2	<i>ma c'hoarezed</i> [mø.wɛʀ'zœt] get O1918
[ɹ]	2	<i>Morvan</i> [mɔivã] get G1952
[ʀ]	2	<i>Berne</i> ['bɛ:ʀ,ne] get B1911
[χ]	1	<i>ur sort</i> [uβ.sɔχt] get P1997
[r]	1	<i>gourz</i> [r] get BU1896
[ʀ]	1	<i>torzhoù</i> [tɔʀhɔw] get AI1923
[w]	1	<i>Santez-Barban</i> [bawbã] get P1914

Ar skouer *gourz* get BU1896 a zo merchet amañ get ur c'hemmadur dre vlotaat. En degouezh-mañ èl en hani kent e vercher e ta ar gensonenn logig dre strakal kement èl ar gensonenn vut, ha stank ar sanadurioù bihanaet logig, kargadenn pe hugenn ivez. Ar skouer *er c'hoadoù* [iβ.wedβu] get BU1971 a za get un /h/ mutet amañ èl a c'heller er merchiñ get an treuzskrivadur fonetik.

## 5. An /r/ kentañ


An /r/ kentañ, pe /r/ *kreñv*<sup>1</sup>, a vez dishañval e sanadur a-zoc'h an hevelep fonem en degouezhioù arall, a-barzh ur gaoz peotramant dindan levezon ur c'hemmadur dre vlotaat. D'ar liesañ e vez divouezh, pezh en eneba doc'h e stumm « blot »<sup>2</sup> hag a vez mouezhiet. Heverk eo e gwenedeg-izel ha klevet e vez get 35 komzour diàr an 38 studiet genomp, AH1892 é vout re dreut danvez e atersadenn evit gellout diguzhiñ ur skouer, hag AIO1944 ha G1952 é vout nevezvrezhonegourion anezhe.

1 CHEVEAU Loïc, 2011, op. cit.

2 Gober a raomp get ar ger /r/ « blot » da enebiñ doc'h an /r/ « kalet ». Gellout a raer kavout « gwan » enebet doc'h « kreñv » kement-arall.

Meur a sanadur a vez d'an /r/ kentañ, ha gelllet a raer er renkiñ dre goulpad get e stumm blot doc'h ma vez hugennel (dre daravat, dre fraoñval...) pe logigel (dre strakal, dre fraoñval, dre dostaat...). Dre ma kemma sanadur an /r/ kentañ hrevez an degouezh ha dre ma heulia lezenn ar c'hemmadurioù e c'heller lâret eh eus un alofonenn glokaus ag an /r/ kalet e gwenedeg-izel : saniñ [u.χo:'t] pe [u.ʁo:'t] a vercha dre gomz an diforc'h etre « ho rod » hag « o rod », pe « e rod » hag « he rod »<sup>1</sup>.

### Sanadur an /r/ kentañ



Gwelet a raer er brastres a-us an niver a gomzourion evit kement sanadur a zo bet klevet er standilhon. Ar stankañ é vout [χ] ha [ʁ], an div alofonenn stag doc'h ar ruzenn hugenn mouezhiet [ʁ] hag he stummoù bihanaet [ʁ̥] ha [ʀ̥]. An alofonennoù [r̥] ha [ʀ̥] a za en drivet plas, stag o-div doc'h ar c'hensonennoù logig, da lâret eo [r], [ʁ], pe [r̥] hag o stummoù bihanaet [r̥] ha [ʀ̥]. Ar soniad [r] a za da /r/ kentañ ivez, dre ziv wezh get BU1896 ha P1914 mes reoliekoc'h get P1914. Evit BU1896 e vez meur a sanadur d'an /r/ kentañ e gwirionez : [r] get *re* [re], [ʀ] get *ruz* [ʀy] ha c'hoazh [r̥] get *razh*. Lod ag ar gomzourion a ra get stummoù ag an daou rummad, èl LL1900 a sana ha [ʀe] ha [χe] evit *re* da skouer. Er pennad « le breton pourlet » get Dastum<sup>2</sup> e venega Maxime-Morvan Crahé ar soniad [x] ha n'eo ket bet klevet genomp – pe merchet er stumm-mañ atav : « Le maintien de plusieurs « r fort » à l'initiale réalisé [ʀ] ou [x] »<sup>3</sup>.

1 Skouerioù degaset en abadenn « Breton bas-vannetais : comment prononcer le « r » ? » get Serj Bozeg, skignet d'an 03.01.2020 à Radio Bro Gwened. Ar memes skouer a gaver e KERVELLA Frañsez, *Yezhadur bras ar brezhoneg*, op. cit. p.25  
 2 CRAHÉ, Maxime-Morvan, « Le breton pourlet », *Pays Pourlet – Chants et musiques du pays Pourlet*, Roazhon, Dastum, 2021, p.42-46  
 3 CRAHÉ Maxime-Morvan, *ibid.*, p.45

Evit a sella ar c'houlpadoù, eh a a-gevret ar sanadur hugennel [ɣ] pe [R] get ar stumm kalet [χ] pe [ʁ] d'ar liesañ. Hag ar sanadur logigel [r], [r] pe [r] get o stumm divouezh [ɿ], ha [ɿ]. Mes daoustoc'h da sanadur divouezh ar c'hensonennoù rotek evit an /r/ kentañ e vercher e vez c'hoazh stank implij ar stummoù mouezhiet (gw. ar grafik « hollad an alofonennoù dre zarempredoù » p.44). Kement-se a roa deomp da ouiet ne vez ket enebet plaen ar c'hensonennoù mouezhiet ha divouezh get ar gomzourion, èl get AI1896 a ra get *re* [re] ha *re* [ɿe] da skouer. Dre-se e tiskoueza bout dizingal talvoudegezh an alofonennoù divouezh en degouezh-mañ.

BU1907 ha B1911 a samma daou fonem da zistilhiñ an /r/ kentañ, dre ur wezh pep unan : *raok* [r̥χo:k] get BU1907 ha *raok* [h'ok] get B1911. N'eus ket ag an degouezh-se ken get ar gomzourion arall. Ar memes anadenn a oa bet merchet get Le Dû en NALBB<sup>1</sup>: [h̥ræhət] e parrez Laoulan da skouer. Dizingalded talvoudegezh an /r/ kentañ ha liessorted an alofonennoù a gasa ac'hanomp da glask kompren penn da emdroadur ar sanadur e brezhoneg Bro-Gwened Izel.

---

1 LE DÛ Jean, 1999, op. cit.

## IV - Emdroadur ar c'hensonennoù rotek e Bro-Gwened Izel

Goude bout renablet hollad an alofonennoù bet merchet get ar standilhon e Bro-Gwened Izel e vo keñveriet ar sanadurioù kenetre ar gomzourion.

### A - A barrez da barrez

Ar c'hartennoù da heul<sup>1</sup> a ziskoueza ar sanadur stankañ get ar gomzourion bet ganet en tri frantad termenet : 1892-1918 ; 1919-1943 ; 1944-1997. Da ziwall a zo get ar blezadoù meneget : n'int ket 'met blezadoù ganedigezh, ha pa za deomp displegiñ e ta kemm-mañ-kemm adal blez-mañ-blez e talva berped da vlezad ganedigezh. Ar cheñchamant gwir a zelea bout degouezhet -pe merchet atav- un nebeudig blezadoù àr-lerc'h marse, a pa oa daet ar gomzourion àr o oad. A-bouez eo derc'hel soñj ne vez ket tennet kont 'met ag ur c'homzour bennak dre barrez evit pep prantad d'ar liesañ (mes daou en Arzhanaou, daou e Persken ha daou en Ignel evit 1892-1918 da skouer). Ha n'eo ket arouezius moarhat a razh ar vrezhonegourion bet ganet er parrezioù-se er blezioù meneget. Ne roa ket 'met ur soñj deomp a besort kensonenn rotek a c'helle bout klevet er blezioù-hont. Oc'hpenn kement-se emañ bet renket ar c'hensonennoù rotek e daou rummad genomp evit gallet diverriñ an traoù ; mes just-èl eh eus bet resisaet c'hoazh e vez dalbezhe meur a soniad get pep komzour hag e pep parrez hep mar. Al1895 a ra get ar rummad [r] da skouer, mes donet a ra [ʀ] getoñ en degouezh /BrK/ dre ur wezh en arroudenn dielfennet (get ar gaoz « ajournet » ['aju:ʀnø]). En tu kontrol e ra S1943 get rummad an [ʀ] plaen mes donet a ra un [r] geti er gaoz : « breton » [brætɔn], dre ur wezh ivez.

E rummad an [ʀ] – pe rummad ar c'hensonennoù hugenn- e c'heller kavout [ʀ], [ʀ̥], [ʀ̥̃], [ʀ̥̃̃], [ʀ̥̃̃̃] ivez. Hag e rummad an [r] -pe rummad ar c'hensonennoù logig- e c'heller kavout [r̥], [r̥̃], [r̥̃̃], [r̥̃̃̃] ivez. Evit ar skouerioù distoket er studiadenn-mañ atav. Ar soniad [w] a za plaen en daou rummad.


---

1 Kartenn 2 p.52, kartenn 3 p.53 ha kartenn 4 p.54.

2 Hag ar stummoù divouezh, bihanaet ha bihanaet divouezh

## 1. Ar rummad 1892-1918

17 komzour a voueta ar gartenn gentañ : 5 e Bro an Oriant (Gwidel, Plañvour, an Oriant, daou en Arzhanaou), 11 er Vro Pourlet (Mêlann, Berne, Prizieg an Ignol, Laoulan, daou en Ignel, daou e Persken, daou e Bubri, ) ha P1914 e Ploue (ar barrez a zo e Bro an Oriant mes he c'hêriadenn c'henidik a ziskoueza tenniñ da vrezhoneg ar Vro Pourlet kentoc'h). Evit ar c'homzour genidik ag an Oriant, O1918, e tiskoueza bout aesoc'h dezhoñ tremen dre ar galleg evit kavout gerioù ' zo : *grand-père* e lec'h « tad-kozh », *mari* e lec'h « gwaz » ; oc'hpenn un dornad farioù yezhadur : « triwec'h saout », pe « ma zorn » da skouer. Donet a ra kaozoù alamanek dezhoñ zoken (« un *drei kilometer* »), pezh a c'hella talviñ e vehe bet kollet dezhoñ an akustumañs da vonet e brezhoneg da vare an enrolliñ (1994).



Kartenn 2 : Sanadur stankañ er parreziou, get ar rummad 1892-1918


E-pad ar prantad 1892-1918 e tiskoueza bout splann a-walc'h an disparti etre Bro an Oriant er c'hreisteiz hag ar Vro Pourlet en norzh. Komzourion Bro an Oriant é c'hober get ar c'hensonennoù hugenn ha re ar Vro Pourlet é c'hober get ar c'hensonennoù logig. An diforc'h-mañ a zo bet meneget get Cheveau ivez, a-zivout an /r/ kreñv :

« La prononciation bretonne ancienne était vraisemblablement un r roulé alvéolaire sourd,

comme en gallois. Cette prononciation existe encore chez les locuteurs qui prononcent les r de façon alvéolaire. Nous n'en avons pas entendu chez les locuteurs lorientais, mais à Bubry et à Inguiniel (dans la zone bas-vannetaise également, mais plus au nord) chez des locuteurs très âgés. »<sup>1</sup>.

Parrez Ploue a zo bet renket amañ e rummad an [r] abalamour da b/P1914, komzourez bet ganet e norzh ar barrez, en tu arall d'ar Skorv, tost doc'h ar vevenn etre Ploue hag an Ignel ; ur lodenn ag ar barrez hag a vez lakaet er Vro Pourlet<sup>2</sup>. Na bout e rummad an [r] e ta dezhi [ɣ] hag [ʁ] lies a-walc'h ivez (e razh an degouezhioù nemet en /r/ kentañ, [r] anezhoñ). N'eo ket sur e vehe bet hañval an disoc'h get ur c'homzour a su ar barrez pe ag ar vourc'h, da skouer. Parrez an Arzhanou, touch doc'h Ploue, a zo he daou gomzour e rummad an [ɣ] èl restad Bro an Orient. Da notenniñ eh eus AH1892 en o mesk, komzour koshañ ar studiadenn, kensonennoù hugenn dezhoñ ha heñv genidik ag an Arzhanaou just a-walc'h.

## 2. Ar rummad 1919-1943



*Kartenn 3 : Sanadur stankañ er parrezioù get ar rummad 1919-1943*

Er blezioù 1919-1943 e vercher un emdroadur splann er Vro Pourlet pa ya ar gomzourion get rummad an [ɣ], èl e Bro an Orient. Ar cheñchamant-mañ a za adal PSK1923.


1 CHEVEAU Loïc. *Approche phonologique, morphologique et syntaxique du breton du Grand Orient (basvannetais)*. Linguistique. Université Rennes 2, 2007. Français. tel-00189941v2, p.93

2 ELUDUT Jean-Paul, « Le Pays Pourlet », *Pays Pourlet – Chants et musiques du pays Pourlet*, op. cit., p.8-12.

Rummad an [r] a ya àr zisteraat en un doare trumm a-walc'h àr-hed ugent vlez (etre ar blezioù 1900 hag ar blezioù 1920). Betek 1914 emañ sanadur stankañ 14 komzour diàr 18 hag adal 1919 ne choma ket 'met 2 gomzour diàr 13 é kaout ar c'hensonennoù logig da sanadur stankañ. E parrez an Ignel e kaver an daou gomzour-mañ : AI1919 hag AI1923. Mes AI1937 a ra get ar c'hensonennoù hugenn hep tamm roud erbet ag ar c'hensonennoù logig. Goulakaat a raomp e vehe bet ag ur c'hemm er sanadur etre 1923 ha 1937 en Ignel da neuze. Estroc'h evit an Ignel e ta [ʁ] d'ar muiañ e razh ar parrezioù, get 11 komzour diàr an 13 ganet etre 1919 ha 1943. Ha memes AI1919 hag AI1923 a ra un tammig get ar soniadoù [ʁ] ha [r], en degouezh /BrK/ dreist-holl. Ar soniad [ʁ] ne vez ket kavet ken adal 1919 get ar gomzourion bet dielfennet o sanadur. Daet e oa en degouezhioù /krB/ ha /BrK/ get B1911 ha ML1914. Bout a vez c'hoazh a [ɹ] newazh, get AI1923 en degouezhioù /Br/, /BrB/ ha /KrB/.

Kement komzour a zo a ra get un /r/ kentañ dishañval a-zoc'h en degouezhioù arall dre ur wezh a-c'hwel. Evit ar c'hensonennoù hugenn e kaver [χ] pe [ɣ] hag evit ar c'hensonennoù logig e kaver [ʃ] ha/pe [ʒ] (an daou a za get AI1919). N'eus ket ag ar soniad [r] da /r/ kentañ ken, pa oa anezhoñ get BU1896 ha P1914.

### 3. Ar rummad 1994-1997



*Kartenn 4 : Sanadur stankañ er parrezioù get ar rummad 1944-1997.*

Adal 1944 ha betek 1997 en em gaver get ur rummad nevezvrezhonegourion, dre m'o deus-holl bet desket brezhoneg da eil yezh. Nemet evit LS1989 bet desket a-vihan mes e gerent o doa bet desket àr an oad ivez, pezh a ra anezhoñ un nevezvrezhonegour a-vihanik. Heverk eo emdroadur ar sanadur a pa seller doc'h ar gartenn : aet rummad an [r] da get hrevez an dailh. Na bout rummad an [ʁ] ar stankañ e choma bras an arlivoù alkent. Diàr an 8 komzour e ta ar gensonenn logig dre strakal [r] get 3 anezhe : G1952, AI1966 ha PSK1980, an tri nemete ha n'int ket bet ganet e Breizh mes daet d'en em staliñ àr an oad. Pep unan en deus divizet deskiñ brezhoneg e barrez annez é vonet e darempred get komzourion a-vihanik, doc'h pezh o deus displeget en atersadennoù bet kaset. Un elfenn arall a seblanta donet àr-glev get ar rummad-mañ en taol kentañ : kemmesk etre ar ruzenn hugenn mouezhiet [ʁ] hag ar ruzenn ouel divouezh [x] : *Nebeutoc'h* [nøbøtɔʁ] get P1997, *burev* [byxɛʁ] get LS1989, *Breizh-Veur* [bʁɛ:ʁ.vœ:ʁ] get AI1966, *meur a wezh* [mœxawɛx] get LV1958... Mes n'eus ket un anadenn nevez a gement-se newazh. Rak eskemmoù etre [ʁ] ha [x] a gaver get gozik razh komzourion ar standilhon, é krogiñ get AI1895 *lec'h* [le:ʁ]. N'eus ket nemet 12 komzour ha ne ra ket tamm kemmesk erbet etre an daou fonem-se en arroudennoù dilefennet, diàr 38 den. Malachy McKenna a venega ar c'hemmesk-se ivez e parrez ar Gemene : « [h] and [r] may interchange : ['tre'var 'vle] trihueh vle, 'eighteen years'. ['pa<sup>h</sup>,don] pardon, local (religious) festival »<sup>1</sup>. Merchet eh eus bet *tregont* [t<sup>h</sup>əgɔ̃n] get BU1907 da skouer.

Un elfenn nevez a za adal 1944 : an degouezh /kr/, mut e brezhoneg doc'hreizh a za àr-glev get PSK1980 : *sukr* [sykx] hag AIO1944 *kilometr* [kilomɛtʁ]. O-daou e ouiont skriviñ ha lenn brezhoneg ; ar sanadur-se a c'hellahe donet diàr levezon ar reizhskritur, a c'houlakaomp, kement èl diàr ar sanadur gallek a zo doc'htoñ en degouezh-se, èl get *quatre* treuzskrivet [k<sup>h</sup>atʁ] er lec'hienn *Soundcomparison* da skouer.

---

1 McKENNA Malachy, *The Breton of Guemene-sur-Scorff, part I*, in *Zeitschrift für celtische Philologie*, 1976, p.59.




## B - Emdroadur hollad an alofonennoù

Renablet eh eus bet hollad an alofonennoù ha lakaet àr-wel an emdroadur a barrez da barrez etre ar rummadoù hugenn ha logig. Sellomp bremañ doc'h emdroadur hollad an alofonennoù kenetre an tri rummad komzourion. Ar grafiek da heul a ziskoueza razh ar c'hensonennoù rotek bet merchet evit pep rummad komzourion, ne verna ket e pesort degouezh e vehe.

### Hollad an alofonennoù

Soniadoù daet ur wezh a-c'hwel get ar gomzourion renket dre rummadoù



Diàr hollad an alofonennoù -diliamm pe klokaus- e vercher un emdroadur a rummad da rummad. Etre en daou vrezel (1919-1943) eh a ar gensonenn logig dre dostaat (mouezhiet ha divouezh dispis [ɹ] ha [ɹ]) diàr-wel. Digresket eo ar stumm spis [ɹ] a-galz er rummad-mañ ivez, é vout ne vez klevet nemet get AI1923. Un digresk heverk a zo get ar c'hensonennoù logig èl bet merchet en emdroadur a barrez da barrez mes donet a ra [r] get 6 komzour alkent. Kement-se daoustoc'h d'ar gensonenn logig dre strakal [r] bout sanadur stankañ daou anezhe hepken newazh. Doc'h an tu arall eh eus ur c'hresk splann get ar ruzenn hugenn divouezh kreñv [χ]. Ar gensonenn hugenn mouezhiet [ɸ] hag he stumm bihanaet a choma an alofonenn stankañ en daou rummad 1892-1918 / 1919-1943. Rak daoust mand eo boutinoc'h ar sanadur logigel e-raok ar Brezel Bras e vez ag ar ruzenn hugenn mouezhiet get 14 komzour diàr 17 na pa vehe ur wezh bennak a-c'hwel. Betek 16 eh a an niver anezhe evit ar stummoù bihanaet [ɸ] ha [ɸ]. Evit ar gensonenn gweuz-drekstaon dre dostaat mouezhiet [w] hag he stumm dispis e ta stank en daou rummad mes lies ne vez ket nemet get ar ger *graet* e gwirionez. N'eus ket

nemet PSK1907-02 ha P1914 hag a ra geti e gerioù arall : *labourizion-douar* [labu:ˈwizjãn.dwa:r] ha *Santez-Barban* [bawbã̃n].

Get ar rummad 1944-1997 e vez nebeutoc'h a liessorted : aet ar gensonenn logig dre fraoñval divouezh [r̥] da get, àr un dro get ar gensonenn logig dre strakal divouezh [r̥] ivez. Bihanaet eo implij [w], chomet er ger *graet* hepken. Memes tra get [ʁ], [ʁ̥] a zo digresket o implij. Kresket eo kani ar ruzenn ouel divouezh [x]. Ar ruzenn hugenn mouezhiet [ʁ] hag he stumm divouezh [ɣ] a choma stabil o implij, èl ar ruzenn hugenn dre fraoñval [ʁ] ivez dre ma ta get 3 c'homzour diàr an 8.

N'eo ket aet ar c'hensonennoù logig da get newazh, kontrel d'ar pezh hor behe gelllet goulakaat é sellet doc'h an emdroadur a barrez da barrez : 3 c'homzour diàr 8 a ra get [r] ur wezh a-c'hwel ha daou get stumm bihanaet ar gensonenn logig dre fraoñval mouezhiet [r̥].

Sanadur ar ruzenn ouel divouezh [x] a za muioc'h get ar rummad nevezvrezhonegourion en degouezh /BrB/ : *burev* [byxɛv] get LS1989, *keroc'h* [tʃɛxɔx] get BU1971, *meur a wezh* [mœxawɛx] get LV1958, *perak* [pə'xɛk] get AIO1944. Get an daou rummad arall ne oa ket daet nemet en degouezh /KrB/ : *etre* [txɛ] get PA1902 da skouer ; hag en degouezh /Br/ : *hanter* ['hãntœx] get O1918 da skouer. Ha gwezh erbet ne za [x] get ar gomzourion a ra d'ar stankañ get rummad ar c'hensonennoù logig.

## CH - Emdroadur an /r/ kentañ

E adembannadur an *Dictionnaire breton-français du dialecte de Vannes de Pierre de Chalon* get Joseph Loth e keñveria-heñv ar sanadurioù brezhonek ha kembraek : « *Rh, ll, mh, nh* n'ont pas d'équivalent en breton : ce sont des *r, l, m, et n* sourds »<sup>1</sup>. An displegadenn-mañ a c'hella bout souezhus pa ouier e oa Joseph Loth genidik a barrez ar Gemene, lec'h ma veze ag an /r/ kreñv hrevez Malachy McKenna : « [r] is rarely found in absolute initial position, and if so it generally becomes [hr] »<sup>2</sup>. Pe c'hoazh : « when [h] occurs before [r] it is a voiceless fricative. There may be svarabhakti ; see the last example below. [hre fal] re fal, 'too bad'. [e'hro.] erauk, 'before'. [mahrid] ma ret, 'it is necessary' »<sup>3</sup>.

1 LOTH Joseph, *Dictionnaire breton-français du dialecte de Vannes de Pierre de Chalons réédité et augmenté*, Rennes, J. Plihon et L. Hervé, libraires-éditeurs, 1895, p.108.

2 McKENNA Malachy, 1976, op. cit., p.42.

3 McKENNA Malachy, 1976, ibid., p.57

Get komzourion ar standilhon e ta plaen ur stumm kreñv ag an /r/, zoken mar n'eo ket divouezh dre ret. Mes ne za ket get daou gomzour : AIO1944 ha G1952, a ra get ar memes alofonenn [ʀ] en degouezh /rB/ èl en degouezhioù arall. Get lod ag ar gomzourion e vez reoliek sanadur kreñv an /r/ kentañ (divouezh, hir pe taol-mouezhiet) mes get re arall e c'heller kavout ur sanadur blot hag ur stumm kalet àr un dro.

### 1. Ar rummad 1892-1918

An daolenn amañ-dindan a renabla an alofonennoù daet get pep komzour evit an /r/ kentañ. N'eo ket bet tennet kont a AH1892 nag a GW1893 dre ziover a ditouroù.


Komzour	Alofonennoù kalet evit an /r/ kentañ	Alofonennoù blot evit an /r/ kentañ
AI1895	re [ʀe], ret din [ʀətɛɲ]	
AI1896	re [ʀe]	re [re]
BU1896	ruz [ʀy], redek [r]	razh [ɹ]
LL1900	raok [ʀ], raok [ʀ], roet [ʀ], re [ʀe]	
PZ1902	re [ʀe], re gozh [ʀe.gux]	roet [ʀɛj], re [ʀe]
PA1902	Revolusion [ʀevolysjon]	
AH1904	re [hʀe], Ru-Ele [ʀiɛ'le], Ru-Ele [ʀyele]	razh [ʀax]
AIO1905	roet [ʀɛj],	rod [ro: <sup>d</sup> ]
BU1907	raok [ʀɔ:k], re [ʀe]	
PSK1907-01	roet [ʀ]	razh [r],
PSK1907-02	ret [ʀɛt], ront [ʀɔ̃n], reprochet [ʀəprɔʃɛt], ret dezhoñ [ʀɛtə'hɔ̃]	re [re], ret [ʀɛt], ret din [ʀɛɲ]
B1911	re [ʀe], hrevez [ʀəvɛ], raok [h'ok], raok [ʀok], reglet [ʀe:glɛt]	
ML1914	ret eo [ʀə'di] ; raok [ʀok]	
P1914	re [re]	
O1918	raok [ʀɔ:k]	reiñ [ʀ]

Evit ar rummad 1895-1918 eh eus 7 komzour hag a ra get ur stumm kalet plaen da

zistilhiñ an /r/ kentañ. An 8 komzour arall a ra -ur wezh a-c'hwel- get ur stumm blot alkent, doc'hpenn ar stumm kalet. 11 den diàr 15 a ra get meur a stumm kalet ha n'eus ket nemet 2 gomzour hag a ra plaen get ur stumm kalet hepken hep ket a stumm blot : PA1902 ha P1914. Amañ-dindan ur grafik da renabliñ ar c'houlpadoù /r/ kentañ – sanadur stankañ evit re ar c'hensonennoù logig. Dre ma ya ar c'hensonennoù logig àr zibaotaat eh a o stumm kalet àr zibaotaat kement-arall dindan an eil rummad.

### Koulpadoù /r/ kentañ ha sanadur stankañ

Disoc'hoù e-touesk ar rummad [r]



Gwelet a raer eh a an alofonennoù àr ralaat evit en em gavout get ur c'houlpad [r]/[r̥] ha [r]/[r̥] adal 1919. Ar gensonenn logig dre fraoñval [r] a za da /r/ kentañ get daou gomzour er rummad 1892-1918 mes n'eus ket mui anezhi adal neuze.

## 2. Ar rummad 1919-1943

Ar cheñchamant rummad kensonennoù a adkaver get sanadur an /r/ kentañ er rummad 1919-1943 :

Komzour	Alofonennoù kalet evit an /r/ kentañ	Alofonennoù blot evit an /r/ kentañ
AI1919	raok [r̥ok] ; razh [r̥ax] ; ret [r]	ret [r̥eˈ]
PEN1921	raok [χok]	rae ket [ʁ]
AH1921	raok [ʁok]	
PSK1923	re [χe]	Raoul [ʁ]

AI1923	re [ɾ] ; Roet deomp [ɾɛjdum] ; Hrevez [ɾ]	re [ɾ]
KL1929	re [χe]	ret [ɸ]
AIO1931	roet deomp [χɛj'tum] ; razh [ɾ]	re [ɸ]
KD1933	repliet [χøpli:ət] ; razh [ɸa <sup>h</sup> ]	
S1934	re a oa [χe]	re [ɸ]
PEN1935	re [χe] ; redek [ɸidɛk]	
B1935	raok [χok]	
AI1937	raok [χok]	
S1943	re [χe] ; ho revr [ɾɛ:ɸ]	

Er rummad 1919-1943 eh eus 6 komzour diàr 13 hag a ra get ar stumm kalet plaen evit an /r/ kentañ. Ar stumm a za ar stankañ é vout ar ruzenn hugenn divouezh kreñv [χ], pezh a zo da vout liammet doc'h emdroadur hugennel ar sanadur èl bet gwelet uheloc'h. 3 anezhe ne ra ket nemet get an alofonenn [χ] pe [ɸ] hep gober get ur stumm blot bennak en degouezh /rB/. Hañval a-walc'h e tiskoueza bout disoc'hou an daou rummad a-fet implij an /r/ kentañ àr-bouez ar liessorted a alofonennoù aet àr zigreskiñ. Evit a sella PEN1921 e ta ar skouer « rae ket glav [ɸ] ». Da welet mar gella bout lakaet da /r/ kentañ ur sort pe mar bez dindan levezon ur c'hemmadur dre vlotaat daoustoc'h da ezvezañs ar rannig-nac'h « ne » er yezh komzet. Doc'h an tu arall e ra S1943 get [ɾ] er bomm « ho revr » [ɾɛ:ɸ]. Ar perc'henniñ « ho » a galeta ar gensonenn d'e heul pe he dalc'ha kalet, dre-se e c'heller tenniñ kont ag ar sanadur-mañ just-èl un /r/ kentañ.

### 3. Ar rummad 1944-1997

Gwelomp bremañ taolenn an drivet rummad :


<b>Komzour</b>	<b>Alofonennoù kalet evit an /r/ kentañ</b>	<b>Alofonennoù blot evit an /r/ kentañ</b>
AIO1944		[ɸ]
G1952		[ɸ]
LV1958	raok [ 'rok]	
AI1966	rankontret [ɸãnkõ:tɸət] ; re [ɾɛ]	re [ɸɛ]

BU1971	reiñ ['ʁɛ̃ɲ] : hrevez [χ]	redok ['ʁi:dɔk]
PSK1980	raok ['χok]	razh [ʁaʁ]
LS1989	roet deoc'h ['ʁɛjtɔx]	rummad [ʁ]
P1997	re ['ʁe]	raok [ʁo:k]

Heverk eo an daou gomzour AIO1944 ha G1952 ha n'eus ket a stumm kalet d'o /r/ kentañ, perzh dibar e-keñver ar rummadoù arall. Ar gensonenn hugenn dre fraoñval mouezhiet [ʁ] a za muioc'h evit er rummadoù arall, get S1943, LV1958 hag AI1966, da stumm kalet [ʁ]. N'eus ket nemet get LV1958 ha n'eus ket a stumm blot d'e /r/ kentañ ; da ouiet a zo en deus bet desket brezhoneg dre soubidigezh en e barrez c'henidik en un endro brezhonek a pa oa yaouank. Dibaotoc'h eo ar ruzenn hugenn divouezh kreñv [χ] evit er rummad kent : ar ruzenn hugenn divouezh gwan [ʁ] eo a za ar muiañ. Da lâret eo e vez nebeutoc'h a nerzh er sanadur get ar rummad-mañ. Razh an alofonennoù renablet evit an /r/ kentañ a zo hugennel, pezh a vercha ur cheñchamant e-keñver ar rummadoù kent ivez. Talvoudegezh an /r/ kentañ a ziskoueza mont diàr-wel ha chom get un nebeud gerioù en ur stumm skornet, èl raok ['χok] get PSK1980 da skouer. Un anadenn meneget get Maxime-Morvan Crahé evit brezhoneg Langedig, e Bro-Gwened Uhel<sup>1</sup>.

### Koulpadoù /r/ kentañ ha sanadur stankañ

#### Disoc'hoù e-touesk ar rummad [ʁ]



<sup>1</sup> « Le /r̥/ peut être réalisé [r̥] ou [ʰr], fort en initiale pure, ou résultat d'une mutation par projection comme nous l'avons déjà évoqué, mais sa pertinence semble se perdre. [...] Sa réalisation forte, non issue de mutation, bien que constatée semble être assez aléatoire, ou figée sur certains mots, ou propre à certains locuteurs.», CRAHÉ Maxime-Morvan. *Le breton de Languidic : étude phonétique, morphologique et syntaxique d'un sous-dialecte du breton vannetais*. Linguistique. Université Rennes 2, 2013. Français. NNT : 2013REN20062. Tel-00976584 p. 139-140

Amañ a-us ur grafik da daolenniñ emdroadur ar c'houlpad /r/ kentañ – sanadur *stankañ* get ar c'hensonennoù hugenn. Heverk eo kresk ar liessorted adal 1944 ha digresk sanadur ar ruzenn hugenn divouezh kreñv àr an dro.

## C'H - Kensonennoù rotek mutet

En degouezhioù /KrB/ ha /BrK/ e vez stank ar gomzourion é vutiñ an /r/ er standilhon : 19 er gra ur wezh a-c'hwel en degouezh /KrB/ ha 13 evit /BrK/. Tolpet e vo hon evezh àr ar mutadur get ar ger-mell amresis, get an anv-verb *debriñ* hag ar gerioù *netra*, *petra* ha *bremañ* a dalvay da skouer deomp evit meiziñ mutadur ar c'hensonennoù rotek e Bro-Gwened Izel.

### 1. Sanadur an /r/ er ger-mell amresis

Evit an degouezh /BrK/ mut an /r/ ennoñ e vercher e ta lies get sanadur ar ger-mell amresis : *ur fetan* [u.fõtã:n] get BU1896, ur bochad [o.bofat] get LL1900, *ur sac'had* [u.sahat] get PSK1907-01. En daolenn da heul eh eus renablet sanadur ar ger-mell amresis get ar rummad kentañ (1892-1918). Ur skouer a zo bep taol ma vez mutet an /r/ pe ma vez sanet. Ar c'hombodoù goulle a vercha n'eus ket daet skouer erbet ag ar sanadur buket en arroudenn dielfennet.

#### a. Ar rummad 1892-1918

Komzour	Ger-mell amresis mutet e /r/	Ger-mell amresis sanet klok
AH1892		<i>ur plac'h</i> [oʁ.plax]
AI1895	<i>ur blez</i> [o.ble]	<i>ur blez</i> [r]
AI1896	<i>ur sort</i> [u.sõ:ʃ]	<i>ur lojeris</i> [r]
BU1896	<i>ur fetan</i> [u.fõtã:n]	<i>ur bochad</i> [r], <i>ur sort</i> [r]
LL1900	<i>ur bochad</i> [o.bofat]	<i>ur vatimant</i> [r] (kanet)
PZ1902	<i>ur gêr vras</i> [o.dʒe:r.vraʷs]	<i>ur breur</i> [oʁ.brø:r]
PA1902		<i>ur sous-marin</i> [ʁ]
AH1904		<i>ur sort</i> [uʁ'sõ:ʁt]
AIO1905	<i>ur bochad ya</i> ['o.bo.ʃa:d.ja]	
BU1907	<i>ur sort</i> [u.sõ:ʃt]	<i>ur marc'hadour</i>

		[ur.mar <sup>h</sup> adu:r]
PSK1907-02	<i>ur sort</i> [u.sɔ: <sup>kd</sup> ]	
PSK1907-01	<i>ur pezh</i> [u'pɛx]	<i>ur c'hole</i> [urho:le]
ML1914		<i>d'ur marc'hadour</i> [dur.mar <sup>h</sup> adu <sup>r</sup> ]
P1914	<i>ur c'hoad</i> [o. <sup>h</sup> wɛt]	
O1918		<i>ur wagon</i> [ɔb'va.gɔn]

GW1893 ha BU1911 n'eo ket daet ar ger-mell amresis gete en arroudennoù dielfennet ha dre-se n'int ket bet ebarzhet en daolenn. Evit PA1902 eh eus bet merchet : *ur c'hard-eur* [ɔχakdœʁ] hag *ur c'hurase* [ɔfiyka'se]. Ne vez ket klevet ar gensonenn rotek en he-unan mes ar fonemoù [χ] ha [h] a c'hella gober dave da sammadenn an div gensonenn /r/ ha /h<sup>1</sup>/. Get AIO1905, PSK1907-02 ha P1914 n'eo ket bet merchet degouezh erbet ma veze sanet /r/ ar ger-mell amresis ; dre ur wezh e ta ar gensonenn logig dre fraoñval mouezhiet [r] get AIO1905 er gaoz *ur retred* [r], a c'hellahe bout komprenet èl sammadenn an daou /r/ mes re ziasur eo deomp evit en ebarzhiñ en daolenn rak ne za ket skouer arall erbet getoñ.

Doc'h an tu arall eh eus pemp komzour hag a sana plaen an /r/ er ger-mell amresis : AH1892, PA1902, AH1904, ML1914 hag O1918, da lâret eo komzourion Bro an Oriant hag a ra get ar c'hensonennoù hugenn. Àr-bouez get ML1914 mes posubl eo e vehe dre ziover a skouerioù evitoñ-diwezhañ rak ne za ket nemet ur skouer get ar ger-mell amresis en arrouden dielfennet. Goulakaat a c'hellomp gober e vehe daet ur skouer bennak ag un /r/ mutet er ger-mell amresis getoñ èl komzourion arall ar Vro Pourlet. Sklaer eo atav an enebiezh a zo a-barzh amañ etre an daou c'heolekt (Bro Pourlet ha Bro an Oriant), evit ar rummad kentañ.

### b. Ar rummad 1919-1943

Komzour	Ger-mell amresis mutet e /r/	Ger-mell amresis sanet klok
AI1919	<i>ur sort</i> [o.sɔ: <sup>st</sup> ]	<i>ur steud</i> [oʁ.fʰtø <sup>t</sup> ] ; <i>ur sort</i> [y <sup>r</sup> .sɔrt]
PEN1921	<i>ur sort</i> [o.sɔ: <sup>st</sup> ]	<i>ur jav</i> [ʁ] ; <i>ur sort</i> [oʁ.sɔʁt]
AH1921	<i>ur sort</i> [o.sɔ: <sup>st</sup> ]	<i>ur sort</i> [u <sup>r</sup> .sɔʁt]
PSK1923	<i>ur verc'h</i> [ovɛx]	<i>ur bochad</i> [ʁ]
AI1923	<i>ur sort</i> [u.'sɔ:rt]	

1 Gwelet ar pennad gloestret d'ar c'houlpad /rh/



KL1929		<i>ur vered</i> [ʊʁ.vɛ:ʁɛt]
AIO1931	<i>ur sort</i> [u.sɔ:ʁt]	
KD1933	<i>ur sort</i> [o.sɔʁt]	<i>ur vaouez</i> [oʁ'vuɛ:s]
S1934		<i>ur bochad</i> [ʁ]
PEN1935	<i>ur sort</i> [o.sɔʁt]	<i>ur yoc'h</i> [ʁ]
B1935	<i>ur sort</i> [u.sɔ:ʁt]	<i>ur verje</i> [ʁ]
AI1937	<i>ur sac'h àr ho penn</i> [o.'sa:ho pen]	<i>ur wezh</i> [oʁ.ʁɛʃ]
S1943	<i>ur sort</i> [u.sɔ:ʁt]	<i>ur verc'h</i> [yʁ.vɛʃ]

Get AI1923 e ta *ur c'horve* [o.hɔʁve] ; er skouer-mañ emañ lakaet an /r/ da vut genomp rak get kaozoù ' zo e ta geti an diforc'h etre /r/ ha /h/ èl get *torzhou* [tɔʁhɔw] da skouer. Get S1934 e ta an alofonenn [χ] get *ur re* [oʁɛ] a c'hellahe bout sammadenn an div ruzenn hugenn mes n'eo ket bet gwirieket kement-se get skouerioù arall newazh. Douetañs a zo deomp get sanadur PEN1935 evit ar ger-mell amresis en arroudenn dielfennet dre ma ne za ket nemet ar gensonenn dispis [ʁ] dezhi mes lakaet eo bet en daolenn amañ a-us ur sort.

Evit a sella emdroadur ar sanadur amañ e weler emañ chomet AI1923, KL1929 hag AIO1931 get modell ar rummad 1892-1918, hè é vout a-barzh pep a vro hag é terc'hel d'ur sanadur reoliek a-walc'h. Daoustoc'h da AIO1931 gober get kensonennoù hugenn, pezh a ziskoueza bout dibaot en e barrez get ar rummad kent. S1934 a ra plaen get ur ger-mell amresis distaget ha sanet an /r/ ennoñ, hugennel anezhoñ ivez. Evit ar gomzourion arall e talc'hont d'ar gensonenn hugenn mouezhiet [ʁ] a pa lakaont an /r/ àr-glev er ger-mell, nemet get AI1919 a ra ivez get ar gensonenn logigel dre fraoñval bihanaet doc'hpenn ar ruzenn hugenn. Achu get ar gensonenn logig dre strakal er ger-mell èl a veze er rummad kent.

#### ch. Ar rummad 1944-1997

Komzour	Ger-mell amresis mutet e /r/	Ger-mell amresis sanet klok
AIO1944	<i>ur c'hambr</i> [əhãpʁ]	<i>en ur vont</i> [ʁ]
G1952	<i>ur wezh</i> [o.wɛʃ]	<i>ur bochad</i> [yʁboʃat] ; <i>ur wezh</i> [ʊʁwɛʃ]
LV1958		<i>ur vicher</i> [oʁ.vəʃɛʃ]
AI1966		<i>ur sort</i> [ʁ.sɔʁt] ; <i>ur stêrig</i> [ɔʁ.ʃtɛrɛʁɪʃ] (kanet)

BU1971		<i>ur breur</i> [yʁ.bʁøːʁ]
PSK1980	<i>ur sort</i> [o.sɔʁt]	<i>ur skol</i> [oʁ.skol]
LS1989		<i>ur blez</i> [yʁ.ble]
P1997		<i>ur sort</i> [uʁ.sɔʁt], [ux.sɔʁt]

Evit AIO1944 ne za ket nemet ur skouer ag ar gensonenn vutet er ger-mell amresis, en degouezh /rh/. Heverk eo sanadur ar vogalenn [ə] er ger-mell getoñ, pezh a c'hellahe bout tostoc'h doc'h ur sanadur standard evit doc'h kani Bro-Gwened Izel pa geñverier get ar gomzourion arall. Get LS1989 e ta ar fonem [x] en degouezh /rh/, pezh a sava un diforc'h heverk e-keñver ar gomzourion arall : *ur c'hant bugel* [y.xãn.byɛl]. Ar memes anadenn a za get P1997 ivez : *ur c'hrepri* [o'xɛpʁi]. Mont a ra P1997 pelloc'h c'hoazh é c'hober [x] ag an /r/ er ger-mell, dre ur wezh : *ur sort* [ux.sɔʁt].

Evit a sella an emdroadur hollek e vercher eh eus 5 komzour diàr an 8 hag a sana plaen an /r/ er ger-mell amresis, pezh a ziskoueza bout stank dre geñveriiñ get an daou rummad kent (5 diàr 15 e 1892-1918 ha 2 diàr 13 e 1919-1943). Ar gensonenn logig dre strakal a za en-dro er ger-mell amresis get AI1966 mes en ur stumm kanet. Dre gomzal e ra get ar ruzenn hugenn mouezhiet èl komzourion arall e rummad.

Dre sellet doc'h an disoc'hoù-mañ e vercher eh eus ag un anadenn lec'hel a vutadur an /r/ er ger-mell amresis er rummad kentañ : mutet er Vro Pourlet (mes hep ne vehe ingal d'ar liesañ) ha sanet e Bro an Oriant. Adal an eil rummad eh eus komzourion a Vro an Oriant é vutiñ an /r/ er ger-mell amresis mes razh e raont kentoc'h get ar ruzenn hugenn mouezhiet. Liessorted an alofonennoù a ya àr-vihanaat hag ar gensonenn logig dre strakal a ya diàr-wel. Kement èl an hani dre dostaat a ziskoueze bout ral er rummad kentañ enta. Get an drivet rummad e vez nebeutoc'h a vutadur get ar ger-mell amresis, ne verna ket e pesort bro e vehe. Ar ruzenn hugenn mouezhiet a zo trec'h mes ar ruzenn ouel divouezh a za àr-wel get ar c'homzour yaouankañ. Evit ar gensonenn logig dre strakal e seblanta distreiñ mes sanet dre ganal an taol-mañ.

## 2. Sanadur ar ger *debriñ*

E-mesk ar gerioù mutet an /r/ enne e ta ar ger *debriñ* er standilhon, mut an /r/ ennoñ plaen : *da zebriñ* [zɛːbɛ̃ɲ] get PA1902, *debriñ* [deːbɛ̃ɲ] get BU1907, *debriñ* [dɛːbɛ̃ɲ] get

AIO1944 ha *debriñ* [debɛ̃ɲ] get LS1989. N'eus ket 'met un nemedenn get AIO1944 get ar ger *sal-debriñ* ma ta un [ʁ] ennoñ. Da ouiet a zo e ouia AIO1944 skriviñ brezhoneg hag en deus bet desket àr an oad dre gentelioù ; na posubl e vehe bet levezonet er skouer-mañ get reizhskritur ar ger. E geriadur Chalons klokaet get Loth e kaver ar skritur « daibrein » ha « debri »<sup>1</sup> hag e kani Gregor Rostrenn e kaver « daibrein »<sup>2</sup>. Ar gensonenn rotek a hañvala bout perzh ag ar ger-mañ a-gozh neuze, a-c'hwel e-touesk an dud desket ag o amzer. Da gompren mard eo mutadur an /r/ er ger-mañ ur perzh lec'hel, e c'hellomp keñveriñ get an daou *Atlas Linguistique de Basse-Bretagne* a vercha pishoc'h stummoù ar peier.

Setu ar skouerioù tennet ag an ALBB kozh, serret an titouroù anezhoñ er blezioù 1910<sup>3</sup>. Resisaat a ra Pierre Le Roux : « l'initiale du verbe sans mutation est d ».

<b>Parrez ha poent dave</b>	<b>manger</b>
Pleurdud (62)	De zɛ́bó
Bubri (64)	De zɛ̀bɛ̃ɲ
Kelan (67)	De zɛ̀bɛ̃jn
Plañvour (70)	De zɛ̀bɔ̃ɲ
Groe (72)	De zɛ̀bɪɲ

N'eus ket a gensonenn rotek er ger-mañ e parrezioù Bro-Gwened Izel bet merchet get Pierre Le Roux. E peurrestr Bro-Gwened eh eus bet merchet an /r/ er poentoù-dave-mañ : Noal-Pondi (63), Pleuwigner (68), Pleñver (73), Pleren (74), Teiz (75), Enez Arz (76), Lokmaria-kaer (77), Kiberen (78), Rewiz (79), Damgan (80), Houat (81), Saozon ar Gerveur (82), Lokmaria ar Gerveur (83), Bourc'h-Baz (90). Doc'hpenn kement-se e kaver an /r/ e gwalarn Bro-Gerne hag e Bro-Leon. Mes ne za an /r/ àr-lerc'h ar /b/ (èl get e reizhskritur) nemet er poentoù-dave-mañ : Pleuwigner (68), Pleñver (73), Teiz (75), Lokmaria-kaer (77), Damgan (80), ar Gerveur (82 ha 83), Bourc'h-Baz (90). Er parrezioù arall e ta àr-lerc'h an /d/, èl get « di zreben » e Rewiz (79). Div skouer a rotadur a gaver ivez : un /r/ e lec'h ar /z/ kentañ : « da rébéel » e Houat (81) hag e Enez Arz e tiskoueza bout mut ar /b/ kreiz : « de zyarèn »<sup>4</sup>.

1 LOTH Joseph, *Dictionnaire breton-français du dialecte de Vannes de Pierre de Chalons réédité et augmenté*, Rennes, J. Plihon et L. Hervé, libraires-éditeurs, 1895, p.20.

2 DE ROSTRENEN Grégoire, *Dictionnaire français-celtique ou français-breton*, op. cit.

3 LE ROUX Pierre, *Atlas Linguistique de Basse-Bretagne*, op. cit.

4 Evit anadenn ar rotadur e gwenedeg-uhel, gwelet LE PIPEC Erwan, 2008, op. cit., p.82

Ha setu-amañ ar sanadur hrevez an ALBB nevez get Jean Le Dù, serret an titouroù anezhoñ etre 1969 ha 1997<sup>3</sup> :

Parrez ha poent dave	Manger (p.476)
Groe (142)	'de:bij̃
Plañvour (143)	'de:běj̃
Kaodan (144)	'de:běj̃
Redene (145)	'de:bo
Mêlann (146)	'de:běj̃
Ploue (147)	'de:běj̃
Bubri (148)	'de:běj̃
Sant-Karadeg Tregonvael (150)	'de:bɔ
Prizieg (151)	'de:bo
Pleurdud (152)	'de:bə
Laoulan (153)	'de:bɔ
Plourae (154)	'de:bɔ

E parrezioù Bro-Gwened Izel, n'eo ket bet merchet ar gensonenn rotek gwezh erbet. Ne za ur stumm get un /r/ e Bro-Gwened Uhel nemet get ar poentoù-dave : Gregam (167), Ar Gerveur (174), Houedig (175), Houat (176), Baden (179), Sarzhav (180), Sulnieg (184), Teiz (185), Laozag (186), Surzur (187). Hag e gwalarn Bro-Gerne hag e Bro-Leon dindan ar stumm « drebiñ » : /'dri:bi/ e Plougastell-Daoulas (106) da skouer. Mes ne vez sanet an /r/ àr-lerc'h ar /b/ nemet e daou lec'h hrevez an Atlas : /de:'brej̃/ er Gerveur (174) ha /de:'brej̃/ e Gregam (167).

Doc'h razh an titouroù-mañ e tiskoueza ar sanadur /de:'brej̃/ (merchet get Le Dù er Gerveur da skouer) monet àr ralaat a-c'houde an ALBB kozh. Sanadur ar gensonenn rotek àr-lerc'h ar /b/ er ger-mañ a ziskoueza bout dibaot er brezhoneg komzet e-pad an XX<sup>vet</sup> kantved, betek monet da sanadur rannyezhel -ma n'eo ket lec'hel zoken-. Gellout a raer goulakaat emañ skornet ar stumm mut an /r/ ennoñ , just-èl [de:běj̃] get AIO1944 ha treuzkaset e mod-se e Bro-Gwened Izel a-c'houde penn kentañ an XX<sup>vet</sup> a-c'hwel. Kontrel da skouerioù arall, èl *netra*, *petra* pe *bremañ*, a vez lies o stummoù er standilhon hag anavet ar gensonenn rotek enne get ar gomzourion.

3 LE DÛ Jean, *Nouvel Atlas Linguistique de Basse-Bretagne*, op. cit.

### 3. Ar gerioù netra, petra, bremañ

E-touesk ar gerioù mut ar gensonenn rotek enne en degouezh /KrB/ er standilhon eh eus daet àr-wel *netra*, *petra* ha *bremañ*, a vez liessort o sanadur. McKenna a venega mutadur ar c'hensonennoù rotek er Gemene c'hoazh, é c'hober get ar skouerioù-mañ ivez etre re arall :

«Instances of [r] being dropped from a word are not uncommon. In EDBF, under: nitra, the forms: nitrè and : nitè are given for Bas-Vannetais; similarly for: petra, the forms: petré<sup>1</sup> and: petè are cited.»<sup>2</sup>

O renablet hon eus amañ-dindan a-benn kompren hag arouezius eo o sanadur ag ur geolekt (da skouer brezhoneg ar Vro Pourlet) peotramant ag ur c'hronolekt, pe c'hoazh ag ur c'hejaj bennak :

Komzour	Petra	Netra	Bremañ
AH1892		[nitʃa]	
GW1893			[brɛmã]
AI1895	[petʀa]	[nitra]	
AI1896		[nitʃa]	[brɛ:mã]
BU1896	petra [r]	netra [r]	bremañ [r]
LL1900	[pøtɛ] pe [pøtɛ]	[nite]	[brɛmã]
PA1902	[pøtʃa]		
AH1904			[bø <sup>h</sup> 'mã], [bo 'mã]
AIO1905	[pøtɛ]	[nite]	[brɛmã]
BU1907		[nitra]	[brɛmã]
PSK1907-02	[peta]	[ 'nitʃa]	[brɛmã]
PSK1907-01	[pøtɛ]	[nite]	[brɛmã]
B1911		[nite]	
ML1914	[pøtɛ]		
P1914	[pøta]		[brɛmã], [brɛmã]
O1918		[nitʃa]	
AI1919	petra [r] ; [petra]		

1 En embannadur e tegaser ar resisadenn-mañ : « *The acute accent on this word may be a mis-print* ».

2 McKENNA Malachy, 1976, op. cit., p.43

AH1921		[nitʒa]	
PSK1923			bremañ [ʁ]
AI1923			bremañ [r]
KL1929			[bømä], [bʷömä], [bomœ]
AIO1931		[ 'nitə ] ; [nité]	[bʷəmä], [bʷömä]
KD1933			[bʷömä]
PEN1935	[pə <sup>ʷ</sup> a] ; petra [ʁ]		
B1935	[pətɛ] ; [pəta]	[nité], netra [ʁ]	[bəmä], [bə <sup>ʷ</sup> mä]
AI1937		netra [ʁ]	[bomä]
S1943		[ni'tɛ]	
AIO1944	petra [ʁ] ; petra [petxa]		
G1952	petra [ʁ] ; [petxa] ; [peta]		bremañ [r]
LV1958	[pøtxa]	netra [ʁ]	[bʷömä], [bʷəmä], [bə <sup>ʷ</sup> mä]
AI1966	petra [ʒ]		[bremä]
BU1971	petra [ʁ]		[bʷömä], [bœmā]
PSK1980		[nité]	[bʷömä]
LS1989	petra [pøtʒa] ; petra [ʁ]		bremañ [ʁ]
P1997		[nitʒa]	bremañ [ʁ]

N'eus ket bet skouer erbet ag an tri ger-mañ get arroudennoù dielfennet PZ1902, PEN1921 ha S1934, an dra-se a zo kaoz n'int ket bet ebarzhet en daolenn.

### a. Sanadur *petra*

Get ar ger *petra* e ta pemp rummad sanadurioù àr-wel :

- **Kensonenn logig** : [pet<sup>ʷ</sup>a], petra [r], [petra] : AI1895, BU1896, AI1919. Ne za nemet get komzourion a ra get ar c'hensonennoù logig da sanadur stankañ. Ar stumm bihanaet [r] get AI1895 a c'hella diskoueziñ ur bazenn gentañ trema ar mutadur.
- **Mut an /r/** mes dalc'het ar vogalenn [a] : [peta], [pəta] : PSK1907-02, P1914, B1935, G1952. Get komzourion ' zo emañ aet an [a] da [ɛ], anadenn anavet er Vro Pourlet :

[pəte], [pøte], [pøte] : LL1900, AIO1905, PSK1907-01, ML1914, B1935. Razh ar gomzourion-mañ a zo ag ar Vro Pourlet hag àr-bouez B1935 e raont-holl get ar c'hensonennoù logig d'ar stankañ. Evit G1952 e ta meur a sanadur dezhoñ evit ar ger-mañ, èl ma ra gwezh get kensonennoù logig ha gwezh get kensonennoù hugenn.

- **Kensonenn hugenn dre daravat mouezhiet** : petra [ɸ], [pə<sup>tr</sup>a] : PEN1935, AIO1944, G1952, AI1966, BU1971, LS1989. Donet a ra ar sanadur-mañ get komzourion a ra get kensonennoù hugenn ar stankañ, en eil pe en drivet rummad.
- **Kensonenn hugenn divouezh skañv** : [pətɕa], [pøtɕa] : PA1902, LS1989. An daou gomzour-mañ a zo a Vro an Oriant.
- **Ruzenn ouel divouezh** : [petxa], [pøtxa] : AIO1944, G1952, LV1958. Ar fonem [x] a za c'hoazh ur wezh get ar rummad 1944-1997, pezh a adkaver en emdroadur hollek.

Da gentañ e kaver un enebiezh etre ar Vro Pourlet get he c'hensonennoù logig hag he mutadur, ha Bro an Oriant get he c'hensonennoù hugenn mouezhiet ha divouezh skañv. Da eil eh eus ag un enebiezh etre ar rummad 1944-1997 hag an daou arall get ar ruzenn ouel divouezh é tonet get AIO1944, G1952 ha LV1958. N'eo ket diliamm ar rummadoù newazh pa za meur a sanadur get lod ag ar gomzourion, èl G1952 a ra ivez get ar mutadur pe LS1989 a ra ivez get ar ruzenn hugenn divouezh skañv, pezh a goucha doc'h sanadur o annezlec'h er rummadoù kent.

## **b. Sanadur *netra***

Get ar ger *netra* e ta pemp rummad sanadurioù ivez :

- **Ar gensonenn hugenn divouezh skañv** : [nitɕa] : AH1892, O1918, AH1921, P1997. Ar pevar anezhe a za a vro an Oriant, strewet dre an tri rummad studiet.
- **Ar gensonenn hugenn mouezhiet** : netra [ɸ] : B1935, AI1937, LV1958.
- **Ar gensonenn logig dre strakal mouezhiet** : [nitra] : AI1895, BU1896, BU1907. An tri c'homzour a zo ag an Ignel ha Bubri, div barrez amezek a su ar Vro Pourlet, hag er memes rummad (1892-1918).
- **Ar gensonenn logig dre strakal divouezh** : [nitɕa] : AI1896, PSK1907-02. An daou gomzour a ra get ar c'hensonennoù logig ar stankañ hag a zo ag ar Vro Pourlet anezhe.

- **Mutadur an /r/ :** [nitɛ], ['nitə], [nite] : LL1900, AIO1905, PSK1907-01, B1911, AIO1931, B1935, S1943, PSK1980. Bep taol mand eo mutet an /r/ eh a ar vogalenn [a] da [ɛ]. Ur wezh e kaver ['nitə] get AIO1931 hag ur wezh [nite] get PSK1980. An degouezh stankañ eo er standilhon, ha ne za nemet get komzourion ag ar Vro Pourlet.

Splann eo an enebiezh etre Bro Pourlet ha Bro an Oriant amañ : ar gensonenn logig dre strakal -mouezhiet pe divouezh- hag ar mutadur doc'h tu ar Vro Pourlet. Hag ar gensonenn hugenn dre daravat divouezh skañv doc'h tu an Oriant. Evit stumm mouezhiet ar gensonenn-mañ diwezhañ e ta get komzourion ag an div vro ganet en eil hag en drivet rummad (1935-1937-1958) ; an tri anezhe a ra get ar gensonenn-mañ d'ar muiañ en o brezhoneg. Ne za ket gwezh erbet ar gensonenn ouel dre daravat divouezh [x] na stumm bihanaet erbet.

### ch. Sanadur *bremañ*

Get ar ger *bremañ* e ta seizh rummad sanadurioù àr-wel :

- **Kensonenn hugenn dre daravat mouezhiet :** [bɤmã], [bɤmã], [bɤomã], [bɤomã] : GW1893, PSK1923, KD1933, AIO1931, LV1958, PSK1980. Komzourion ag an tri rummad hag ag an div vro anezhe.
- **Kensonenn logig dre strakal mouezhiet :** [brɛ:mã] : AI1896, BU1896, AI1923, G1952. Ne za ket ar gensonenn-mañ nemet get komzourion ag ar Vro Pourlet, àr-hed an tri rummad.
- **Mutadur an /r/ :** [bœmã], [bo'mã], [bœmã], [bœmã], [bœmã], [bœmã], [bœmã], [bœmã], [bœmã] : LL1900, AH1904, AI1905, BU1907, PSK1907-01, PSK1907-02, P1914, KL1929, AI1937. Heverk ar rummad-mañ get ar liessorted a vogalennoù a vez ennoñ. Donet a ra pasapl get ar rummad 1892-1918 (seizh komzour), un tammig get ar rummad 1919-1943 (daou gomzour) ha ne za ket tamm erbet get an drivet rummad 1944-1997. Kejet eo an div vro er standilhon-mañ hag ar mutadur n'eo ket ur perzh dibar ag ar Vro Pourlet a-barzh amañ ; kontrel d'ar pezh a oa get *netra* da skouer.
- **Metatezenn ar gensonenn hugenn dre daravat mouezhiet bihanaet :** [bœ'mã] : AH1904, B1935, LV1958. Perzh boutin an tri c'homzour-mañ a zo gober get ar c'hensonennoù hugenn ar stankañ en o brezhoneg.



- **Kensonenn hugenn dre daravat mouezhiet bihanaet** : [b<sup>ɥ</sup>omã], [b<sup>ɥ</sup>əmã] : KL1929, AIO1931. Ne za ket nemet get daou gomzour, a ra o-daou get ar c'hensonennoù hugenn d'ar stankañ ha ganet en eil rummad. Unan a zo a vro an Oriant, an arall ag ar Vro Pourlet mes hennezh diwezhañ (AIO1931) a zo bet é labourat e Lann-ar-Ster blezadou-pad durant e vuhedigezh.
- **Metatezenn ar gensonenn hugenn dre daravat mouezhiet** : [bœɤmã], [bœmã] : LV1958, BU1971. An daou gomzour-mañ a zo en drivet rummad.
- **Kensonenn hugenn dre fraoñval** : [bremã] (AI1966). Ne za ket nemet get ur c'homzour er standilhon, ag an drivet rummad anezhoñ.

An diforc'hoù a ziskoueza bout etre an tri rummad amañ ha n'eo ket etre an div vro eo : ar perzh dibar nemetoñ a-fet bro é vout ar gensonenn logig dre strakal klevet er Vro Pourlet. Mod-arall e ta ar mutadur get an daou rummad kentañ (1892-1918 / 1919-1943), ar gensonenn hugenn dre daravat bihanaet get an eil rummad (1919-1943), metatezenn ar gensonenn hugenn dre daravat spis get an drivet rummad àr un dro get ar gensonenn hugenn dre fraoñval (1944-1997). An alofonenn nemeti a zalc'ha àr-hed an tri rummad a zo ar gensonenn hugenn dre daravat mouezhiet. Daoustoc'h da sanadur liessort ar bogalennoù e razh an degouezhioù.

## D - Ar ger *graet*

Sanadur ar ger *graet* a ziskoueza bout dibar e-keñver ar c'haozoù arall reizhskrivet get ur gensonenn rotek banezhe. Ur seitek bennak a sanadurioù dishañval hon eus bet merchet a-fet /r/ er ger-mañ, hep menegiñ ar liessorted bras a-fet bogalenn -diftonget pe pas- hag ar gensonenn dibenn – klevet pe pas. Pa seller a-barzh geriadur bras Favereau<sup>1</sup> e roa deomp da ouiet e vez stummoù dishañval hrevez ar rannyezh : /grɛd\ɔ/, /gread\ɔ/ e Leon, /grwɛd\ɔ/ e Treger, /gwɛd\ɔ/ e Kerne ha /grwɛd\ɔ/, /gwrejd\ɔ/ ha /gwrajd\ɔ/ e Bro-Gwened. An daou stumm *groet* / *gret* a vercha e brezhoneg krenn (c'hwezekvet kantved). Get Devri<sup>2</sup> e weler ar stummoù skrivet *gruet* (Distique de Jean de l'Espine, 1472), *groeit* (Science er salvedigeah, 1821), *great* (Feiz ha Breiz, 1864) pe c'hoazh *grêt* (Buhez Breiz, 1924).

1 <https://geriadurbrasfavereau.monsite-orange.fr/> d'ar 15/08/2022, lizherenn G p.157

2 Geriadur diakronek en-linenn savet get Martial Ménard : <http://devri.bzh/>

## 1. Ar rummad 1892-1918

Setu-amañ renabl ar sanadurioù daet get ar rummad 1892-1918, mui hollad an alofonennoù bet klevet en degouezh /KrB/. Peadra da geñveriañ ar ger *graet* get kaozoù arall e rummad.

Komzour	Sanadur en degouezh /KrB/	Sanadur ar ger <i>graet</i>
AH1892	[ʁ] / [ʁ], [ʁ] / [ʁ]	
GW1893	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ]	
AI1895	[ʁ],[ʁ], [ʁ], [w], [w]	[gʁɛjt], [gʁɛt], [gʰwɛjt], [gʁɛjt]
AI1896	[ʁ], [ʁ], [w]	[gʁɛt]
BU1896	[ʁ], [ʁ]	[groɛjt], [grwɛjt]
LL1900	[ʁ], [ʁ], [ʁ]-[ʁ], [w], mut	[gʁɛj], [gʁɛj]
PZ1902	[ʁ], [ʁ], [ʁ], mut	[gʁɛjt]
PA1902	[ʁ] / [ʁ] / mut	[gʁɛjt], [gʁɛt], [gʁɛjt]
AH1904	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / mut / [x]	
AIO1905	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [w] / [w] / mut	[gʁɛjt], [gʁɛjt], [gʁɛj]
BU1907	Mut / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ]	
PSK1907-02	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ], [ʁ] / [ʁ] / mut	[gʁɛ:t], [gɛjt]
PSK1907-01	[ʁ] / mut / [ʁ] / [ʁ]	[gɛj], [gʁɛt]
B1911	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [w] / mut	[gʁɛ: <sup>d</sup> ], [gʁɛjt], graet em boa [ˈgʁɛjdə mwa]
ML1914	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [w] / mut	[gʁɛjt]
P1914	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [w] / mut	[gʁɛj], [gʁɛjt]
O1918	[ʁ] / [x] / [ʁ] / [ʁ]	[gʁɛjt]


Pevar c'homzour n'eo ket daet ar ger *graet* gete en enrolladennoù dielfennet, an dra-se a zo kaoz ne vo ket tennet kont anezhe en taol-mañ. Diàr an 13 komzour a choma n'eus ket nemet get 6 doc'hte a ra get un /t/ er ger *graet* : hugenn dre daravat get O1918, B1911, LL1900 ha PA1902 ha logig dre strakal get BU1896 ha PSK1907-01. Get ar gomzourion arall e ta ar gensonenn gweuz-drekstaon dre dostaat mouezhiet [w] pe ur stumm mut, plaen.

Ar stumm klokañ a hañvala bout [grwejt] get BU1896 dre ma klever sammad an div gensonenn /r/ ha /w/. Ar gomzourez-mañ a ya betek saniñ an /o/ get [groejt], pezh a zegasa soñj deomp ag ar reizhskritur gwenedek *groeit* pe ar stumm krennvezhonek *groet* bet meneget uheloc'h. Kavout a raer [g<sup>h</sup>wejt] get AI1895 a ra get div gensonenn ivez ; mes stumm bihanaet ar ruzenn darzh divouezh e lec'h ar gensonenn logig dre strakal hag a za getoñ ar muiañ en degouezh /KrB/. Ar c'homzour-mañ diwezhañ a ra get oc'hpenn ur stumm ha [w] eo a za ivez : spis get [gwejt] ha bihanaet get [g<sup>w</sup>et]. Ar stumm bihanaet [g<sup>r</sup>et] get PSK1907-01 a za àr un dro get ar stumm mut [gejt]. PSK1907-02 eo ar c'homzour arall nemetoñ a ra get ur stumm mut ivez er rummad-mañ : [gejt] doc'hpenn [gwø:t]. Ar fed ma ne vez ket hani é c'hober get ar stumm mut en un doare reoliek hon lakaa da soñjal e tahe an anadenn-mañ get un diover a zistagadur a-berzh ar gomzourion. PA1902 hag O1918 a ra get ar gensonenn hugenn dre daravat ingal : [g<sup>β</sup>ejt]. Ha B1911 a ra get [gwε:d] ha get [g<sup>β</sup>et] ivez.

Diàr an disoc'hou-mañ e ta tri rummad sanourion àr-wel : ar re a ra kentoc'h get ar gensonenn gweuz-drekstaon dre dostaat, ar re a ra kentoc'h get ar gensonenn hugenn dre daravat hag ar re a ra get ur gensonenn logig. Er grafik da heul e vez kontet ur sanadur dre gomzour a-benn lakaat àr-wel ar rummadoù sanourion meneget amañ a-us. Dalc'het eo ar memes livioù evit ar memes sanadurioù en tri rummad.

### Sanadur ar ger "graet"

er rummad 1892-1918




## 2. Ar rummad 1919-1943

Komzour	Sanadur en degouezh /KrB/	Sanadur ar ger <i>graet</i>
AI1919	[r] / [ʀ] / [r] / [r] / [ʁ] / [w]	[gwejd]
PEN1921	[ʁ] / [ʁ] / [w]	[gweʀ]
AH1921	[ʁ] / [ʁ] / mut	[gweʀt]
PSK1923	[r] / [ʁ] / [ʁ]	[gʷejt], [gʁej]
AI1923	[r] / [r] / [ɹ] / [w]	[gwet], [gwejt]
KL1929	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [w]	[gwejd.œ], [gʷwejt], [gʁwejt]
AIO1931	[r] / [ʁ] / [ʁ] / [w] / mut	[gʁwejt], [gʁejt], [gʷεʀ], [gwejd.ən.ˈtiœʁ]
KD1933	[ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [w]	[gʷwejt], [gweʀt], [gwεjd]
S1934	[ʁ] / [ʀ]	
PEN1935	[ʁ] / [ʁ]	[gwejt], [gweʀt], [gwejt]
B1935	[ʁ] / [w] / mut	[gwejt], [gwejd], [gwejt], [gwejt]
AI1937	[ʁ] / [ʁ] / [w] / mut	[gwet]
S1943	[r] / [ʁ] / [ʁ] / [ʁ] / [ʀ] / mut	

Get ar rummad-mañ eh eus tri c'homzour hag a samma div gensonenn èl a oa merchet e-raok mes ur gensonenn rotek arall e-keñver ar rummad kent : [gʁwejt] get KL1929 hag AIO1931 ha [gʷwejt] get KD1933. N'eus ket mui tamm ag ar c'hensonennoù logig, zoken get AI1919 hag AI1923 a ra gete e-leizh er c'haozoù arall newazh. Àr-bouez [gʷejt] ha [gʁej] get PSK1923 emañ [gwejt] hag e adstummoù hag a za ar muiañ-bras er rummad-mañ, ne vern pesort sanadur a vehe mestr en degouezhioù arall. Achu get ar stummoù mut amañ ivez.

### Sanadur ar ger "graet"

er rummad 1919-1943




### 3. Ar rummad 1944-1997

Komzour	Sanadur en degouezh /KrB/	Sanadur ar ger <i>graet</i>
AIO1944	[k] / [k̥] / mut	
G1952	[r] / [r̥] / [r] / [ɹ] / [k] / [k̥] / [k̥] / mut	[grɛt], [gʳɛt], [grɛt]
LV1958	[R] / [k] / [k̥] / [χ]	[gʁwɛj], [gʁwɛjt], [gʁwɛjʰ]
AI1966	[r] / [r̥] / [k] / [k̥] / [k̥] / [R] / [x]	[gʁɛjt], [gʁwɛjʰ], [gʁɛʰ:t]
BU1971	[k] / [k̥] / [χ]	[gʁwɛjt], [gʁɛjt], [gʳwɛjt], [gʁɔɛjt]
PSK1980	[r] / [k] / [k̥] / [w] / mut	[gwɛt], [gwɛjt], [gʁɛt]
LS1989	[k] / [k̥] / [R] / mut / [x]	[gʁɛːnɔɛs], [gʁɛjt]
P1997	[k] / [k̥] / [k̥]	[gʁwɛjt], [gʳwɛjt]

Ur pezh diforc'h a zo etre ar rummad-mañ hag an daou arall a-fet sanadur ar ger *graet* : [grɛt] get G1952 a zo ar skouer kentañ a implij [r] e-gunan hep [w] na hep bout er stumm bihanaet naket. Pa veze stank-raden ar stumm [gwɛjt] betek-hen ne za ket mui nemet get PSK1980, da lâret eo ur c'homzour diâr ar seizh renablet amañ. Ha gober a ra-heñv get [gʁɛt] doc'hpenn kement-se, pezh a ra ne choma ket komzour erbet é c'hober plaen get [gwɛjt] pe un adstumm anezhoñ. Ar sanadur *graet en deus* [gʁɛːnɔɛs] get LS1989 a ziskoueza bout dibar ivez get sanadur ar ruzenn ouel divouezh, stumm divouezh [gʁɛjt] getoñ. Ar gensonenn hugenn dre fraoñval [R] a za get daou gomzour pa ne oa ket bet merchet biskoazh c'hoazh : [gʁwɛjʰ] get LV1958 ha [gʳwɛjʰ] get AI1966. A-benn ar fin e weler a-walc'h [gʁwɛjt] daet get tri c'homzour ha betek [gʁɔɛjt] get BU1971, stumm hugennel ar sanadur logigel [groɛjt] daet get BU1896 er memes parrez. Gwelet amañ-dindan ar grafik é terc'hel d'ar rummadoù saniñ :

#### Sanadur ar ger "graet"

er rummad 1944-1997



Dre geñveriiñ an disoc'hoù a rummad da rummad e vercher un emdroadur splann e sanadur ar ger *graet* na bout bihan ar standilhon : ar stumm [gʁwejt] dianav e 1892-1918 a za àr-wel e 1919-1943 evit mont da sanadur stankañ e 1944-1997. Doc'h an tu kontrel eh a ar sanadur [gwejt] a stumm stankañ etre 1892 ha 1943 da zibaot-kaer get ar rummad 1944-1997. Doc'h reizhskritur ar ger *graet* e vehemp bet engortoz ag ur c'hresk brasoc'h ag ar stumm [gʁejt] (AI1966, BU1971 ha LS1989) pe [gʁet] (PSK1980) mes n'eo ket pezh a za àr-wel get hor standilhon.

## E - Sanadur ar c'houlpad /rh/

Setu-amañ un daolenn da renabliñ sanadur an /r/ pa en em gava touch doc'h an /h/. Meneget eo an degouezh mard eo bet kavet ur wezh a-c'hwel. Klasket e vo keñveriiñ an distagadur bep taol (distag pe kendeuz). Evit a sella ar ger « kendeuz.et » amañ e ra dave da sammadur an div gensonenn kement èl da vutadur an /r/ en degouezh /BrhB/.

### 1. Ar rummad 1892-1918

Komzour	/BrhB/ (distaget)	/BhB/ (kendeuzet)
AH1892		<i>ur c'hrouadur</i> [y.χedyʁ] ; <i>ur c'hrouadurig</i> [u.χedyʁətʃ] ; <i>merc'h</i> [x] ; <i>Merc'hig</i> [γ]
GW1893	<i>hanterc'hant</i> [hãntəʁ hã:n]	<i>àr-lerc'h</i> [aʁlɛx]
AI1895		<i>a-barzh</i> [bax] ; <i>ur c'henderv</i> [o.hãdeʁq]
AI1896	<i>da zerc'hel</i> [də.zɛʁjəl] ; <i>doc'h re</i> [dɔx.ʁe] ; <i>ar c'hure</i> [əʁhy:rə] ; <i>ar c'hure</i> [əʁhy:rə]	<i>merc'h</i> [mɛx] ; <i>gwerzhet</i> [dʒʁɛʁt] ; <i>d'ar c'hatekiz</i> [dəhate'tʃis]
BU1896	<i>ar c'hezeg</i> [əʁ.jezɛk] ; <i>kerzhat</i> [rh] ; <i>é terc'hel</i> [i.'tɛʁjəl] ; <i>verc'hed</i> [vɛʁjət]	<i>kerc'h</i> [x]
LL1900		<i>àr-lerc'h</i> [x] ; <i>a gerzhe</i> [dʒʁhɛ] ; <i>ar c'harr</i> [ə.χaʁ] ; <i>an hent d'ar c'hraou</i> [ənintɛʁœq]
PZ1902		<i>àr-lerc'h</i> [arleːx]
PA1902	<i>kerham</i> [tʃɛʁ'ham] ; <i>ar merc'hed</i>	<i>he ' gerzhe kuit</i> [he.tʃeʁɛ] ; <i>ar</i>

	[æ̃.mæɣjət]	<i>c'homandant</i> [χomãddã:]; <i>ba ur c'hard-eur</i> [ba.ɔχaɪdœ̃]; <i>ur c'hurase</i> [ɔ̃hyka'se]; <i>porzh</i> [poɔ̃h]; <i>àr-lerc'h</i> [aɪlɛx]
AH1904		<i>ba'n Arzhanaou</i> [ba'naχa.nœ̃]; <i>d'an Arzhanaou</i> [h] ha [x]; <i>barzh</i> [x]
AIO1905	<i>ar merc'hed</i> [ə̃mœ̃ɣjœ̃ <sup>d</sup> ]	<i>barzh</i> [x]; <i>ar c'hloc'h</i> [œ̃ <sup>h</sup> lɔx]; <i>ur c'har</i> [oɣa:ʀ]; <i>ar c'hazern</i> [ə̃yazɛʀn]
BU1907	<i>gwerzhet</i> [dʒɥɛɣət]; <i>marc'hadour</i> [mar <sup>h</sup> adu:ʀ]; <i>Kerharle</i> [kɛrhar'le]; <i>é terc'hel</i> [tɛɣjəl]	<i>àr-lerc'h</i> [a'lɛx]; <i>gwerzhet</i> [h]; <i>a-barzh</i> [χ]; <i>ba'r c'hornad</i> [baɦɔɾnat]; <i>marc'hadour</i> [maradu:ʀ]
PSK1907-02		<i>gwerzhet</i> [ɣ]; <i>d'ar c'hampagn</i> [də̃hãpã]; <i>kerc'h</i> [tʃɛ:x]
PSK1907-01	<i>(ar) werc'hez</i> [wiɾjɛs]; <i>sur 'hat</i> [zy:r.hat]; <i>ar c'hrañj</i> [hrã̃ʃ]	<i>gwerzhet</i> [ɣ]; <i>kerzhent</i> [h]; <i>da werzho</i> [h]; <i>marc'hadour</i> [h]
B1911	<i>d'ar C'hroesti</i> [h̃ɣy:s'ti]; <i>da werzho</i> [ɥɛʀ <sup>h</sup> o]	<i>gwerzhet</i> [dʒɥɛɣə̃]; <i>àr-lerc'h</i> [a:lɛɣ]
ML1914	<i>a werzhe</i> [ɥɛʀ <sup>h</sup> ɛ]; <i>ba er c'hoad</i> [baɛr'hɔat]; <i>ar c'hraou</i> [ə̃hɣaɥ]; <i>a werzhe</i> [ɥə̃rɛ]; <i>d'ur marc'hadour</i> [duɾ.mar <sup>h</sup> aduʀ]	<i>gwerzhet</i> [dʒɥɛ:rət]; <i>àr-lerc'h</i> [a'lɛɪ]
P1914	<i>é werzhiñ</i> [ɥɛrɥɛ̃ɲ]; <i>ar werc'hez</i> [ə̃.ɥiɾjɛs]	<i>àr-lerc'h</i> [aɪlɛx]; <i>kerhuiton</i> [ɕ]; <i>ar c'hezeg</i> [ə̃jezək]; <i>ar c'hrouadur</i> [χ]; <i>ba'r c'hleuz</i> [h]
O1918	<i>ar c'hi</i> [ə̃ʃ'i]	<i>ar marc'h</i> [max]; <i>ba'r c'hraou</i> [ba:χaw]; <i>ar c'homersant</i> [ə̃'xomɛ̃ ,sã:n <sup>h</sup> ]; <i>ba'r c'hêr</i> [ba'χɛ:ɕ]

#### a. /r/ ha /h/ distaget er rummad 1892-1918

Diàr ar 17 komzour er rummad-mañ n'eus ket nemet 6 doc'hte ha ne zistaga ket an /r/ a-zoc'h an /h/ e degouezh erbet en arroudennoù dielfennet : bihanniver int neuze. Ne ziskoueza ket an anadenn-mañ bout stag doc'h an eil bro pe an arall rak komzourion Bro an Oriant a zegouezha gete distagiñ an div gensonenn kement èl re ar Vro Pourlet. Evit ar skouerioù a za get ar standilhon e vercher distagadurioù liessort alkent :

- **An daou fonem é terc'hel d'o sanadur** : 8 komzour diàr ar 17 a zistaga an /r/ a-zoc'h an /h/ e kreiz ar gerioù, é terc'hel d'o sanadur boaz : *kerzhat* [rh] (BU1896), *kerham* [tʃɛ̃'ham] (PA1902), *Kerharle* [kɛrhar'le] (BU1907), *sur 'hat* [zy:r.hat] (PSK1907-

01), *a werzhe* [ʷərʰɛ] (ML1914), *é werzhiñ* [ʷərʰɛ̃ɲ] (P1914). Razh ar skouerioù-mañ a zalc'ha d'ur gensonenn rotek mouezhiet dirak ur gensonenn darzh divouezh. Stummoù bihanaet ag ar ruzenn darzh a gaver ivez : *d'ur marc'hadour* [dur.mar<sup>h</sup>adu<sup>r</sup>], (*a*) *werzhe* [ʷər<sup>h</sup>ɛ] (ML1914), ha *marc'hadour* [mar<sup>h</sup>adu:r] (BU1907). Ar gensonenn rotek eo a c'hella bout bihanaet ivez : *hanterc'hant* [hãntə<sup>r</sup>'hã:n] (GW1893). Erfin, e kaver ur skouer ag ur gensonenn logig dre fraoñval divouezhiet get AI1896 : *doc'h re* [dɔx.ʁe]. Na posubl e vehe bet divouezhiet dre levezon ar ruzenn ouel divouezh stok doc'hti, rak gouiet a raer eh a an /r/ àr zivouezhaat da heul ur gensonenn divouezh arall<sup>1</sup>.

- **Ger-mell resis ha kemmadur** : Distag e c'hella bout kensonenn rotek ar ger-mell resis doc'h an /h/ kentañ é tonet àr e lerc'h. Get AI896 da skouer : *ar c'hure* [ərhy:rə] ; *ar c'hure* [ər<sup>h</sup>hy:rə]. Donet a ra peder skouer arall a-sort-mañ er standilhon : *ar c'hezeg* [ər.jezɛk] (BU1896), *ba er c'hoad* [baer'hɔat] (ML1914), *ar c'hi* [əʁ'çi] (O1918). Pezh a zo heverk amañ eo an diforc'h e-keñver ar ger-mell amresis rak raloc'h eo an distagadur /rh/ getoñ. Ur skouer a gaver get PSK1907-01 ur sort : *ur c'hole* [urho:le]. An hani nemeti eo er rummad-mañ<sup>2</sup>.
- **/rh/ sanet /rj/** : ar c'houlpad /rh/ en degouezh /BrhB/ a ya liesik da /rj/ èl get ar skouerioù-mañ : *da zerc'hel* [də.zərçjəl] (AI1896), *é terc'hel* [i.tərçjəl] (B1896), *ar merc'hed* [əʁ.məʁçjət] (PA1902), *ar merc'hed* [əʁmœrçjœ<sup>d</sup>] (AIO1905), (*é*) *terc'hel* [tərçjəl] (BU1907), (*ar*) *werc'hez* [wɪrçjɛs] (PSK1907-01), *ar werc'hez* [ə.ʷɪrçjəs] (P1914).
- **Ar ruzenn darzh divouezh é vont da vouezhiet** : Evit B1911 ne za nemet ur stumm bihanaet ag ar ruzenn darzh mouezhiet -(*da*) *werzho* [ʷər<sup>h</sup>o]- e lec'h he stumm divouezh. Get O1918 e ta ar ruzenn ouel, mouezhiet ivez: *ar c'hi* [əʁ'çi].
- **Ar ruzenn darzh divouezh é vonet da ruzenn hugenn divouezh** : *gwerzhet* [dʒʷərçət] get BU1907 da skouer.
- **Kensonennoù rotek divouezhiet** : daoustoc'h d'an daou fonem chom distag e c'hella an /r/ bout divouezhiet get lod ag ar gomzourion. Pe e vehe ar ruzenn hugenn : *ar merc'hed* [əʁ.məʁçjət] get PA1902, pe ar gensonenn logig dre strakal *ar c'hraou* [əhçau]

1 HEMON Roparz, 1975, op. cit.

2 Skouerioù arall a zistagadur ar ger-mell amresis a zo bet klevet genomp get komzourion e-maez ag ar standilhon dielfennet : Maryvonne Maho a Verne (1898-1977) er ganenn « tri den yaouank ag ar memes kêr » get *ur c'har* [urhar] ha Loeiz Herrieu a Gaodan (1879-1953) er ganenn « sonenn Elen » get *ur c'hantoner* [yr.hãntöner]. Da verchiñ emaint o-daou koshoc'h evit PSK1907-01 hag emañ tennet an div skouer-mañ a stummoù kanet.



get ML1914, amañ en degouezh /BhrB/.

## b. /r/ ha /h/ kendeuzet er rummad 1892-1918

Razh ar gomzourion a za dezhe kendeuziñ an daou fonem ur wezh a-c'hwel. Setu-amañ an degouezhioù stankañ bet renablet diàr an daolenn.

- **/rh/ dibenn kendeuzet** : n'eus ket daet skouer erbet ag ar c'houlpad /rh/ dibenn distaget er standilhon. D'ar liesañ e ta ar ruzenn ouel divouezh en degouezh-mañ : *àr-lerc'h* [a<sup>r</sup>lɛx] (GW1893), *a-barzh* [bax] (AI1895), *kerc'h* [x] (BU1896)... Get PZ1902 e ta ur stumm bihanaet : *àr-lerc'h* [arleːx]. Ar fonem-mañ a zo bet merchet get McKenna : « *This is a dorso-velar voiceless spirant; it occurs in absolute final position only, and' then only if stressed; if lightly stressed or unstressed it is modified to [h]* »<sup>1</sup>. Hrevez-heñv ne za ar ruzenn ouel divouezh nemet er silabennoù dibenn taol-mouezhiet : [a<sup>r</sup>lɛx] arlerh<sup>2</sup>, ar re nann-taol-mouezhiet é vonet da ruzenn darzh divouezh : [or plah] ur plah<sup>3</sup>. PA1902 a ra get ur ruzenn c'hargadenn divouezh doc'hpenn ar gensonenn-doubl : *porzh* [poʁh]. BU1907 a ra get ur ruzenn hugenn divouezh : *a-barzh* [χ]. Div skouer a ruzennoù mouezhiet a za er rummad-mañ : B1911 get ur ruzenn ouel mouezhiet *àr-lerc'h* [aːlɛʁ] ha ML1914 get ar ruzenn hugenn mouezhiet *àr-lerc'h* [a<sup>r</sup>lɛʁ].
- **/BrhB/ kendeuzet mouezhiet** : Ma vez kentoc'h divouezh ar c'houlpad /rh/ dibenn eh a da vouezhiet en-dro pa en em gava etre div vogalenn, get 4 c'homzour. Da skouer get AH1892 : *merc'h* [x] a ya da *merc'hig* [ɣ], pe get B1911 : *gwerzhet* [dʒʁɛʁə<sup>t</sup>]. Skouerioù a gaver get PSK1907-01 ha PSK1907-02 ivez. Get BU1907 ha ML1914 e ta ar gensonenn logig dre strakal mouezhiet da zisoc'h ar c'hendeuziñ : *marc'hadour* [maraduːr], *gwerzhet* [dʒʁɛːrət]. O-daou e raont get ar gensonenn-mañ da vuiañ evit a sella ar c'hensonennoù rotek. Marse e c'hellahe bout mutet ar ruzenn darzh amañ ivez.
- **/BrhB/ kendeuzet divouezh** : un degouezh stank a-walc'h pa za get 14 komzour diàr ar 17 anezhe, dreist-holl get ar ruzenn darzh divouezh (9 c'homzour) : *d'ar c'hatekiz* [dəhate<sup>t</sup>fɪs] (AI1896), (*a*) *gerzhe* [dʒɜhɜ] (LL1900), *gwerzhet* [h] (BU1907)... Get 4

1 McKENNA Malachy, 1976, op. cit., p .55

2 McKENNA Malachy, ibid.

3 McKENNA Malachy, ibid.

c'homzour e ta ar ruzenn hugenn divouezh kreñv, èl-mañ get O1918 da skouer : *ba'r c'hêr* [ba'χe:ɾ]<sup>1</sup>. Ne za ar ruzenn ouel divouezh en degouezh-mañ nemet get ar c'homzour-mañ diwezhañ ivez : *ar c'homersant* [ə'xomɛɾ,sã:n<sup>t</sup>], ha netra nemet dre ur wezh. Mui AH1904 a ra get an teir ruzenn divouezh (hugenn, gouel, tarz) get ar memes anv divoutin : *ba'n Arzhanaou* [ba'naχa,nəu], [x], [h]. Get AI1896 e ta ar gensonenn logig dre fraoñval divouezh : *gwerzhet* [dʒɥɛɾɛt], da geñveriiñ doc'h ar stummoù mouezhiet daet get BU1907 ha ML1914.

- **Gerioù-mell ha kendeuzadur divouezhiet:** Meur a skouer a vez ag ar c'hendeuziñ etre ar ger-mell hag ar fonem /k/ kemmet àr e lerc'h. Get 8 komzour eh eus a ruzennoù divouezh en degouezh-mañ. Ruzennoù hugenn divouezh èl get *ur c'hrouadur* [y.χedyɾ] (AH1982), ruzennoù gouel divouezh get *ar c'homersant* [ə'xomɛɾ,sã:n<sup>t</sup>] (O1918) pe ruzennoù tarz divouezh èl get *d'ar c'hampagn* [dəhãpaŋ] (PSK1907-02). Get LL1900 e ta ur gensonenn logig dre fraoñval divouezh : *an hent d'ar c'hraou* [ənintəɾœu].
- **Gerioù-mell ha kendeuzadur mouezhiet :** Get 5 ag ar gomzourion e ta ruzennoù mouezhiet. Re hugenn mouezhiet èl *ur c'hrouadurig* [u.χedyɾɛtʃ] (AH1892), ruzennoù gouel mouezhiet èl *ar c'hazern* [əχaze'n] (AIO1905) pe ruzennoù tarz mouezhiet èl *ba'r c'hornad* [bafiɔɾnat] (BU1907).

Get ar rummad-mañ e ta anadennoù àr-wel a-fet distagadur ha sanadur ar c'hensonennoù rotek ha tarz kevreet. Meur a sanadur a vez da bep komzour, ha n'eus ket nikun doc'hte hag a zistagahe plaen an /r/ a-zoc'h an /h/. Doc'h an tu kontrol e vercher eh eus 6 doc'hte hag o c'hendeuza plaen. Evit ar re o distaga e talc'hont d'ar liesañ d'ar patrom *kensonenn rotek mouezhiet – ruzenn darzh divouezh* ; Aliesoc'h e vez distaget ar c'houlpad-mañ get ar ger-mell resis evit an hani amresis, pezh a zo daet àr-wel get ar pennad àr mutadur ar c'hensonennoù rotek c'hoazh. Ar gensonenn staon dre dostaat mouezhiet [j] a za e lec'h ar ruzenn darzh get 7 komzour diàr an 11 a zistaga ar c'houlpad /rh/. Pa 'n em gava ar c'houlpad /rh/ e dibenn ar bomm e vez kendeuzet an daou fonem ingal ha sanet [x] d'ar liesañ. Pa vez kendeuzet ar c'houlpad en degouezh /BrhB/ e ta ruzennoù tarz divouezh d'ar liesañ.

---

1 Gortae e vehe ur c'hemmadur dre vlotaat a-barzh amañ.

## 2. Ar rummad 1919-1943

Komzour	/BrhB/ (distaget)	/BhB/ (kendeuzet)
AI1919	<i>merc'hetour</i> [mɛrjetu:r]	<i>ur marc'heger</i> [mahedzɛʁ]; <i>kerzhit</i> [tʃɛʁət], [tʃerət]; <i>barzh</i> [baʒ] ha [bax]
PEN1921	<i>é terc'hel</i> [i.tɔʁjɛl]	<i>a gerzhe</i> [dʒe:ʁe]
AH1921	<i>é terc'hel</i> [tɛxləl]; <i>kerhouel</i> [kɛʁ <sup>h</sup> ɥe:l]	<i>àr-lerc'h</i> [ʰaʁlɛx]; <i>ba'r c'hampagn</i> [h]
PSK1923	<i>ar werc'hez</i> [əʁ.ʋiʁjɔɛs]	<i>a-barzh</i> [x]; <i>àr-lerc'h</i> [a:ʁlɛx]; <i>ur verc'h</i> [ovɛx]; <i>moarhat</i> [moʁa <sup>t</sup> ] <i>ha</i> [mohat]; <i>barzh</i> [ˈbax]; <i>gwezh'rall</i> [ˈdʒɥe:ʁɛl]; <i>gwerzhet</i> [h]
AI1923	<i>Torzhoù</i> [ʁh]; <i>Torzhoù</i> [tɔʁhɔw]	<i>barzh</i> [x]; <i>àr-lerc'h</i> [x]; <i>harzhe</i> [h]; <i>Ba'r c'houvant</i> [h]; <i>Kerzhit</i> [h]; <i>Ur c'horve</i> [o.hɔ <sup>v</sup> e]; <i>Un dorzh</i> [x]; <i>get ar c'hafe</i> [dʒə.ha:'fe]; <i>torzhoù</i> [tɔʁɔw]; <i>ar vourc'h</i> [x]
KL1929	<i>ar c'hlañvdi</i> [œʁ 'ɣrã:di]; <i>ur c'hlañvdi</i> [uʁ 'ɣrã:di]; <i>ar c'hlañvdi</i> [œʁ 'ɣlã:di]	<i>barzh</i> [bax]; <i>àr-lerc'h</i> [a:ʁlɛx]; <i>ar porzh</i> [œ <sup>r</sup> .pɔx]; <i>d'ar c'hatekiz</i> [dœ.ʁatetʃis]; <i>merc'her</i> [mœjeʁ]; <i>ba'r c'hreiz</i> [ba'ʁɛjs]; <i>moarhat</i> [mœʁɛt]
AIO1931		<i>kerzhit àr ho kwar</i> [tʃɛʁ.a <sup>r</sup> .kwa:ʁ]; <i>ur c'hado</i> [oha'do]; <i>barzh</i> [baʒ] ha [bax]; <i>ar c'hreion</i> [əhejɔ̃n]; <i>forzh anezhe</i> [fɔx.a:ne]; <i>moarhat</i> [mohat]; <i>vourc'h</i> [vux]; <i>àr-lerc'h</i> [a <sup>r</sup> lɛx]; <i>ar marc'hadour</i> [əʁ.ma <sup>h</sup> adɔʁ]
KD1933	<i>ar c'hlocher</i> [ə <sup>r</sup> ɣlɔʁe]	<i>àr-lerc'h</i> [alɛx] ha [alɛʁ] ha [x]; <i>lec'h 'rall</i> [le:'ʁɛl]; <i>bourc'h</i> [bu <sup>x</sup> ]; <i>ar vourc'h</i> [əʁ. 'vux]; <i>ba'r c'hourt</i> [ba.ʃu <sup>t</sup> ]; <i>ur c'hi</i> [o.hi]; <i>ur c'hamarad</i> [u.'hama ʁat]
S1934		<i>barzh amañ</i> [h]; <i>marc'hadizion</i> [h]
PEN1935		<i>d'er c'hask</i> [dəhlax]; <i>lorc'h</i> [x]; <i>àr-lerc'h</i> [a <sup>r</sup> lɛx]; <i>ur c'hi</i> [o.hi]; <i>ar c'hazhoù</i> [ə 'hahɔɥ];
B1935		<i>barzh</i> [x]; <i>barzh amañ</i> [baha:'mã]; <i>ba'r c'hlinik</i> [ba:hli'nik]; <i>gwerzhet</i> [h]; <i>boulañjerezh</i> [bulã:ʒə'ʁɛx]; <i>marc'hadour</i> [h]; <i>ur c'hapasite</i> [h]; <i>àr-lerc'h</i> [aʁlɛx] ha [ʁ]; <i>ma merc'h</i> [x]
AI1937		<i>ba'r Porzh</i> [baʁpɔx]; <i>àr-lerc'h</i> [aʁlɛx] ha [aʁlɛʁ]; <i>div verc'h</i> [diʋ.vɛx]; <i>d'ar bourc'h</i> [buʒ];

S1943		<i>ba'r vourc'h</i> [x]; <i>àr-lerc'h</i> [x]; <i>ba'r c'hornad</i> [ba:hɔ <sup>ʁ</sup> nat]; <i>ur verc'h</i> [y <sup>ʁ</sup> .vɛx]; <i>gwezharall</i> [dʒɥɛ:ʁɛl]; <i>barzh amañ</i> [h];
-------	--	--

Ur bochad nebeutoc'h a liessorted a vez get ar rummad-mañ evit get an hani kent, a-fet distagadur an daou fonem.

#### a. /r/ ha /h/ distaget er rummad 1919-1943

- **An daou fonem é terc'hel d'o sanadur** : n'eus nemet get AI1923 e ta skouerioù ag an daou fonem dalc'het get o sanadur boaz. An div skouer a za get ar memes ger *torzhoù* [rh] ha [tɔʁhɔw]. Evit an eil sanadur emañ bet divouezhiet ar gensonenn logig ha aet da fraoñval pa oa straket er skouer gentañ. Da verchiñ a zo e cheñcha ar sanadur kement èl an distagadur get ar ger en unander : *un dorzh* [x]. Ar ruzenn ouel divouezh a za dre ma ya /BrhB/ da /Brh/ dibenn.
- **Ar c'houlpad /rj/** : evit ar re a zalc'ha da zistagiñ ar gensonenn rotek a-zoc'h ar ruzenn darzh e kaver emdroadur ar ruzenn darzh da gensonenn staon dre drostaat mouezhiet èl get *merc'hetour* [mɛrjɛtu:r] (AI1919), *é terc'hel* [i.tɛʁjɛl] (PEN1921), *ar werc'hez* [ɔʁ.ɥiʁjɛs] (PSK1923). Kement-mañ a oa daet àr-glev get ar rummad kent c'hoazh.
- **Ger-mell ha ruzenn ouel mouezhiet** : Get KL1929 ha KD1933 e ta skouerioù ag ar ger-mell distaget dirak e gemmadur : *ar c'hlañvdi* [œʁ.'ɥrã:di] ha [œʁ.'ɥlã:di]; *ur c'hlañvdi* [ur 'ɥrã:di] get KL1929 ha *ar c'hloc'her* [ə<sup>ʁ</sup>ɥlɔʁe] get KD1933. Get KL1929 emañ spis ar gensonenn hugenn dre daravat mouezhiet dirak ar ruzenn ouel mouezhiet. Ar gensonenn logig a-gostez dre dostaat [l] a zo aet da gensonenn logig dre strakal [r] dre ziv wezh, pezh a vercha ur c'hemmesk etre an daou fonem a gaver ivez get AH1921 er vetatezenn : *é terc'hel* [tɛxlɛl]. Heverkoc'h eo c'hoazh a pa ouier e ra KL1929 get kensonennoù hugenn doc'hreizh. Evit KD1933 e ta stumm bihanaet ar ruzenn hugenn mouezhiet dirak ar ruzenn ouel mouezhiet.

#### b. /r/ ha /h/ kendeuzet er rummad 1919-1943

6 komzour diàr 13 a gendeuza plaen an daou fonem en degouezh /rh/, en arroudennoù dielfennet hag e-mesk ar skouerioù bet diguzhet atav. Ur c'hresk eo e-keñver ar rummad kent

dre ma veze 6 diàr 17 hag a gendeuze plaen ivez. Setu-amañ an anadennoù daet àr-wel :

- **Ar c'houlpad /rh/ dibenn** : èl get ar rummad kent e vez kendeuzet plaen an daou fonem pa 'n em gavont e dibenn ar bomm. Ar gensonenn ouel divouezh eo a za ar muiañ en degouezh-mañ c'hoazh, get 11 komzour diàr an 13, an daou arall (PEN1921 ha S1934) é c'hober diover a skouerioù. 4 doc'hte a ra get ar ruzenn hugenn mouezhiet doc'hpenn implij ar ruzenn ouel divouezh : *àr-lerc'h* [aʁlɛx] ha [aʁlɛʁ] get AI1937 da skouer. Ha 4 é c'hober get ar ruzenn hugenn divouezh kreñv èl get *ar vourc'h* [əʁ.'vuʁχ] (KD1933), doc'hpenn ar ruzenn ouel divouezh ivez.
- **Ar ruzenn darzh divouezh ha ruzennoù divouezh arall** : 9 c'homzour a ra get ar ruzenn darzh divouezh pa 'n em gava an degouezh /BrhB/ : *ar c'hreion* [əhɛjɔ̃n] (AIO1931) da skouer. Stummoù dispis a gaver get daou doc'hte : *ar marc'hadour* [əʁ.ma<sup>h</sup>adɔʁ] (AIO1931), *ur c'hamarad* [u.'<sup>h</sup>ama,ʁat] (KD1933). Getoñ-diwezhañ e kaver ar gensonenn staon-gouel divouezh er memes degouezh ivez : *ba'r c'hourt* [ba.ɣu<sup>t</sup>]. Get AIO1931 e ta ar ruzenn ouel divouezh *forzh anezhe* [fɔʁ.a:ne], amañ etre daou c'her. Ar ruzenn hugenn divouezh kreñv a za get KL1929 dre ziv wezh : *ba'r c'hreiz* [ba'χɛjs] ha *moarhat* [mɔʁχt].
- **Ar ruzenn ouel mouezhiet ha ruzennoù mouezhiet arall** : 3 c'homzour a ra get ar ruzenn ouel mouezhiet en degouezh-mañ : *kerzhit* [tʃɛʁət] (AI1919), *moarhat* [moʁa<sup>t</sup>] (PSK1923), *d'ar c'hatekiz* [dœ.ʁatɛtʃis] (KL1929). AI1919 a ra ivez get ar ruzenn darzh mouezhiet : *ur marc'heger* [mahɛdʒɛʁ]. Ar ruzenn staon mouezhiet a za get KL1929 ivez : *merc'her* [mœʁjɛʁ].
- **Kensonennoù rotek o-unan** : evit an degouezh /BrhB/ e ta ar gensonenn logig dre strakal get daou gomzour : *kerzhit* [tʃɛʁət] (AI1919) ha *torzhoù* [tɔʁɔw] (AI1923) ; ar gensonenn hugenn mouezhiet get daou arall ivez : *a gerzhe* [dʒɛ:ʁɛ] (PEN1921) ha *kerzhit àr ho kwar* [tʃɛʁ.a<sup>s</sup>.kwa:ʁ] (AIO1931). En degouezh /BhrB/ e ta ar gensonenn hugenn mouezhiet get 3 c'homzour : *gwezh'rall* ['dʒɛ:ʁɛl] (PSK1923), *lec'h 'rall* [le:'ʁɛl] (KD1933) ha *gwezh'rall* [dʒɛ:ʁɛl] (S1943).

Evit an eil rummad-mañ e c'heller keñveriiñ un nebeud anadennoù doc'h ar rummad kentañ : ar memes anadenn a gaver evit an degouezh /rh/ dibenn c'hoazh, da lâret eo ur c'hendeuzadur reoliek get razh ar gomzourion ag ar standilhon ha sanadur ar ruzenn ouel

divouezh da stumm stankañ. En degouezh /BrhB/ e ta c'hoazh ar ruzenn darzh divouezh d'ar liesañ. Mes bout ' zo muioc'h a gomzourion a ra get ur gensonenn rotek en degouezh-mañ ivez : kentoc'h ar ruzenn hugenn mouezhiet anezhi.

Ar pezh a raomp ar c'hendeuziñ anezhoñ a vez taolennet èl ur mutadur ag ar c'hensonennoù rotek get McKenna pa venega ar skouerioù-mañ er pennad 116 : [tøh] torh, [me.hjüt] merhed, [mas<sup>e</sup>] marse, [kwax] koarh<sup>1</sup>. Evit ar skouer [me.hjüt] merhed e c'houlakaomp e c'hella an treuzksrivadur [hj] bout par d'ar ruzenn staon mouezhiet merchet get KL1929 : *merc'her* [mœjɛʁ] a verchahe ur gendeuzadenn etre an daou fonem ha n'eo ket mutadur an /r/.

### 3. Ar rummad 1944-1997

Komzour	/BrhB/ (distaget)	/BhB/ (kendeuzet)
AIO1944		<i>àr-lerc'h</i> [x] ; <i>porzh</i> [pɔχ] ; <i>hanterc'hant</i> [ãtɛχãt] ; <i>diabarzh</i> [x] ; <i>barzh</i> [bax]
G1952		<i>perzh</i> [x] ; <i>àr-lerc'h</i> [aʁlɛx] ; <i>an Arzhanaou</i> [x] ; <i>Gwelegouarc'h</i> [x] ; <i>marc'had</i> [x] ; <i>ur vourc'h</i> [x] ; <i>ar c'hentelioù</i> [ɥ]
LV1958		<i>barzh</i> [x] ; <i>àr-lerc'h</i> [aʁlɛʁ] ; <i>àr-lerc'h ar brezel</i> [aʁlɛʁ.əʁ.brɛzɛ:l]
AI1966	<i>iwerrhoneg</i> [ivɛʁ <sup>h</sup> ðː.nɛk]	<i>ba'r C'hreisteiz</i> [ba:χɛj'ʃte] ; <i>moarhat</i> [mo'hat] ; <i>àr-lerc'h</i> [a:ʁ'lɛx] ha [a:ʁ'lɛʁ] ; <i>ba'r c'hêr</i> [baɦɛ:ʁ] ; <i>ur verc'h vihan</i> [oʁ.ve:ʁ.vi'ã.n] ; <i>ba'r c'hoad</i> [ba:ho'at] ; <i>barzh ma</i> [barmə]
BU1971		<i>d'ar c'hourz-se</i> [də.ɣuʁ.sə] ; <i>un diforc'h</i> [x] ha [ʁ] ; <i>d'ar c'hatechism</i> [dəhateʃism] ; <i>marc'had</i> [ma'χat] ; <i>bourc'h</i> [bɔʁ] ; <i>àr-lerc'h</i> [x] ; <i>gwezh'rall</i> [dʒɥɛʁal] ; <i>a-barzh</i> [x]
PSK1980		<i>àr-lerc'h</i> [aʁlɛʁ] ha [aʁlɛx] ; <i>ur c'hornad</i> [oɦɔʁna <sup>t</sup> ] ; <i>ur c'hoer</i> [ɥhweχ] ;
LS1989		<i>ar c'hantved</i> [əχãtvɛt] ; <i>àr-lerc'h</i> [aʁ'lɛx] ; <i>ur c'hant bugel</i> [ɥ.xãn.byɡɛl] ; <i>a-barzh</i> [x] ; <i>merc'h</i> ['mɛx] ; <i>kenderc'hel</i> [x] ; <i>ar c'hañv</i> [x]
P1997	<i>merc'her</i> [mœʁ'je:ʁ]	<i>ur c'hrepri</i> [o'xɛpʁi] ; <i>ar c'hrepri</i> [əxɛ'pʁi] ; <i>gwerzhet</i> [x] ha [ɥ] ; <i>hanterc'hant</i> [h] ; <i>forzh null</i> [fɔʁ] ; <i>ar c'hornad</i> [x]

1 McKENNA Malachy, 1976, op. cit., p.44

### a. /r/ ha /h/ distaget er rummad 1944-1997

6 komzour diâr an 8 ag ar rummad-mañ a gendeuza ar c'houlpad /rh/ ingal, pezh a zo ur c'hresk c'hoazh e-keñver ar rummad kent. Get an div skouer a zistagadur an /r/ a-zoc'h an /h/ e adkaver ar gensonenn staon dre dostaat mouezhiet [j] da heul ar gensonenn rotek, amañ get P1997 *merc'her* [mœʁ'je:ʁ]. An eil skouer a ziforc'hia ar ruzenn hugenn mouezhiet a-zoc'h ar ruzenn darzh divouezh bihanaet : *iwerzhoneg* ['ivœʁ<sup>h</sup>ð:nek] (AI1966). Da notenniñ e oa daet un eilstumm ag ar memes ger get ar c'homzour-mañ diwezhañ, er memes kaozeadenn : ['ivœ:zð:nek] get ar /z/ e lec'h ar ruzenn darzh gwenedek. N'eus ket a skouerioù arall ag an distagadur /rh/ get ar gomzourion arall.

### b. /r/ ha /h/ kendeuzet er rummad 1944-1997

Evit ar c'hendeuzadur e c'heller merchiñ meur a rummad c'hoazh :

- **Ar c'houlpad /rh/ dibenn** : 7 komzour diâr an 8 a ra get ar ruzenn ouel divouezh en degouezh-mañ : *âr-lerc'h* [aʁlœʁx], *ur vourc'h* [x] (G1952) ; *a-barzh* [x] (BU1971) ; *merc'h* [mœʁx] (LS1989)... 5 doc'hte a ra ivez get ar ruzenn hugenn mouezhiet : *bourc'h* [bœʁx] get BU1971 da skouer. Evit P1997 emañ heuliet ar ger *forzh* [fœʁx] get ur frienn logig mouezhiet er bomm *forzh null*, pezh a c'hellahe mouezhiat ar ruzenn en he raok. Ur c'homzour hepken a ra get ar ruzenn hugenn divouezh kreñv : *porzh* [pœʁx] (AIO1944).
- **Ruzennoù hugenn ha gouel divouezh** : 3 c'homzour a ra get ar ruzenn ouel divouezh en degouezh /BrhB/ : *marc'had* [x] (G1952), *ur c'hant bugel* [y.xãn.bygɛl] (LS1989), *ur c'hrepri* [o'xœpʁi] (P1997). 3 c'homzour arall a ra get ar ruzenn hugenn divouezh kreñv amañ : *hanterc'hant* [ãtœʁãt] (AIO1944), *ba'r C'hreisteiz* [ba:ʁɛj'fste] (AI1966), *marc'had* [ma'ʁat] (BU1971). Da verchiñ ar ruzenn darzh mutet get AIO1944 e penn kentañ ar ger *hanterc'hant*, ur perzh heverk e-keñver ar rummadoù kent ivez.
- **Ruzenn darzh divouezh** : 4 c'homzour a ra get ar ruzenn darzh divouezh, a oa ar sanadur stankañ en daou rummad kent : *d'ar c'hatechism* [dœhateʃism] (BU1971), *ur c'hornad* [œhœʁnaʔ] (PSK1980) da skouer.
- **Ruzenn ouel mouezhiet** : 4 c'homzour a ra get ar ruzenn ouel mouezhiet en

degouezh /BrhB/ ; a-bouez eo derc'hel soñj e ta meur a sanadur get pep komzour : *d'ar c'hourz-se* [də.yuʁ.sə] (BU1971), *ar c'hantved* [əyãtvət] (LS1989) da skouer.

- **Ruzenn hugenn mouezhiet** : Daou gomzour a ra get ar ruzenn hugenn mouezhiet en degouezh /BrhB/ ha /BhrB/ : *gwezh'rall* [dʒʁɛkal] (BU1971), *àr-lerc'h ar brezel* [aʁlɛʁ.əʁ.brøze:l] (L1958). Evit BU1971 e adkaver amañ an hevelep anadenn a oa bet notennet er rummad kent en degouezh /BhrB/ get PSK1923, KD1933 ha S1943. Evit a sella L1958 e choma get ar memes sanadur èl en degouezh /Brh/ dibenn : *àr-lerc'h* [aʁlɛʁ].
- **Ar ruzenn c'hargadenn mouezhiet** : N'eus ket nemet AI1966 a ra get ar ruzenn c'hargadenn mouezhiet en degouezh /BrhB/ : *ur verc'h vihan* [oʁ.ve:ʁ.vi'ã:n]. Da notenniñ ' zo e ta amañ e-raok ar gensonenn gweuz-dent dre strakal mouezhiet.
- **Ar gensonenn logig dre strakal** : get AI1966 e ta er bomm *barzh ma* [barmə]. A-bouez eo resisaat e ta kanet getoñ. Un diforc'h a sanadur heverk a zo get ar c'homzour-mañ etre e gomz-plaen hag e gan ; ar c'han é vout kaset get kensonennoù logig hag ar c'homz get kensonennoù hugenn. Ar memes anadenn a zo bet merchet get Crahé : « Les locuteurs, dits bilingues passifs, préfèrent eux, articuler [ʁ], et ne réalisent jamais /r/ de manière roulée [r] en breton, sauf en langue chantée »<sup>1</sup>.

#### 4. Emdroadur ar c'houlpad /rh/

Perzhioù boutin a vercher e sanadur ar c'houlpad /rh/ get an tri rummad komzourion dielfennet : an degouezh /Brh/ dibenn eztaolet get ar ruzenn ouel divouezh get lod brasañ anezhe (*àr-lerc'h* [aʁlɛʁ] get PA1902, B1935, G1952...) ; sanadur ar gensonenn staon dre dostaat [j] en degouezh /BrhB/ (*é terc'hel* [tɛʁjəl] get BU1907, *ar werc'hez* [əʁ.ʁiʁjœs] get PSK1923, *merc'her* [mœʁ'je:ʁ] get P1997...) ; ar c'hensonennoù divouezhiet en degouezh /BrhB/ ha sanadur ar ruzenn darzh divouezh get an darn vrasañ (*d'ar c'hatekiz* [dəhate'tʃis] get AI1896, *ur c'hado* [oha'do] get AIO1931, *d'ar c'hatechism* [dəhateʃism] get BU1971...).

Evit a sella emdroadur sanadur ar c'houlpad /rh/ e vercher eh a ar c'hendeuziñ àr stankaat a rummad da rummad : 35% (6/17) a gendeuza an daou fonem plaen er rummad 1892-1918, 46% (6/13) er rummad 1919-1943 ha 75% (6/8) er rummad 1944-1997<sup>2</sup>. An

1 CRAHÉ Maxime-Morvan. 2013, op. cit., p.142

2 Èl-rezon e ranker derc'hel e soñj e tiazezomp an dregantajoù-mañ àr ar skouerioù bet klevet en arroudennoù



degouezh ma vez distaget an daou fonem an eil a-zoc'h egile é terc'hel d'o sanadur boas a ya àr ralaat adal ar rummad 1919-1943 get ur gomzourez hepken (AI1923). Ar skouer arall er rummad-se a za get AH1921 a ra get ur ruzenn darzh divouezh bihanaet : *kerhouel* [kɛʁ<sup>h</sup>uɛ:l], èl get AI1966 en drivet rummad ivez : *iwerzhoneg* [ivɛʁ<sup>h</sup>ɔːnek]. Ar ger-mell resis a vez distaget ar gensonenn rotek ennoñ er rummadoù 1892-1918 ha 1919-1943 mes ne za ket skouer erbet get ar rummad 1944-1997, pezh a ya a-du get kresk ar c'hendeuziñ. Get an tri rummad e kaver an degouezh ma ta ar gensonenn rotek he-unan da zisoc'h ar gendeuzadenn, bihanniver bep taol e-keñver an hollad komzourion newazh : *gwerzhet* [dʒɛʁɛt] (ML1914), (*a gerzhe* [dʒɛ:ʁɛ] (PEN1921), *àr-lerc'h ar brezel* [aʁlɛʁ.əʁ.brøzɛ:l] (L1958), da skouer. Kement-se hor brouda da sellet a-dostoc'h doc'h ar c'hemmesk etre /r/ ha /h/ e Bro-Gwened Izel.

## F - kemmesk /r/ ha /h/, pe kensonennoù mouezhiet ha divouezh

### 1. Rummad 1892-1918

Ar c'hemmesk etre /r/ ha /h/ a zo anavet e brezhoneg Bro Gwened Izel<sup>1</sup>. Lod-brasañ ag ar sanadurioù a c'heller lakaat da gemmesk etre /r/ ha /h/ er standilhon a za a-ziàr sanadur mouezhiet ar gensonenn dibenn : ar ruzenn hugenn mouezhiet [ʁ] e lec'h ar ruzenn hugenn divouezh (kreñv [χ] pe blot [ʁ]). Peotramant c'hoazh e lec'h ar ruzennoù tarz [h] pe gouel [x] divouezh. 8 komzour diàr 17 ag ar rummad 1892-1918 a vouezhia ar ruzenn hugenn en degouezh /Bh/ dibenn, ne verna ma vehe hugennel pe logigel o sanadur boaz : *seizh* [sɛʁ] (AH1892), *lec'h* [lɛ:ʁ] (AI1895), *c'hoazh* [waʁ] (PZ1902), *me 'zalc'he* [mɛ.zalɛ] (AH1904), *kalz a winizh* [kal.a.vəne:ʁ] (PSK1907-02), *àr-lerc'h* [a'lɛʁ] (ML1914), *paourkaezh* [pɔʁtʃɛʁ] (P1914), *honnezh* [hu'nɛʁ] (O1918). Nemedennoù a vez ag ar sanadurioù-se get razh ar gomzourion-mañ e-keñver o sanadur boas hag a vez divouezh en degouezh /Bh/ dibenn d'ar liesañ-bras<sup>2</sup>.

Doc'h an tu arall e vez a zivouezhadur ar ruzennoù dirak pe àr-lerc'h ur gensonenn divouezh arall. Get ar rummad 1892-1918 n'eus ket nemet 3 c'homzour ha ne za ket dezhe divouezhaat ar c'hensonennoù rotek e degouezhioù ha ne dennont ket d'an /r/ kentañ. Evit ar

---

dielfennet.

1 McKENNA, 1976, op.cit. p.59

2 Ral eo kavout oc'hpenn ur skouer ag ar mouezhiadur-mañ get ar gomzourion meneget.

re a zo hugennel o sanadur boas e ta ar ruzenn hugenn divouezh : *skriv* [skʁiɥ] (AH1892), *petra* [pətʁa] (PA1902), *memestra* [mə'ʃtʁa] (AH1904). Hrevez an nerzh lakaet en distagiñ e c'hella mont ar ruzenn divouezh-mañ da ruzenn ouel divouezh ivez : *etre* [tʁɛ] (PA1902), *traoù* [tʁaʊ] (AH1904), *triwec'h* ['tʁiwɛx] (O1918). Get ar c'homzour-mañ diwezhañ n'eus ket nemet ar ruzenn ouel divouezh a za dezhoñ, dirak ur gensonenn divouezh : *a sort-se* ['sɔx,sø] pe memes àr-lerc'h ur gensonenn vouezhiet : *àr-droad* [aʳ'dʁɔd]. Kavout ur ruzenn divouezh stag doc'h ur gensonenn vouezhiet a c'heller get komzourion arall : *ma breur* [mə.bʁœʁ] (GW1893), *brezel* [bʁɛ'zɛ:l] (AH1904). Pe c'hoazh en degouezh /Br/ dibenn : *amzer* [ãmzɛʁ] (AH1892), *karter* ['ka:ʁtɛʁ] (AH1904). Evit ar re a vez logiged o sanadur boas e ta an hevelep anadenn get stumm divouezh ar gensonenn logig dre strakal èl *tri* [tʁi] (ML1914) pe *netra* ['nitʁa] (PSK1907-02) da skouer. Kavout a raer anezhi en degouezh /Br/ dibenn ivez : *labour* ['la:buʁ] (B1911); pe c'hoazh stag doc'h ur gensonenn vouezhiet : *da Brizieg* [bʁizɛk] (PZ1902), *pevar blez* ['pvaʁble] (B1911). Ar gensonenn logig dre fraoñval divouezh a gaver ivez mes dibaotoc'h a-galz : *etre* div vogalenn dre ur wezh : *da barat* [də.ba'ʁat] (BU1896), stag doc'h ur gensonenn vouezhiet get ur c'homzour ivez : *hent-bras* [ʁ] (AIO1905) ha stag doc'h ur gensonenn divouezh get ur c'homzour arall : *d'ar froñ* [də'ʁfʁɔ̃] (AI1895).

Evit a sella doc'h ar c'hemmesk *etre* /r/ ha /h/ -sanadur ur gensonenn rotek e lec'h ur ruzenn darzh pe ar c'hontrefed- e kaver nebeutoc'h a skouerioù. Er rummad 1892-1918 ne za ket nemet dre ziv wezh : *gwerzhet* [dʒwɛʁɛt] get AI1896 ha *marc'hadour* [maradu:ʀ] get BU1907. An div skouer-mañ emañ bet lakaet ar gaoz àrnezhe er pennad gloestret d'ar c'houlpad /rh/ c'hoazh rak donet a raont en degouezh-mañ o-daou. Estroc'h evit ur c'hemmesk e c'hellont bout lakaet da vutadur an /h/ ivez.

## 2. Rummad 1919-1943

Get ar rummad-mañ e adkaver ar ruzenn hugenn mouezhiet en degouezh /Bh/ dibenn get 6 komzour diàr an 13 a ya da c'hober ar standilhon, kement-se é vout ur sanadur dibaot dezhe ur sort rak stankoc'h eo ar ruzennoù divouezh en hevelep degouezh. Setu-amañ ur skouer get pep unan : *peder gwezh* [padɛʁ.dʒwɛʁ] (PEN1921), *barzh* ['baʁ] (PSK1923), *sur a-walc'h* [syʁwaw] (AIO1931), *aesoc'h* [ɛisɔʁ] (KD1933), *dec'h* [de:ʁ] (AI1937), *àr-lerc'h* [aʳ'lɛʁ] (S1943). Doc'hpenn an degouezh-mañ e kaver ar ruzenn hugenn mouezhiet dirak ur

gensonenn galet er gaoz *doc'hpenn* [dɔːɸpœn] get daou gomzour er rummad-mañ (PSK1923 ha KL1929), a gaver ivez get ar ruzenn ouel divouezh [ˈdɔxpœn] e mod-arall. Erfin e ta ur skouer ag ar ruzenn hugenn mouezhiet er bomm *pezh vlez* [peːˈvle] (AI1937), amañ dirak ur gensonenn vouezhiet ivez (da geñveriiñ *doc'h pezh kani* [pɛxkani] get PEN1935).

Evit an divouezhaat e adkaver skouerioù a zarempredoù etre kensonennoù divouezh ; pa za ar ruzenn àr-lerc'h unan : *troiñ* [tʁwɛ̃j̃] (AH1921), *traoù* [tʁəu] (PEN1921), *etre* [tʁe] (PSK1923), *prenet* [ˈpʁɛ̃nət] (KD1933), *perak* [pʁɛ] (PEN1935), *tre(-mañ)* [ˈtʁe] (AI1937), *tri* [tʁi] (S1943). Hag a pa za e-raok ur gensonenn divouezh arall : *d'ober tout* [dɔːbœɸ.tut] (AH1921), *lâret din* [laːɸtɛ̃j̃] (KD1933), *lâret deoc'h* [laɸtɔx] (PEN1935). Mes amañ c'hoazh e kaver kensonennoù rotek divouezh en degouezh /Br/ dibenn : *e levr* [i.ɮuɸ], *é tigor* [i.tigoɸ] (AI1919), *amzer* [ãmzœx] (PSK1923), *he c'hoar* [i.hwɛɸ]<sup>1</sup> (AIO1931), *yer* [jeːɸ] (PEN1935), *noter* [x] (B1935), *mañsoner* [masoneːɸ] (AI1937). Raloc'h an divouezhadur da heul ur gensonenn vouezhiet dre ma ne za nemet get daou gomzour hag ur wezh bennak pep unan : *a vreizh-izel* [a.vʁɛːhiˈzeːl] (AI1919), *dre-mañ* [dʁɛmã] (KD1933). Erfin e kaver ur skouer ag an divouezhaat etre div vogalenn get PEN1921 : *berrat* [bɛːɸat].

Evit ar sanadurioù dibaroc'h e vercher *kerzhit* [tʃɛrət] get AI1919 hag *a gerzhe* [dʒɛːɸe] get PEN1921, bet meneget o-daou c'hoazh er pennad a-ziàr ar c'houlpad /rh/. Gellout a raont bout lakaet da sammad an daou fonem, da vutadur an /h/ pe da gemmesk etre /r/ ha /h/ mes an diover a skouerioù arall en degouezhioù arall ne bermeta ket da denniñ kentel anezhe. Ur sanadur dibar arall a za get AH1921 er ger *àr-lerc'h* [ˈaːɮɛx] get ar ruzenn darzh divouezh bihanaet er penn kentañ anezhoñ. McKenna a venega ar sanadur-mañ resis : « [<sup>h</sup>a ˈlɛ<sup>h</sup>] arlerh, 'after', the initial consonant of which was preceded by a pause »<sup>2</sup>. Evit hor skouer-ni e ta *àr-lerc'h* get AH1921 goude un troc'hig berr èl meneget get McKenna amañ. A-benn ar fin n'eus ket nemet daou gomzour diàr an 13 ag ar rummad-mañ ha n'eus ket daet skouer erbet a vouezhadur nag a gemmesk etre /r/ ha /h/ gete : AI1923 ha S1934.

### 3. Rummad 1944-1997

Ar ruzenn hugenn mouezhiet sanet e lec'h ar ruzenn darzh divouezh a za get 7

1 Mes : *un c'hoar* [on.hwɛːɸ] a za ivez getoñ da skouer.

2 McKENNA Malachy, 1976, op. cit., p.59

komzour diàr an 8 anezhe ur wezh a-c'hwel. Ha 6 en degouezh /Bh/ dibenn : *startoc'h* [ʃtɛʁtɔʁ] (LV1958), *yezh* [je:ʁ] (AI1966), *douaroniezh* [dwaʁɔ̃njɛʁ] (BU1971), *àr-lerc'h* [aʁlɛʁ] (PSK1980), *c'hwec'h* [wɛʁ] (LS1989), *c'hoazh* [waʁ] (P1997). Donet a ra get 4 c'homzour en degouezh /BhK/ : *pezhiou* [pɛʁjɔʁ] (AIO1944), *gwalc'hiñ* [gwaʁlɛ̃jɛ̃] (LV1958), *daoustoc'h ma* [ʁ] (BU1971), *me 'zalc'ha* ['zaʁla] (P1997). Daou arall a ra get ar ruzenn hugenn mouezhiet en degouezh /BhB/ : *é c'houlenn* [iʁulɛ̃n] (G1952) ha *razh (an dud)* [ʁaʁ] (PSK1980). Kement-se a c'hella bout lakaet keñver-ha-keñver doc'h mutadur ar ruzenn darzh divouezh en degouezh /hB/ kentañ : *hanter devezh* [ãntɛʁ.dəʁɛʁ] (LV1958) pe c'hoazh doc'h koll talvoudegezh an /r/ kentañ : *en he raok* [ʁ] get P1997<sup>1</sup>.

Doc'h an tu arall e ta stank an divouezhadur get ar rummad-mañ pa vez stag doc'h ur gensonenn divouezh arall. Get an holl anezhe e ta ar ruzenn ouel divouezh : *petra* [petʁa] (AIO1944), *traou* [txaw] (G1952), *skriv* [skxiʁ] (LV1958), *etre* [e'txe:] (AI1966), *etre* [e'txe] (BU1971), *tri* [txi] (PSK1980), *mat-tre* [ma:txe] (LS1989), *tregont* [txɔ̃gɔ̃n] (P1997). Get tri c'homzour e vercher ivez ar ruzenn hugenn divouezh skañv : *traou* [tʁaʁ] hag *ur sort* [ʁ.sɔʁt] get AI1966, *tri* [tʁi] get LS1989 ha *traou* [tʁəw] ha *berped* [bɛʁpɛt] get P1997. Evit ar c'homzour-mañ diwezhañ e kaver ar memes ger sanet get an div ruzenn meneget amañ a-us : *frazennoù* [fxazɔ̃njəʁ] ha ['fʁazənɔʁ]. Get LV1958 e ta ar stumm kreñv : *traou-se* [tʁəʁ.sə]. Get AI1966 e ta ur wezh bennak ar gensonenn hugenn dre fraoñval mouezhiet e lec'h ar ruzenn darzh gortact : *doc'h* [dɔʁ]. Un nemedenn e tiskoueza bout e-keñver peurrestr ar standilhon.

Get tri c'homzour e kaver an divouezhadur stag doc'h ur gensonenn vouezhiet : *drastet* [dʁa:ʃtɛt] (BU1971), *dre* [dxe] (LS1989) hag *àr-dro* [axdxo] (P1977). Pevar c'homzour a ra get ar ruzenn ouel divouezh etre div vogalenn : *perak* [pə'xɛ<sup>k</sup>] (AIO1944), *keroc'h* [tʃɛxɔʁ] (BU1971), *hiriv* [ixiʁ] (LS1989), *labourat* [labuxat] (P1997). Kement-se na oa ket daet nemet get PEN1921 er rummad kent hag a rae get ar ruzenn hugenn divouezh kreñv ; èl BU1971 amañ ivez : *lâret* [laʁɛt], da skouer. Gober a ra P1997 get ar stumm skañv : *(me) lâra* [laʁa] pe c'hoazh *ar re 'rall* [ə.ʁe.'ʁɛl]. Erfin e kaver tri c'homzour é c'hober get ar ruzenn ouel divouezh pe ar ruzenn hugenn divouezh kreñv en degouezh /Br/ dibenn : *sklaer* [sklɛʁ] (G1952), ur vicher [oʁ.və'ʃɛʁ] (LV1958) ha *mor* [mox] (P1997). Da notenniñ e ra LV1958 get

---

1 E lec'h stumm divouezh an hevelep kensonenn gortact amañ doc'h lezenn an /r/ kentañ.

ar ruzenn hugenn mouezhiet er ger-mell amresis, pezh a zo dibar e-keñver ar rummadoù kent.

Dre vras e vercher ur sanadur divouezhiet stank get lod èl P1997 a ra get stummoù èl : *breton* ['bxœtõ:n] pe *ur sort* [ux.sœxt] a zo ar skouerioù nemete ag ar sanadur-mañ get ar gerioù-mañ er standilhon. Memes tra get BU1971 a ra get ar ruzenn hugenn divouezh kreñv lec'h ma vehemp engortoz a glevet ur ruzenn darzh divouezh : *marc'had* [ma'χat] pe get ur ruzenn darzh divouezh lec'h ne vehec'h ket engortoz a he c'hlevet : *blezad* [blehat]. N'eus ket nemet div skouer a sanadur ar gensonenn logig dre strakal e lec'h ar ruzenn darzh divouezh : *yec'hed mat* [jɛrɛt.ma:d] (AIO1944) ha *barzh ma* [barmə] (AI1966). Getoñ-diwezhañ e ta en ur stumm kanet : gober a ra get ar c'hensonennoù logig dre ganal hag ar re hugenn dre gomzal èl bet meneget uheloc'h. Pezh a staga ar c'hensonennoù rotek doc'h ur live yezh hrevez o sanadur. Ne vercher ket an diforc'h-mañ a sanadur etre daou live yezh er rummadoù kent.

## VI – An diglosiezh e Bro-Gwened Izel

Goude bout lakaet àr-wel emdroadur sanadur ar c'hensonennoù rotek kenetre an tri rummad komzourion e klaskimp dielfenniñ ar rag hag ar perag anezhe. Un anadenn a za àr-wel enta : an diglosiezh e Bro-Gwened Izel etre brezhoneg ha galleg.

### A - Emdroadur ar mouezhiadur

Doc'hpenn ar cheñchamant a sanadur boas etre an tri rummad -ar c'hensonennoù logig é vonet àr ralaat adal 1919-1943- e vercher div anadenn é stankaat àr-hed an tri rummad. Doc'h un tu e vez muioc'h-mui a gensonennoù mouezhiet e dibenn ar bommoù (ar ruzenn hugenn mouezhiet é tonet e lec'h he stumm divouezh da skouer) ha doc'h an tu arall e vez muioc'h-mui a gensonennoù divouezh é tonet en degouezhioù arall, nemet en degouezh /r/ kentañ a ziskoueza koll e dalvoudegezh. En em gavout a raer da skouer get ur gensonenn divouezh etre div vogalenn dre ur wezh er rummad 1892-1918 get BU1896 : *da barat* [dɑ.ba 'ɾat], dre ur wezh arall er rummad 1919-1943 get *berrat* [bɛ:χat] (PEN1921) mes dre beder gwezh er rummad 1944-1997. Memes kresk evit ar c'hensonennoù rotek dibenn divouezhiet get : 11% (2/17) ag ar gomzourion er rummad kentañ, 46% (6/13) en eil rummad ha 37,5% (3/8) en drivet hani. Evit a sella ar c'hensonennoù mouezhiet en degouezh /Bh/ dibenn e kaver 47% (8/17) ag ar gomzourion er rummad kentañ, 46% (6/13) en eil rummad mes 75% (6/8) en drivet rummad. Diazezet eo an dregantajoù-mañ àr ar sanadurioù daet ur wezh a-c'hwel get ar gomzourion mes merchet eh eus bet eh a an divouezhaat àr stankaat e predeg an haniennoù en drivet rummad get stummoù ral e-keñver peurrestr ar standilhon é tonet gete.

Posubl eo arliviñ kement-se é sellet doc'h ar perzhioù boutin kenetre ar rummadoù : ar mouezhiadur get *c'hoazh* [wɑʁ] a za : ha get PZ1902 kement ha get P1997 da skouer. Memes mod eo get divouezhiadur ar gensonenn rotek dibenn a zegouezha get ar c'homzour koshañ : *amzer* [ãmzɛʁ] (AH1892) hag an hani yaouankañ : *mor* [mox] (P1997). Nemedennoù e chomont e-keñver peurrestr ar standilhon hag o sanadur boas mes arouezius eo a-walc'h rak mard a an anadennoù mouezhiaat ha divouezhiaat àr stankaat e weler penaos n'int ket nevez e brezhoneg Bro-Gwened Izel naket.

## B - Diforc'h a-zoc'h ar sanadur gallek

Hrevez an enrolladennoù hag an atersadennoù hon eus bet tro da glevet galleg get ar gomzourion dielfennet o sanadur. Daoustoc'h d'un diover a ditouroù a-fet mestroni ar galleg get ar gomzourion goshañ eh eus daet bommoù, menegoù pe pennadoù-kaoz gallek get lod-kaer anezhe. Diàrnezhe e c'hellomp keñveriañ sanadur ar c'hensonennoù rotek en div yezh, ha memes en un nebeud yezhoù arall hrevez ar gomzourion (alamaneg ha saozneg). Kement-se da welet ha ma vez savet un diforc'h a sanadur etre brezhoneg ha galleg get ar gomzourion pe ma vez trec'h sanadur boas ur yezh àn arall. En taolennoù amañ-dindan e vo resisaet ar sanadur boas e brezhoneg get ar gomzourion, da lâret eo get pesort rummad kensonennoù e raont ar muiañ : hugennel pe logigel da skouer.

### 1. Rummad 1892-1918

Komzour	Sanadur boas e brezhoneg	Sanadur brezhonek boas, e galleg	Sanadur dishañval e galleg
AI1895	[r]	<i>quatre-vingt-dix-sept</i> [katʁə.vɛ̃.di.sɛ'tã] ; <i>trois</i> [tʁwa] ; <i>quatre</i> [kat] ; <i>prisonnier de guerre</i> [prizonje.də.ɡɛ:r]	<i>la guerre c'est la guerre</i> [la.ɡɛʁ.sɛ̃.la.ɡɛ:ʁ] ; <i>prisonnier de guerre</i> [pʷizonje.də.ɡɛ:r]
LL1900	[r]	<i>agréable</i> [agʁe'a:b]	<i>Christiane</i> [kistjan]
PZ1902	[r]	<i>son livre</i> [sɔ:'lif] ; <i>charron</i> [ʃa:rɔ̃]	
PA1902	[ʁ]	<i>(nous allons) partir</i> ['paʁti:ʁ] ;	<i>(c'est du) corail</i> [ko'ʁaj]
AH1904	[ʁ]	<i>pareil</i> ['pa:ʁɛj]	
AIO1905		<i>sous-terrain</i> [su'tɛrɛ̃] ; <i>c'est rare</i> [ra:r] ; <i>trente</i> [trã:t] ; <i>encore</i> [ãkɔ:r] ; <i>le français</i> [lø.'fã:sɛ] ; <i>kañser (Cancer)</i> ['kãse:r]	
BU1907	[r]	<i>très bien</i> [trɛ:'bjɛ̃]	
PSK1907-02	[r]	<i>trente</i> [tʁãt]	<i>architecte</i> ['aʃitɛk] ; <i>tourné</i> [r] ; <i>impermeabloù</i> [ɛ̃pɛʁmea:bou] ; <i>buraliste</i> [byʷa'lisʰ] ; <i>morceau</i> [mɔ:s'so]

PSK1907-01	[r]	<i>preferañs (préférence)</i> [r]	
B1911	[r]	<i>Tour</i> ['tu:r]	<i>trente-cinq ans</i> ['tãdsẽ,kã:]; <i>Kristian</i> [cistjẽ:]; <i>trente</i> [tã:']; <i>Orléans</i> ['hɔ:ʰle,ã]; <i>kornichon (cornichons)</i> [kɔ'ni'ʃɔ:]; <i>Camembert</i> [kamãmbɛ:ɸ]
ML1914	[r]	<i>rapport</i> ['ra,pɔr]	
O1918	[ɸ]	<i>grand-père</i> [gɸã.pɛ:ɸ]; <i>militaire</i> [mili'tɛ:ɸ]; <i>char</i> [ʃa:ɸ]	<i>drei kilometer</i> [ɸ] (alamaneg); <i>endroit</i> [ãdɸwa]

An daou gomzour koshañ n'eus ket daet skouer erbet a vommoù gallek gete. O-daou emaint a Vro an Oriant ha bet é kemer perzh er c'hentañ brezel bed, pezh a c'hellahe talviñ o dehe bet tro da zeskiñ galleg, èl AI1895 a ra get ar galleg da c'hober meneg doc'h gerioù arbennik (*prisonnier de guerre* [prizonje.də.gɛ:r]) pe kaozoù gallek bet klevet getoñ (*la guerre c'est la guerre* [la.gɛɸ.sɛ.la.gɛ:ɸ]). Lies e ta bommoù gallek er memes daou zegouezh get ar gomzourion arall : gerioù arbennik pe menegoù gallek. Mes get an anvioù divoutin ivez (*Camembert* [kamãmbɛ:ɸ] get B1911) ; pe c'hoazh evit an niverennoù hag an deiziadoù (*trente-cinq ans* ['tãdsẽ,kã:] get B1911). Re arall ne za ket skouer gallek erbet gete en arroudennoù dielfennet : AI1896, BU1896, P1914.

Eroc'h evit sanadur ar c'hensonennoù rotek e ranker sellet doc'h an taol-mouezh ha hirder ar silabennoù da gompren get pesort patrom yezh e ra ar gomzourion. An daou c'her *pareil* ['pa:ɸɛj] (AH1904) ha *très bien* [trɛ:'bjẽ] (BU1907) a zo boutin a-walc'h e brezhoneg Bro-Gwened Izel<sup>1</sup> ha graet e vez gete e lec'h *hañval* ha *mat-tre*. Ar ger diwezhañ-mañ a ziskoueza bout dianav da vrezhonegourion an eil rummad ha stag doc'h an nevezvrezhoneg kentoc'h. Daoustoc'h da se hon eus o dalc'het e kont evit a sella ar bommoù gallek en daolenn amañ a-us. Evit O1918 e ra get bommoù gallek pa ziskoueza chom berr get e vrezhoneg (*grand-père* e lec'h *tad-kozh* pe *pepe*<sup>2</sup>). Pezh a ra e tiskoueza bout brezhonek e sanadur alkent, n'eo ket un diforc'h a gensonennoù mes hirder ar vogalenn er silabenn taol-mouezhiet. En ur gaoz èl *endroit* [ãdɸwa] hag a zo didaol-mouezh e adkaver patrom ar galleg kentoc'h. Da notenniñ e ta ur bomm alamanek dezhoñ en arroudenn dielfennet : *drei kilometer* daet en ur

1 Doc'h pezh bet klevet genomp get komzourion ar rummad 1919-1943.

2 Ar ger *pepe* [pə'pɛj] a glever stank er rummad 1919-1943 ha 1944-1997 e lec'h *tad-kozh* e Bro-Gwened Izel doc'h hor skiant prenet.



frazenn vrezhonek e lec'h *tri c'hilometr*. Desket en deus bet alamaneg é troiñ diàr ar galleg pa oa prizoniad en Alamagn e-pad an Eil Brezel Bed<sup>1</sup>, pezh a ziskoueza a-walc'h e vez muioc'h en e aez e galleg daoustoc'h dezhoñ bout ar brezhoneg da yezh-vamm.

Daou rummad komzourion a za àr-wel e-mesk ar re a zo daet bommoù gallek dezhe en arroudennoù dielfennet :

- **Ar gomzourion a ra get patrom ar brezhoneg hepken en div yezh** : da lâret eo get bogalennoù hir er silabennoù taol-mouezhiet (*charron* [ʃa:rõ] get PZ1902), ar gensonenn rotek mutet en degouezh /Kr/ dibenn (*son livre* [sõ:'lif] get PZ1902), implij ar c'hensonennoù logig, dre strakal d'ar liesañ (*sous-terrain* [su'terẽ] get AIO1905). Ha betek sanadur an /r/ kentañ (*rapport* ['r̥a.põr] get ML1914). Kement-se a ziskoueza e vez trec'h patrom ar brezhoneg àr hani ar galleg get ar gomzourion-mañ. Lies-kaer eh eus labourizion-douar anezhe ha diplom erbet estroc'h evit ar sertifikad, àr-bouez ML1914 hag en deus ur vestroniezh.
- **Ar gomzourion a glaska gober get patrom ar galleg** : da lâret eo ar re a ra ur striv heverk pa geñverier doc'h o sanadur boas, mes hep donet da benn vat d'ar liesañ : bihanaat pe mutiñ ar gensonenn rotek (*trente* [t'ã:'] get B1911, *architecte* ['aʃitɛk] get PSK1907-02), pe gober get ar gensonenn gweuz-drekstaon dre dostaat (*prisonnier de guerre* [p'izonje.dõ.gɛ:'] get AI1895). Fonemoù dibar a za get lod e-keñver o sanadur boas, berped bihanaet anezhe : *trente-cinq ans* ['tãdsẽ,kã:], *Orléans* ['hõ:'le,ã] get B1911 ; *morceau* [mõ:'so], *impermeabloù* [ẽpɛ'mea:bõ] get PSK1907-02 da skouer. Get PA1902 e ta ar gensonenn hugenn divouezh etre div vogalenn : (*c'est du*) *corail* [ko'ʒaj]. Ar skouer nemeti a sanadur ar ruzenn hugenn divouezh en degouezh /BrB/ en arroudennoù dielfennet. Rak donet a ra dezhoñ ar ruzenn hugenn divouezh-mañ get an /r/ kentañ, peotramant stag doc'h ur gensonenn divouezh arall er c'haozoù brezhonek. E-touesk ar re a glaska gober get patrom ar galleg e kaver : daou velinour, ur moraer, ur sezonourez<sup>2</sup> hag un archer ; da lâret eo tud hag o deus bet tro da dremen dre ar galleg -pe da gaozeal galleg da vat- àr ar pemdez. Pezh n'eo ket ken sur evit ar labourizion-douar ganet er rummad-mañ.

1 Displeget getoñ en arroudennoù dielfennet. Labouret en deus bet e Bro-C'Hall (Lyon) blezadoù-pad doc'hpenn kement-se ; empeniñ a c'heller a-walc'h e veze dibaot dezhoñ mont e brezhoneg da neuze.

2 Da lâret eo monet da labourat er Beauce da skouer.

## 2. Rummad 1919-1943

Komzour	Sanadur boaz e brezhoneg	Sanadur brezhonek boaz e galleg	Sanadur disañval e galleg
AI1919	[r]		boñjour [bõju:ʁ]
PEN1921	[ʁ]	<i>manœuvre</i> [manœf], <i>asperj</i> [ˈaspɛʁʃ]	<i>Loire-et-Cher</i> [ʁ]
AH1921	[ʁ]	<i>salaire</i> [salɛ:ʁ]	travailleur [tavajœʁ]
AI1923	[r]	<i>(famille) nombreuse</i> [nõ:'brøs]	
KL1929	[ʁ]		<i>saloperies</i> [salɔpɛi]
AIO1931	[ʁ]	<i>scierie</i> [si:ʁi]	
KD1933	[ʁ]	<i>incendiaire</i> [ẽsãdjɛ:ʁ]	<i>certificat (d'études)</i> [sɛʁtifikɑ]
PEN1935	[ʁ]		<i>Gardien</i> [Gɑʁdjɛ]
B1935	[ʁ]	<i>débarasser le plancher</i> [ʁ]	<i>Groupama</i> [gupa'mɑ]
AI1937	[ʁ]	<i>entreprise</i> [ˈã:ʁvə, pɛis], <i>quatorze-dix-huit</i> [ʁ]	
S1943	[ʁ]	<i>en décembre</i> [desãm]	<i>tu traînes</i> [txɛn]

S1934 ha PSK1923 n'eus ket daet skouer erbet gete a vommoù gallek en arroudennoù dielfennet. Mes get re ar rummad-mañ n'eus ket douetañs erbet e ouiont ar galleg hag o dez (bet) tro da gaozeal àr ar pemdez pa ouier o deus-holl kaset o buhez vicherel àr-lerc'h an Eil Brezel Bed, da lâret eo er c'hourz ma oa bet troc'het get treuzkas ar yezh er familhoù ha brasæt an diglosiezh e Breizh-Izel<sup>1</sup>.

Cheñchet eo ar jeu e-keñver ar rummad kent rak tanavoc'h e ta da vout an diforc'h a sanadur etre an div yezh : get AI1919 e c'heller lâret e vez disañval *boñjour* [bõju:ʁ] a-zoc'h e sanadur boas dre ma ra d'ar muiañ get ar gensonenn logig dre strakal e brezhoneg. Mes get razh ar gomzourion arall e ta ar memes kensonenn rotek e galleg èl e brezhoneg. Heverk eo skouer AI1919 rak an hani kentañ ha nemetañ en e rummad é c'hober get ar c'hensonennoù logig e brezhoneg hag ar c'hensonennoù hugenn e galleg, é verchiñ èl-se un diforc'h splann a sanadur etre an div yezh. E Langedig, Bro-Gwened Uhel, e kaver komzourion ag ar rummad-mañ é c'hober get ar ruzenn hugenn e galleg hag ar gensonenn logig dre fraoñval e brezhoneg

<sup>1</sup> BARRÉ Ronan, *Les langues celtiques / entre survivance populaire et renouveau élitiste ?*, Presses Universitaires de Rennes, Rennes 2, 2006., p.16

hrezvez labour Crahé mes diskoueziñ a ra bout dalc'het get ar c'hensonennoù logig pelloc'h evit er Vro Pourlet eno<sup>1</sup>.

Da gompren mard eo dishañval sanadur ar gomzourion a ra get ar c'hensonennoù hugenn en div yezh e ranker sellet pizh doc'h an taol-mouezh ha hirder ar bogalennoù da skouer. É tapout harp àr skouerioù ar rummad 1892-1918 e c'heller merchiñ un emdroadur en darempred etre galleg ha brezhoneg get ar gomzourion ha donedigezh ur rummad nevez : ar re a ziskoueza donet a-benn da c'hober get patrom ar galleg e galleg, evit a sella ar c'hensonennoù rotek atav. Setu-amañ ar rummadoù a za àr-wel :

- **Ar gomzourion a ra get patrom ar brezhoneg hepken en div yezh** : n'eus ket nemet ur skouer ag ur gomzourez é terc'hel d'ar c'hensonennoù logig e galleg èl e brezhoneg er rummad-mañ, AI1923 get ar bomm (*famille*) *nombreuse* [nõ:'brøs] da skouer. AIO1931 hag AI1937 a ra o-daou get bogalennoù hir àr ar silabennoù taol-mouezhiet daoustoc'h dezhe mont get ar ruzenn hugenn en div yezh. Dre ma ne za ket skouer erbet a gaozou didaol-mouezh gete e c'heller soñjal e raont get patrom ar brezhoneg e galleg ivez.
- **Ar gomzourion a glaska gober get patrom ar galleg** : ar perzh heverkañ amañ a zo an degouezh /Kr/ dibenn, mutet er c'haozou gallek get PEN1921 (*manœuvre* [manœf]) ha S1943 (*décembre* [desãm]), daoustoc'h dezhe donet da benn a ezteurel kaozou doc'h patrom ar galleg : (*tu*) *traînes* [txen] (S1943). Ne adkaver ket mui ar stummoù bihanaet liessort bet merchet get ar rummad kent. Nemet div skouer a vutadur ar gensonenn rotek get B1935 get an anv divoutin *Groupama* [gupa'ma] hag AH1921 get *travailleur* [tavajœr]. O-div e tegasont soñj ag an hevelep anadenn er rummad kent (*architecte* ['aʃitɛk] get PSK1907-02 da skouer). Kontrel da AIO1931 hag AI1937 e ra KD1933 get kaozou gallek taol-mouezhiet doc'h patrom ar brezhonek ha re arall didaol-mouezh, pezh a ra dezhoñ bout e-touesk ar re a glaska gober get patrom ar galleg hep donet da benn naket.
- **Ar gomzourion a ra get patrom ar galleg** : get ar rummad-mañ e kaver sanadurioù gallek hep ne vehe roudou ag ar patrom brezhonek, pezh a oa bet merchet get O1918

---

<sup>1</sup> Da lâret eo get ar vrezhonegourion bet ganet er blezioù 1940 ha 1950. CRAHÉ Maxime-Morvan, *Le breton de Languidic : étude phonétique, morphologique et syntaxique d'un sous-dialecte du breton vannetais*. Linguistique. Université Rennes 2, 2013. Français. NNT : 2013REN20062. Tel-00976584, p.65

c'hoazh, mes hag a oa dibar e-keñver re e rummad. Da skouer : *saloperies*<sup>1</sup> [salɔpɛi] get KL1929 pe *Gardien*<sup>2</sup> [Gaʁdjɛ̃] get PEN1935. Skouer AI1919 bet meneget a-us get *boñjour* [bɔ̃juːʁ] a c'hella bout tennet e kont amañ ivez rak donet a ra an tri c'homzour-mañ a-benn da ziforc'hiiñ sanadur an div yezh. Kontrel d'ar gomzourion a glaska gober get ar patrom gallek hep donet da benn a c'hober get ar c'hensonennoù hugenn pe bogalennoù berr da skouer. Èl-just e vez kaoz a c'herioù pe bommoù digenvez, n'eo ket lâret e vehe gallek prozodiezh ar gomzourion-mañ evit kement-se.

### 3. Rummad 1944-1997

Komzour	Sanadur brezhonek boaz	Sanadur gallek hañval doc'h an hani brezhonek (hag an eskemm)	Sanadur saoznek dishañval a-zoc'h an hani brezhonek
AIO1944	[ʁ]	<i>kilometr</i> [kilometʁ] ; <i>représentant</i> [ʁɛpʁezɑ̃'tɑ̃]	
G1952	[ʁ] ha [r]	<i>Je comprend pas</i> [ʒə.kɔ̃pʁɑ̃.'pa], <i>c'est sûr</i> [sɛ.syʁ] ; <i>(le) truc</i> [tʁyk] ; <i>Maritime</i> [maʁi'tim]	
LV1958	[ʁ]	<i>dire</i> [diʁ] ; <i>le professeur</i> [pʁɔfesœʁ], <i>je pourrais pas</i> [ʒ.puʁɛ.'pa]	
AI1966	[ʁ]	<i>Provence</i> [pʁɔvɑ̃s]	<i>Memorize</i> [ɪ]
BU1971	[ʁ]	<i>(discipline) militaire</i> [militɛʁ]	
PSK1980	[ʁ]	<i>Accélééré</i> [aksele'ʁe] ; <i>Audierne</i> [o'djɛʁn] ; <i>(kilometr</i> [tʃilometʁ], <i>mestr</i> [mɛʃtʁ])	
LS1989	[ʁ]	<i>Fort La Latte</i> [fɔʁ.la.'la:t]	
P1997	[ʁ]	<i>carburant</i> ['kaʁbyʁɑ̃], <i>(maison de) retraite</i> [ʁɔ'tʁɛt]	

Get ar rummad 1944-1997 e kaver nebeutoc'h a ziforc'hioù etre an div yezh dre ma ta àr-wel ar memes kensonenn rotek e galleg èl e brezhoneg d'ar liesañ : ar ruzenn hugenn, pe ar ruzenn ouel ivez. Mes degouezhioù dishañval a gaver alkent ha peadra da arliviñ an emdroadur :

1 Lousteri

2 Anv ur c'hi a-barzh amañ.

- **Ar re a glaska gober get patrom ar brezhoneg** : tri c'homzour ag ar rummad-mañ a zegouezha gete gober get ar gensonenn logig dre strakal en o fredeg brezhoneg hep ne zahe gwezh erbet e galleg. G1952 a ra èl-se get ar gensonenn-mañ get 'gozik an hanter ag e gensonennoù rotek (*breton* [brətō] da skouer). Gober a ra get un nebeud alofonennoù arall ([ɹ] ha [r]) e brezhoneg mes derc'hel a ra d'ar ruzennoù hugenn pe gouel e galleg. Al1966 a ra ar memes tra mes get un diforc'h a live-yezh : ar c'hensonennoù logig dre ganal hag ar re hugenn dre gomzal. Doc'hpenn kement-se e ra ar c'homzour-mañ diwezhañ get ur gaoz saoznek dre ur wezh hag é c'hober get ar gensonenn logig dre dostaat mouezhiet da neuze. Pezh ne zegouezha ket gwezh erbet nag e galleg nag e brezhoneg. Da lâret eo emañ emskiant ag an diforc'h a sanadur etre ar saozneg doc'h un tu hag ar galleg / brezhoneg komzet doc'h an tu arall, get un arliv evit ar brezhoneg kanet. Erfin e ra PSK1980 get ar gensonenn logig dre strakal mes ral a wezh hag é tisplegiñ en doa klasket er gober plaen pa 'n doa bet labouret e brezhoneg get an c'hoant « gober èl ar re añsion »<sup>1</sup>. Arestet en doa get e strivoù àr-lerc'h ma vehe bet graet goap doc'htoñ get nevezvrezhonegourion arall. Stag eo neuze ar c'hensonennoù logig doc'h un abeg a vezh a-barzh kumuniezh ar vrezhonegourion he-c'hunan. Gellout a raer lakaat en em gaver amañ get ur skouer kontrol e-keñver ar rummad 1892-1918 pa veze komzourion é striviñ da dostaat doc'h ur sanadur gallek hep donet da benn. Ar memes disoc'h amañ pa za da b/PSK1980 saniñ an /r/ dibenn en degouezh /Kr/ : *kilometr* [tʃilomɛx], pezh a za diàr ar patrom gallek ; pe pa vercher ne ra G1952 get ar gensonenn logig nemet get ur lodenn ag e gaozoù, ha hrevez ar c'henarroud<sup>2</sup>.
- **Ar gomzourion a ra get patrom ar galleg** : ma lakaer a-gostez an teir skouer a gomzourion é klask gober get kensonennoù logig (n'eo ket ur c'hementad dister diàr an eizh komzour ag ar standilhon-mañ ur sort), e vercher e ra razh ar gomzourion ag ar rummad-mañ get bommoù gallek flour. N'eus ket a vogalennoù hir pe a daol-mouezh èl a c'heller kavout en daou rummad kent, nebeutoc'h c'hoazh a gensonennoù logig er bommoù gallek èl a veze er rummad kentañ. Doc'h an tu kontrol e anzava LV1958 penaos ne vehe ket posubl dezhoñ kelenn brezhoneg get an diover bras a c'heriaoueg a zo dezhoñ ha penaos e kava dezhoñ emañ ar rannyezhoù é vont da get tamm-ha-tamm.

---

1 Atersadenn kaset e Persken genomp d'ar 05/03/2022

2 Dindan div atersadenn vrezhonek getoñ bet dielfennet e rae muioc'h get ar c'hensonennoù logig en unan doc'hte peotramant muioc'h get ar c'hensonennoù hugenn en arall.

Soñjal a ra dezhoñ bout e-touesk ar re ziwezhañ é komzal brezhoneg e barrez<sup>1</sup>.

## CH - Levezon ar galleg

An diglosiezh e Breizh Izel a zo aet à-raok e-kerzh an XX<sup>vet</sup> kantved get ar galleg é c'hounit tachenn àr ar brezhoneg er gevredigezh. Er merchiñ a raer a-walc'h get hor standilhon : doc'hpenn ar c'hemm e sanadur ar c'hensonennoù rotek etre ar Vro Pourlet ha Bro an Oriant e vercher e ta gerioù gallek d'ar gomzourion èl PA1902 pe O1918 hag a zo bet soubet en un endro gallek durant o buhez vicherel. Heverk eo gwelet e ta ar c'hensonennoù hugenn get komzourion ar rummad 1919-1943 er Vro Pourlet daoustoc'h da rummad o zud bout graet get kensonennoù logig hag arlivioù stankoc'h er sanadur. Àr an dro e ouier emañ get ar rummad-mañ eh eus bet paouezet get an treuzkas er familhoù. Ha hè d'en em gavout get ur blegenn nevez, cheñchamantoù e-leizh er vuhez pemdez ha donedigezh gerioù gallek liammet doc'h ar cheñchamantoù-se. Maxime-Morvan Crahé a vercha an hevelep emdroadur e Langedig, e Bro-Gwened Uhel : « Nous constatons une transition du /r/, entre 1940 et 1950, passant de roulé à uvulaire »<sup>2</sup> kent goulakaat e vehe daet koursoc'h e Bro-Gwened Izel : « L'informateur J, est un locuteur BV, où le /r/ semble articulé de manière uvulaire depuis longtemps »<sup>3</sup>, pezh a goucha doc'h sanadur Bro an Oriant peotramant doc'h an emdroadur daet er Vro Pourlet adal achumant ar blezioù 1920. Dezhoñ e c'hellahe ar galleg bout kaoz d'an emdroadur-mañ ivez.<sup>4</sup> Ar memes goulakadenn a za get Cheveau evit Bro-Gwened Izel<sup>5</sup>. Bugale pe bugale-vihan komzourion an daou rummad 1892-1918 ha 1919-1943, re ar rummad 1944-1997, o deus-holl ar galleg da yezh-vamm ha hè soubet en un endro gallek. N'eo ket souezh enta e tahe lezennoù ha patrom ar galleg da arliviñ o fonologiezh vrezhonek, èl en displega Erwan Le Pipec :

« Que le phénomène soit conscient ou non, phonologie et prosodie montrent souvent un alignement complet sur le français [...] Si bien qu'il y a aujourd'hui des néo-bretonnants de 2ème, 3ème ou 4ème génération, qui ont pour langue première un breton au lexique riche, bien que parfois

---

1 Atersadenn kaset genomp e Lovedan d'an 19/02/2022.

2 CRAHÉ Maxime-Morvan, 2013, op. cit., p.65

3 CRAHÉ Maxime-Morvan, 2013, ibid., p.65

4 CRAHÉ Maxime-Morvan, ibid., p.141

5 « Il est vraisemblable que la prononciation des r en breton a évolué sous influence du français, le r alvéolaire roulé ayant souvent été remplacé par un r uvulaire comme dans cette langue », CHEVEAU Loïc. *Approche phonologique, morphologique et syntaxique du breton du Grand Lorient (basvannetais)*. Linguistique. Université Rennes 2, 2007. Français. tel-00189941v2, p.93

hermétique, à la grammaire hésitante et à la phonologie entièrement française »<sup>1</sup>.

Hag evit ar gomzourion ag ar rummad-mañ o dehe anavet un implij stankoc'h ag ar brezhoneg e-pad o bugaleaj eh eus un diover a c'herioù, doc'hpenn bout tapet plegoù ar galleg a-fet fonologiezh ha prozodiezh, èl ma ra LV1958 en hor standilhon. En tri rummad studiet eh eus daet skouerioù a implij gerioù pe bommoù gallek, èl bet resisaet er pennad kent. Lakaat a raomp an diglosiezh da abeg emdroadur sanadur ar c'hensonennoù rotek e gwenedeg-izel, ha sur a-walc'h e brezhoneg dre vras. Rak monet a ra ar sanadur àr dostaat doc'h an hani gallek dre goll an arlivioù brezhonek èl an /r/ kentañ pe ar c'hensonennoù logig. Un anadenn ha n'eo ket digenvez e-keñver ar yezhoù minorelet arall : taolennet eo bet get Etienne Hammel evit an okitaneg ivez da skouer : "*influence phonologique avec l'affaiblissement des traits traditionnels : "r" roulés, placement de la voix, au profit d'une gamme phonique plus proche du français.*"<sup>2</sup>. Kement-se a ra da Jean Le Dù hag Yves Le Berre monet betek goulakaat eh eus savet ur rannyezh vrezhonek nevez diàr levezon ar galleg :

« Notre hypothèse est que l'effacement du breton hérité d'une part, la présence constante et massive du français dans l'environnement social d'autre part, ont créé une nouvelle variété de langue, une sorte d'hybride dont seule la dimension lexicale empêche l'intercompréhension avec le français, tandis que la phonétique, la phonologie, la prosodie, l'intonation et la syntaxe s'alignent<sup>3</sup>. »

Ur levezon hag a zalc'hay da vonet àr-raok en amzer da zonet, get pouez ar mediaoù<sup>4</sup> ha digresk niver ar vrezhonegourion<sup>5</sup> : en ur ger, get pouez an diglosiezh. Gellout a raer goulakaat eh ay alofonennoù 'zo da get er rummad kentañ ha brasoc'h ar c'hemm c'hoazh e-keñver ar rummad 1892-1918. Er memes mod e c'heller goulakaat e oa krog an emdroadur-mañ e-raok penn kentañ an XX<sup>vet</sup> kantved ha ne vehe ket bet ag ar ruzennoù hugenn e Bro an Oriant a-holl viskoazh, me re logigel ivez èl er Vro Pourlet. Memes mar diskoueza bout bet gwir adal dibenn an XIX<sup>vet</sup> a-c'hwel doc'h disoc'h hor standilhon.

## Klozadur

1 LE PIPEC Erwan, 2013. op. cit., p.3.

2 HAMMEL Étienne, *Être occitan en 2003, Contemporary French Civilization*, University of Illinois, Summer-Fall 2003, Vol.XXVII, N°2, p.297-320.

3 LE BERRE Yves & LE DÛ Jean, « Devoir et nécessité : à quoi sert le breton à ceux qui le parlent ? », *La Bretagne Linguistique*, 2016

4 « Si l'on caractérise les autres langues de France comme minorées et le français comme dominant, on s'attend à deux types d'écarts : l'utilisation incomplète de la langue dominante, l'utilisation incomplète de la langue dominée irrésistiblement sur les normes du français médiatique », SAUZET Patrick. *Écarts entre compétence et pratique*. Georg Kremnitz, Fañch Broudic, et alii. Histoire sociale des langues de France, PUR (Presses Universitaires de Rennes), pp.87-95, 2013.

5 BROUDIC Fañch, WAKEFORD Pascale, 2018, op. cit.

Brezhoneg Bro-Gwened Izel a zo rannet e teir lodenn : Groe, Bro an Oriant hag ar Vro Pourlet. An div-mañ diwezhañ é vout bet studiet genomp eh eus bet lakaet àr-wel an diforc'h a sanadur etreze o-div e penn kentañ an XX<sup>vet</sup> kantved. Daou rummad sanadur ar c'hensonennoù rotek a zo bet merchet e mod-se get ar gomzourion ganet etre ar blez 1892 hag ar blez 1918 ; ur rummad sanadur evit pep paou. Brezhonegourion ar Vro Pourlet é c'hober get kensonennoù logig liessort (dre strakal, dre fraoñval, dre dostaat) ha re Bro an Oriant é c'hober kentoc'h get kensonennoù hugenn (dre daravat, dre fraoñval). Perzhioù boutin a gaved er sanadur newazh, just-èl ar gensonenn ouel divouezh er c'houlpad /rh/ dibenn hag ar fed ma kleved un distagadur etre /r/ ha /h/ en degouezh /BrhB/ en daou baou. Memes tra get sanadur un /r/ divouezh en degouezh /rB/, pezh a raomp an /r/ kentañ anezhoñ, un alofonenn glokaus da-neuze. Strivoù a c'heller notenniñ a-berzh lod a gomzourion ar Vro Pourlet evit hugennaat o sanadur, pezh a gasa da stummoù bihanaet o c'hensonennoù rotek pe d'o mutadur a-wezhadoù. Mes d'ar liesañ bras e choma stag sanadur ar rummad 1892-1918 doc'h patrom ar brezhoneg en divizoù gallek. Adal achumant ar Brezel Bras tre betek ar blezioù 1920 e ta komzourion é terc'hel da sanadur boas o bro. Mes ar re ganet troioù ar blez 1930 hag àr-lerc'h a ra adal neuze get kensonennoù hugenn en daou baou. Kement-se a ziskoueza emañ aet patrom saniñ Bro an Oriant d'ar Vro Pourlet, pezh a goucha get ur sanadur tostoc'h doc'h ar galleg ivez. Gellout a raer goulakaat eh a an emdroadur-mañ a-du get ar strivoù bet meneget er rummad kent ha doc'h an diglosiezh é kreskiñ àr-goust ar brezhoneg adal achumant an Eil Brezel Bed. Get ar rummad komzourion ganet etre 1919 ha 1943 e vercher un emdroadur er sanadur dre ma ta ar c'houlpad /rh/ da gendeuziñ ingaloc'h en degouezh /BrhB/, e stumm ar ruzenn darzh divouezh d'ar liesañ. Get ar gomzourion bet ganet adal ar blez 1944 e c'heller notenniñ un troc'h en treuzkas e-keñver ar rummadoù kent : pe o deus desket a-zarn dre greskiñ en ur gevredigezh c'hallekaet, peotramant àr an oad, pe c'hoazh a-vihanik mes get kerent hag o doa desket àr an oad o-unan. Lies a-wezh e raont get kensonennoù hugenn èl ar rummad kent mes get nebeutoc'h a arlvioù c'hoazh : koll talvoudegezh an /r/ kentañ, divouezhadur stankoc'h ar c'hensonennoù rotek, sanadur an /r/ dibenn en degouezh /Kr/, da skouer. Lies-kaer e ta sanadur ar brezhoneg da vout par doc'h an hani gallek memes get tud desket hag a ray get kensonennoù rotek arall e saozneg, da skouer. Strivoù a vercher ag o ferzh ur sort : lod a gomzourion ar Vro Pourlet a ra un tammig get kensonennoù logig, èl ma klasked o hugennaat kant vlez e-raok er memes parrezioù. Un anadenn nevez a gaver get ar rummad-mañ a zo



degas un diforc'h a sanadur doc'h ma kaner pe ma komzer, pezh a staga ar c'hensonennoù logig doc'h ur live-yezh resis : kani an arzoù. Un emdroadur a c'heller empentiñ bout hañval dre Vreizh-Izel a-bezh ha n'eo ket e Bro-Gwened Izel hepken. Mes kement-se a choma da vout studiet a-dostoc'h c'hoazh. Àr tachenn ar sokioyezhoñiezh e c'hellod klask kompren perak eh eus bet dalc'het da c'hober get ar gensonenn logig dre strakal dre ganal get meur a ganour brezhonek ; perak e talc'ha bed an embann brezhonek da c'hober get arouezenn ar gensonenn logig dre fraoñval dre hengoun evit sevel e c'heriadurioù. Rak doc'h an tu arall eh eus daet àr-wel ur vezh stag doc'h an daou sanadur-mañ e-touesk ar vrezhonegourion a-vremañ, un abeg a c'hoaperezh e diabarzh ar gumuniezh yezh doc'h ar seblant. E-mesk an emdroadurioù meur a zo bet e brezhoneg e-kerzh an XX<sup>vet</sup> kantved e c'heller menegiñ ar c'haozoù nevez savet diàr gerioù kembraek, get ar pal keltiekaat ar brezhoneg. Mes un dra bennak n'eo ket bet degaset àr un dro gete newazh : sanadur kembraek an /r/ enne, tost-kar moarhat doc'h ar brezhoneg komzet er memes koulz. En e ganenn « Tregont Vlez ' zo » e verche Gilles Servat e souezh é welet tud yaouank é vonet e brezhoneg divezh hag é klevet ar yezh er mediaoù kement èl er skolioù : ha ma ne vehe ket achu get ar vezh e gwirionez ? Doc'hpenn bout ar galleg da yezh-vamm e tiskoueza bout diaes d'an nevezvrezhonegourion krediñ monet get ar fonologiezh, ar brozodiezh vrezhonek. Ha kensonennoù rotek o zud-kozh, pe o zud-kuñv.

## **Levrlennadur**

## 1. Studiadennoù

BARRÉ Ronan, *Les langues celtiques / entre survivance populaire et renouveau élitiste ?*, Presses Universitaires de Rennes, Rennes 2, 2006.

BROUDIC Fañch, WAKEFORD Pascale, *Les langues de Bretagne ; Enquête sociolinguistique*, TMO Régions, 2018.

CALVEZ Ronan. *La Radio en langue bretonne : Roparz Hemon et Pierre-Jakez Hélias : deux rêves de la Bretagne*. Rennes : Presses universitaires de Rennes, 2000.

CHEVEAU Loïc. *Approche phonologique, morphologique et syntaxique du breton du Grand Lorient (basvannetais)*. Linguistique. Université Rennes 2, 2007. Français. tel-00189941v2

CHEVEAU Loïc, *Le r fort initial en breton. Colloque Actualité de la recherche sur le breton et les langues celtiques - Rencontre de jeunes chercheurs*, Juin 2011, Paris, France. ⟨halshs-00626022⟩

CRAHÉ Maxime-Morvan. *Le breton de Languidic : étude phonétique, morphologique et syntaxique d'un sous-dialecte du breton vannetais*. Linguistique. Université Rennes 2, 2013. Français. NNT : 2013REN20062. tel-00976584

CRAHÉ, Maxime-Morvan, « Le breton pourlet », *Pays Pourlet – Chants et musiques du pays Pourlet*, Roazhon, Dastum, 2021.

ELUDUT Jean-Paul, « Le Pays Pourlet », *Pays Pourlet – Chants et musiques du pays Pourlet*, Roazhon, Dastum, 2021.

HAMMEL Étienne, *Être occitan en 2003, Contemporary French Civilization*, University of Illinois, Summer-Fall 2003, Vol.XXVII, N°2.

LE BERRE Yves & LE DÛ Jean, « Devoir et nécessité : à quoi sert le breton à ceux qui le parlent ? », *La Bretagne Linguistique*, 20 | 2016, 147-160.

LE DÛ Jean, *Nouvel Atlas Linguistique de Basse-Bretagne*, CRBC, Brest, 2001.

LE DÛ Jean, *La birpartition de la langue bretonne : quelques questions sur la zone vannetaise*, Centre de Recherches Bretonnes et Celtiques, Brest, 2003.

LE PIPEC Erwan, *Les trois ruptures sociolinguistiques du breton*. International Journal of the Sociology of Language, 2013 (223). <https://doi.org/10.1515/IJSL-2013-0047>

LE PIPEC Erwan, *Etude pluridimensionnelle d'un parler : description, émergence et aspects sociolinguistiques du breton de Malguénac*. Linguistique. Université Rennes 2, 2008. Français. tel-00335105

LE ROUX Pierre, *Atlas Linguistique de Basse-Bretagne*, Rennes, 1927.

McKENNA Malachy, *The Breton of Guemene-sur-Scorff, part I*, in *Zeitschrift für celtische Philologie*, 1976.

McKENNA, Malachy, *A Handbook of Modern Spoken Breton*, Tübingen: Max Niemeyer Verlag, 1988.

SAUZET Patrick, *Écarts entre compétence et pratique*. Georg Kremnitz, Fañch Broudic, et alii. *Histoire sociale des langues de France*, PUR (Presses Universitaires de Rennes), pp.87-95, 2013, 978-2-7535-2723-2. fihal-00990638

## 2. Abadenn radio

LE BOZEC, SERGE. *Breton bas-vannetais : comment prononcer le « r » ?*. Pikouze, dibikouze. Radio Bro Gwened. 03 a viz Genver 2020. 30 mn.

## 3. Lec'hiennoù internet

ISOTALO Peter, UCLA Phonetics Lab Archive, dijabl er chomlec'h-mañ : <https://www.ipachart.com/>, 2003

HEGGARTY Paul & RUNGE Jakob, *Sound Comparisons: Exploring Diversity in Phonetics across Language Families*. Max Planck Institute, Munich, 2019. (Dijabl en-linenn amañ : <https://soundcomparisons.com>)<sup>1</sup>

## 4. Levrioù (geriadurioù, yezhadurioù...)

AR BORGN Herri, *brezhoneg ar Skorv, trésors parlés du val de Scorff*, Montroulez, Skol Vreizh, 2011.

AR MENTEG Turiaw, *Dastumad gerioù a rannyezhoù ar gevred / dictionnaire de vannetais breton-français*, Hiziv An Deiz, 2007.

AR MERSER Andreo, *Ar Geriadur, dictionnaire breton-français / français-breton*, Emgleo Breiz, 2009.

BOCHÉ Albert & LE RUYET Jean-Claude, *Le breton, des dialectes à la langue écrite*, Skol Vreizh, Morlaix, 2019.

CHEVEAU Loïc, *Nouvelle grammaire bretonne du dialecte de Vannes*, éditions Label

---

<sup>1</sup> *Meneg en-linenn evit an daveiñ : The Sound Comparisons Website* : Heggarty, Paul, Aviva Shimelman, Giovanni Abete, Cormac Anderson, Scott Sadowsky, Ludger Paschen, Warren Maguire, Lechoslaw Jocz, María José Aninao, Laura Wägerle, Darja Dërmaku-Appelganz, Ariel Pheula do Couto e Silva, Lewis C. Lawyer, Jan Michalsky, Ana Suelly Arruda Câmara Cabral, Mary Walworth, Ezequiel Koile, Jakob Runge & Hans-Jörg Bibiko. 2019. *Sound Comparisons: Exploring Diversity in Phonetics across Language Families*. (Available online at <https://soundcomparisons.com>, Last access on 2022-09-03.)

LN, 2017.

DAVALAN Nikolaz, *Brezhoneg / méthode de breton / hentenn ouplan 1*, Skol an Emsav, 2017.

DELAPORTE Raymond, *Geriadur brezhoneg-saozneg, english-breton*, Mouladurioù Hor Yezh, eil embannadur, 2006.

DENIS Gwendal, LE BIHAN Hervé, MÉNARD Martial, *Le breton pour les nuls*, Editions First-Gründ, Paris, 2009.

DENIS Gwendal, LE BIHAN Hervé, MÉNARD Martial, *Guide de conversation, le breton pour les nuls*, First éditions, Paris, 2019,

DE ROSTRENEN Grégoire, *Dictionnaire françois-celtique ou françois-breton*, Julien Vatar, imprimeur-libraire. Rennes, 1732.

FAVEREAU Francis, *Geriadur ar brezhoneg a-vremañ, brezhoneg / galleg, galleg / brezhoneg, Dictionnaire du breton contemporain bilingue*, Skol Vreizh, 1992.

FAVEREAU Francis, *Geriadurig ar brezhoneg a-vremañ*, Skol Vreizh, 2001.

FAVEREAU Francis, *Geriadur godell ar brezhoneg a-vremañ, dictionnaire de poche du breton contemporain*, Skol Vreizh, Montroulez, 2017.

FAGON Christian & RIOU Yann, *Trésors du breton de l'île de sein, bredoneg ar gear, on teuzeur*, An Alarc'h embannadurioù, 2015

GROS Jules, *Le trésor du breton parlé / dictionnaire breton-français des expressions figurées*, Emgleo Breiz – Brud Nevez, 1989.

GUILLEVIC A. & LE GOFF P., *Grammaire bretonne – du dialecte de Vannes*, Vannes, librairie Lafolye Frères, 1902.

HELIAS Per Jakez, *Dictionnaire breton*, Emgleo Breiz, Garnier, Paris, 1986.

HEMON Roparz, *Grammaire bretonne*, Al Liamm, Brest, 1975.

HEMON Roparz, & HUON Ronan, *Dictionnaire breton/français, français/breton*, Al Liamm, 2005.

HERRIEU Loeiz, *Le breton usuel – dialecte de Vannes*, Dihunamb, an Oriant, 1934,

KALVEZ Tugdual, *Brezhonegomp ! Parlons breton !*, Skol Uhel Ar Vro, 2013.

KEMENER Yann-Ber, *Je parle breton, Brezhoneg prim ha dillo*, Skol Vreizh, Montroulez, 2002.

KERGOAT Lukian, *Les 1000 premiers mots breton*, Embannadurioù Skol an Emsav,

Roazhon, 2010.

KERRAIN Mark, *Ni a gomz brezhoneg*, 2e édition revue et augmentée, Ti Embann ar Skolioù, 2007.

KERVELLA Divi, *Assimil, le breton / brezhoneg*, collection sans peine, Chennevières-sur-Marne, 2005.

KERVELLA Divi, *Guide conversation breton de poche*, Assimil, 2011.

KERVELLA Frañsez, *Yezhadur bras ar brezhoneg*, Al Liamm, Brest, 1995.

LE BAYON l'Abbé A-M, *Grammaire bretonne du dialecte de Vannes*, Imprimerie Lafolye, Vannes, 1878 (réimpression offset Mouladurioù Hor Yezh, 1986).

LE DÛ Jean, *Le trégorrois à Plougrescant / dictionnaire breton français*, Emgleo Breiz, 2012.

LEON Katell & AUVRIGNON Maud, *Help ! Mon enfant parle breton*, Le Temps Editeur / An Amzer embanner, 2018.

LE RUYET Jean-Claude, *Bien prononcer le breton d'aujourd'hui*, Skol Vreizh, 2012.

LOTH Joseph, *Dictionnaire breton-français du dialecte de Vannes de Pierre de Chalons réédité et augmenté*, Rennes, J. Plihon et L. Hervé, libraires-éditeurs, 1895.

MADEG Mikael, *Traité de prononciation du breton du Nord Ouest*, Emgleo Breiz, 2010.

MADEG Mikael, *Glossaire Molénais / Brezhoneg Molenez, aperçu du breton de Molène*, An Alarc'h Embannadurioù, 2021.

MÉNARD Martial, *Geriadur brezhoneg an Here*, An Here, 2001.

MÉNARD Martial, *Mon premier Dictionnaire breton-français*, Beluga / Coop Breizh, Speied, 2010.

RAYNAUDON-KERZERHO Maiwenn, *Kenavo ? Petites choses amusantes et étonnantes sur la langue bretonne et les Bretons !*, éditions Blanc & Noir, 2020.

TRÉPOS Pierre, *Grammaire bretonne*, Brud Nevez – Emgleo Breiz, 2001.

## **Stagadennoù**

Skeventel	Diweuz	Gweuz-dent	Dent	Logigoù	Drek-logigoù	Kilbleg
Dre fri	m	ɱ	ɒ	n		ŋ
Dre serriñ	p b	p̥ b̥	t̥ d̥	t d		t̥ d̥
Dre daravat	ɸ β	f v	θ ð	s z	ʃ ʒ	ʃ̥ ʒ̥
Dre dostaat	β̥	ʋ	ð̥	ʃ̥		ʃ̥
Dre froumal	B			r		•
Dre stlakat	ʋ̥	v̥		r		ʃ̥
A-gostez dre daravat				t̥ ʃ̥		•
A-gostez dre dostaat				l		l̥

Stagadenn 1: Lizherenneg fonetik etrebroadel, kensonennoù diweuz-kilbleg

Rak-staon	Staon	Gouel	Hugenn	Gargadenn	Ankoue	Tarz
	ɲ	ŋ	N			
	c ʃ	k g	q ɠ		ʒ	ʔ
ɠ ʒ	ç ʝ	x ɣ	χ ʁ	ħ ʕ	h ʕ	h̥ h̥
	j	ɥ				
			R		•	
					•	
	•	•				
	ʌ	l				

Stagadenn 2: Lizherenneg fonetik etrebroadel, kensonennoù rak-staon-tarz

Nann-skeventel hag arouezennoù all					
Klikoù	ɔ	l	l̥	ɸ	ll
Entarzh.	b	d	ʃ	g	ɠ
Dre strakal	p̥	t̥	k̥	q̥	s̥
			A-gostez all	ʃ̥	t̥
			Kendistaget dre dostaat	m w	ɥ
			Kendistaget dre daravat	h̥	
			Dre fic'hal	ts dz	tʃ dʒ
			Kendistaget dre serr.	k̄p̄ ḡb̄	ŋ̄m̄

Stagadenn 3: Lizherenneg fonetik etrebroadel, kensonennoù nann-skeventel hag arouezennoù arall